

# בישניו זאגזאנקע



AR YEODET

(A. Bocher)

# BLEUNIOU YAOUANKIZ

GWERZIOU ha ZONIOU

bet kurunet, kalz anê, gant

KEVREDIGEZ BROADUS BREIZ

hag an

« ASSOCIATION ARTISTIQUE

&

LITTÉRAIRE DE BRETAGNE »



## PRÉFACE

*Il y a loin de l'idée que pour la plupart nous autres modernes, nous nous forçons d'un poète, à celle qu'en concevaient les anciens.*

*Pour nous, trop souvent, il suffit, pour que nous baptisions un homme de ce titre, qu'il aie su aligner, plus ou moins heureusement, dans le silence du cabinet, quelques douzaines de vers chevillés tant bien que mal et riment à peu près entre eux. Quelle différence entre ce tortionnaire de la phrase, académicien congelé et l'hierophante inspiré, qui, pareil à une harpe mélodieuse frémissant aux vents multiples de la passion et des désirs, éclatait tantôt en imprécations fougueses, égalait par ses accents terribles les voix formidables des ouragans, et tantôt en un murmure incertain, en un gazouillis léger*

inventait des harmonies nouvelles, des chants d'une douceur infinie mélancoliques et tendres, échos terrestres des psalmodies seraphiques devant le trône de l'Éternel.

Les races en vieillissant, perdent cette sensibilité d'impression cette fougue de passion que l'on considérait dans l'antiquité comme la condition sine qua non du tempérament d'un poète, aussi, avons-nous maintenant, des fabricants de vers, mais bien rares seraient ceux d'aujourd'hui que les anciens eussent consenti à couronner du laurier des poètes et à reconnaître pour tels.

Si l'on veut trouver à notre époque compassée, quelques uns de ces hommes qui se rapprochent de l'archétype d'autrefois, il faut aller les chercher, chez ces peuples en qui la civilisation raffinée n'a pas encore étouffé la sensibilité de nature, qui ont gardé au milieu de notre époque de prose quelque chose de leur tempérament originaire, la verdure et la rusticité des mœurs primitives. Là, on est poète, parce qu'on pense comme on sent, qu'on chante et qu'on rythme comme on pense.

En France, pour les rencontrer, il faut faire attraction complète de la littérature officielle et fouiller jusqu'aux racines de l'arbre populaire, là où se sont conservés les parlars autochtones et où l'uniformité moderne n'a pas encore pu avoir raison des traditions et des coutumes.

Ar Yeodel me semble l'un de ces privilégiés. Il a eu l'heur de naître dans cette douce Cornouaille intérieure que le Braz a si bien décrite, pays agreste et simple où la rudesse de surface cache chez ses habitants une sensibilité profonde, une délicatesse extrême d'impression.

Nulle part ailleurs, la nature ne se montre sous des aspects plus diversifiés : tantôt sauvage et désolée, elle n'offre aux yeux que des rocs arides et des sommets dénudés, tantôt au contraire elle suspend aux flancs des ravines les plus opulentes frondaisons.

Cette nature et cette race expliquent Ar Yeodel, et sont sa raison d'être, comme Jaffrennou, originaire lui aussi du même canton, Ar Yeodel tient à ses morts par toutes les fibres de son être, et l'abstraire de son milieu natal serait s'exposer à ne le plus comprendre.

Je viens de citer Jaffrennou, rien à mon humble avis ne saurait vérifier mieux cette diversité infinie de notre race et de notre terre, toutes de contrastes incessants, que de trouver réunis dans le même berceau pour ainsi dire, deux tempéraments aussi dissemblables, disons le mot, aussi opposés que ceux de Taldir et d'Ar Yeodel.

Tandis que l'un semble se plaire aux abstractions d'une poésie philosophique, qu'il affectionne les images guerrières et se complait dans une rudesse voulue, faisant fi d'ordinaire de tout ce qui touche aux affections familiales et à l'amour, à ce point qu'un critique a pu dire que c'est à peine si l'on trouve dans toutes ses œuvres une centaine de vers d'amour, l'autre au contraire chante les joies de la famille, la beauté du sol natal, les penhères amoureuses, les fêtes populaires, les pardons et les assemblées. Ces fêtes du pays il les a courues toutes et nul ne les connaît mieux que lui, depuis Bulat jusqu'à Koz-Yeodel, nul non plus ne les dépeint avec plus de grâce.

Un seul point commun réunit les deux bardes, l'amour de la race et de tout ce que ce mot comporte, c'est-à-dire

la tradition, la langue et les coutumes. Quand il s'agit de défendre quoique ce soit du patrimoine national, alors la muse d'Ar Yeodet, oublie les idylles, elle devient aussi rude et fougueuse, et, comme celle de Jaffrennou, elle tonne contre les audacieux qui osent attaquer la Bretagne.

Comme il le dit lui-même dans son avant propos, ce furent les attentats de Combes contre la langue bretonne, qui lui révélèrent sa vocation poétique. Rendons grâce à Combes dont les efforts infructueux à détruire notre langue ont eu au moins le résultat de susciter un barde.


Enfin une dernière note caractéristique d'Ar Yeodet c'est que poète idyllique, barde national, il est aussi avant tout chrétien, et cela encore il l'a reçu de la tradition ancestrale. La foi, il l'a puisée sur les genoux de sa mère, il l'a apprise de son père ancien soldat du pape, il l'a vécue partout où il passa, à Duault ou il fut baptisé, à Saint-Servais ou à Koz-Yeodet dont il aima tant les traditions chrétiennes et bretonnes, qu'il voulut, lui Cornouaillais, prendre ce nom du Trécor comme titre bardique. Aussi ses vers sont-ils tous profondément imprégnés de l'idée chrétienne et catholique. Ar Yeodet ignore les fausses hontes et les compromissions, et ce n'est pas à lui qu'il faut demander de mettre ses convictions en poche crainte de déplaire à qui que ce soit. A ce titre je ne puis qu'approuver et louer sa franchise crâne.

Buffon a dit, le style c'est l'homme : à qui lira les Bleuniou Yaouankiz auxquelles ces lignes servent de préface, cette parole paraîtra profondément vraie. Toutes ces notes relevées comme caractéristiques d'Ar Yeodet, on les retrouvera dans ce volume, Ar Yeodet l'a

intitulé par modestie Bleuniou Yaouankiz, voulant peut-être faire savoir par là, qu'il contenait des poésies de début, mais, il l'a mieux nommé qu'il ne croyait, ce sont en effet des fleurs de jeunesse qu'il contient, non pas, parce qu'il leur manque quoi que ce soit pour être appréciées, mais parce qu'au contraire, elles ont de la jeunesse, la sève généreuse, la coloris éclatant, la fraîcheur et la délicatesse.

A. LAJAT.





## KENSKRID

*Da Zoue ez eo ma ine,  
D'am Breiz ma nerz ha ma bue,  
D'am Dousig koant ma c'harante !  
A. Y.*

Pa ve groet eul levr bennak eman ar c'hiz gant an oberour — herve ma zo lavaret d'in — d'ober eur c'henskrud evit lakât al levr neve dirak daoulagad al lenner.

Bezan zo oberourien ha na veint tam abed nec'het evit kavout danve eur c'henskrud. Evidon-me n'ouveau ket kaer petra skriva en penn ma levr... nemed ha displega 'rafen ennan d'am c'henvroiz penoz ha dre petore digare eo bet digouezet ganin skriva ha karout ar Brezoneg.

Siouaz, displega kement-se e vefe ober *politik*, hag ober politik — dreist-holl p'eman kement troad ar bolitikerien war hon goug, mar n'hon deus mui alan awal'h da huchal frankiz — ober politik, eme eur rum-tud, a zo eun torfed heuzus, zoken pa fell difenn hon Bro, hon Yez hag hon Fe, ken gwasket koulskoude...

Ma, nag e tigouefe d'in feuka enebourien ar Brezoneg..., c'houea tan ar gounar en kalon difennourien hon Yez, e pedin ané holl da drugarekât Komb-

koz — ya Komb-koz — mar zo hirie en Breiz eul levr brezonek ouspenn...

Ar rum kenta a lavaro, marvad : — Trugarekât Komb-koz... Fent a ret d'imp !

An eil rum, zouezetoc'h c'hoaz : — Trugarekât Komb-koz... An *difroket-se* !..

— Fe, ya 'vad, ma zud kez, ha goude !

N'eus droug abed a gement na servij d'eur vad bennak. Mar n'am c'hredet ket, chilaouet kentoc'h :

Eur zulvez, an deiou diwean a viz here 1902, e oan potr ar gêr. Goude bezan groet ma labour, da c'hortoz distro an dud eus an ofern-bred, en em lakis da lenn an *Electeur des Côtes-du-Nord*, kazeten ma c'henvreur G. Corfec, « Bruk-Lann ». A boan krog da lenn, e vervas ma gwad em gwaziou hag e kouezas ar gelaouen eus tre ma daouarn.

— Petra, petra ! emeon..., Komb milliget... Ar potr a c'hiz koz... ber, ber e ziouc'har, dôn, dôn e gof... A fell d'ezan difram diganimp hon Yez... Moug ar Brezoneg dre lezennou kasonius ! Pe vin zalvet ! Dampred vo eskern kement diaoul zo 'barz an ifern ha kroc'hen Komb-koz war ar marc'had... Ar Brezoneg a vevo ! Hag ar Vretoned, pennou-kaled, na blegfont biken... Nan, biken, kentoc'h mervel !

—o—

— Na blegfont biken... Kentoc'h mervel!... a zo komzou kaer, a dra zur... Mes penoz sklerijenni ar Vretoned ? Penoz digerri d'ê o daoulagad ? Penoz rei anaoudegez d'ê eus eun urz ken heuzus ?

Hep mar, dre Vreiz abez e vije skuilhet eur mór a liou, skrivet millierou ha millierou a bennadou-skrid nerzus hag entaned eneb da Gomb-teo... Mes ar bobl marteze, a chomche dizeblant, o vezan ne zavche mouez krenv awalc'h abed da ziskuilh d'ezan grevusted ar fallente...

Ar pezh a fellfe d'ar bobl e vefe eur zonig bennak, ber, lem ha flemmus; rak ar rimadel a chom en spered ar Breizad, en em gizell en e galon evel al lizeren er menerezh...

Mes piou a zavo eur zón evelse?— Jezus, ma Doue, emeon, n'eo ket me bepred... Karout a ran ma Breiz ha karout anei kalz, mes biskoaz n'am eus skrivet, na birviken, marvad, na skrivin eur gir brezonik.

Hag ar gounar a greske em c'hreiz... Ha sonj ar zon a drubuilhe ac'hanon...

Goude mern, tec'het an holl d'ar gousperou, e chomen ma unan adarre hag ar sonj terziennus a vroude ac'hanon bepred mui-ouz-mui...

Skwiz, e tapis pluen ha paper, hep gouzout nemeur petra a c'hoantan... Tra zouezus! eur pennadik goude e oa *Kentoc'h mervel* war droad, ha, biskoaz zon n'am eus groet diboaniosoc'h...

Aboue am eus kendalc'het da garout ha da skriva ar Brezoneg. N'on ket bet ma unan, a drugare Doue. Urz Komb an eus dihunet eur bern Bretoned ha lakât da c'henele eur bern Barzed. Awalc'h eo bet d'ezan c'hoantât labea Breiz-Izel evit gwelet kerkent eur vanden emgannerien o tiredek da zifenn o Mam-Bro, eur vanden delennourien o tont d'he c'hana hag eur

vanden vugale karantezus o tont d'he frealzi...

Setu aze, ma c'henvroiz ker, penoz e teu an droug da serviji d'ar vad...

—o—

Daoust da ze, paneved pedennou start, lizerou niverus hag aliou stank ma mignoned, n'am ije birviken kredet ober eul levr gant traou ken divalo...

— « N'eus netra a zivalo a gement a deu eus ar » galon, e lare d'in n'eus ket pell eur c'henvreur (1) » karet... Da zoniou, da werziou n'int ket groet, » dra zur, evit gonit arc'hant... Diwanet int bet en ez » spered ha tec'het eus da galon evel ma tiwan ha ma » zav en hon zraouiennou ar bleuniou-ze a welomp » d'an neve-amzer o tispaka d'an heol vintin hag a » deul dre ar vro zeul muioc'h a c'houez vad ma 'z int » gwelloc'h a ze kuzet... Ouspenn ez int leun a fe, leun » a garante-bro, birvidik a deneridigez ha karget a » sonjou uhel... Tec'hel a reont eus ar galon hag, ouz » o lenn, ec'h efont war eon d'ar galon.

» Netra enné n'hall strafilha ar spered ar muian » anwazus, na feuka an diskouarn ar muian kizidik... » An holl a c'hall o lenn, koz ha yaouank, braz ha » bihan... Kutuilh ané 'ta, gra gantê eur bokad ha, » hep damant, kinnig anezan d'ar Vretoned... Dige- » meret mad e vo ! »

Warlec'h hir-varc'hata am eus zentet, hag e teuan hirie da ginnig d'am c'henvroiz ar bokad-ze dindan an hano a *Vleuniou Yaouankiz*.

Perak *Bleuniou Yaouankiz* ?

O vezan ne gaven hano abed dereatoc'h. Evel malavar (1) E. A...

ma c'henvreur, ma barzonegou holl a zo groet em yaouankiz. Groet int ganin en kreiz an tân-ze a ra d'an den yaouank nijal gant al levez, tridal gantar blijadur ha kemer evel ma teuont ar vue, an dud hag an amzer... Groet int ganin enpad an amzer-ze ma welen pep tra kuzet dreg eur voren a hunvredigez dispar, ma welen pep tra o vouse'hoarzin hag o lavaret : — « Na brao eo beva didrubuilh pa ve ar galon direbech ! » Groet int ganin o chilaou an avel o vonskana er gweuhel ; o klevet an ezen flour o tremen dre ar balan hag o luskellât an ine gant eun diskan klemmus ; groet int ganin dirak hiboud sklinton ar wazig dour hag o klevet bep mintin ha bep noz kân dudius al lapousedigou ; groet int ganin en eur hunvreal da gaerder ma Bro, d'he furnez ha d'he zantelez gwechall...

Groet int ive dindan nerz ar gounar zakr a grog em c'halon gristen pa welan gwaskan ar Fe, moug ar Frankiz, muntri al Lealded ha flastra ar Wirione. Groet int ganin gant ar c'hoant da zidalla ma c'hrenvroiz ha d'ober d'ê kerzet war roudou hon C'hendadou... En eur gir, groet int ganin evit Doue hag evit ma Breiz karet !

Rak an diou garante-ze eo a ra d'am c'halon mouskana gant an avel, hirvoudi gant an ezennig, kana gant al lapoused ha gouela, damanti war yenien, dizeblanter ha, siouaz, kasoni an bed a vremen...

Laret am eus gouela ha damanti... En gwirione, daoust d'eur spered hunvreer ha d'eur galon dinec'h, meur a wech, evel kalz a re-all, am eus kavet spern dindan ar bleun kaeran ; meur a wech — evel ma lavar

unan eus ma mignoned — eo bet digouezet d'in azea evit lemmel eus ma zreid pikou lemm ha kaled, hadet gant tud fall dre henchou ar vue...

Ma flijadur, ma foan, ma levez eo o deus a bep eil stennet kerden ma Zelen. Ze zo kiriek e kaver em *Bleuniou* a bep seurt zoniou ha, dreist-holl, zoniou yaouankiz.

Ma zoniou yaouankiz... Nag a bennad evurusted n'am eus ket bet oc'h ober anê !

Nag a wech n'on ket bet chomet ma-unan da hunvreal en kreiz ar c'hoajou dôn, eus sklerijen al loar, pe c'hoaz war riblou karet ar môr o sonjal en eun dousig bennak diwanet du-hont... du-hont, en eun draouien-nig penc'hus a Vreiz !

Ma zoniou yaouankiz ! Ouz o lenn pep den yaouank a c'houzanvo aliez o hadveva en e ziarbarz meur a bennad eus e amzer dremenet, pennadou tarnijet pell a vo, marteze, mes war an töl dihonet ken beo, ma lezfont en e galon, evel pa lavarfen eur c'houez vad amzeriou diagent... Ouz o lenn e lavaro : — « Me ive am eus bet karet ! »

—o—

Ma *Bleuniou Yaouankiz* o deus c'hoaz eun digare-all. Moullet int, dreist-holl, evit rei d'an dud yaouank peadra da gana, rak, evel an evn, an den yaouank a renk kana...

Roomp d'ezan eta zoniou brezonek, zoniou fur ha tener war an dro, hag an den yaouank na breno ken war varc'hallac'h ar c'heriou braz, an hanter kant



loustoni a gav, evit daou wenneg, etre daouarn gwer-  
zerien Pariz.

Ha breman, kerz ma levrig, kerz da gas d'am  
c'henvroiz ma gwella mennoziou en doujanz Doue  
hag en karante Breiz-Izel...

AR YEODET.

Kerbernez, 2 c'houevrer 1909.



## KINNIG

War don : *An Hollalka.*

Kutuilhet ganin ma *Bleuniou*, na petra d'ober ganté ?  
N'hallan ket, hep bezan digar, n'hallan ket-miret ané ;  
Ar pezh zo en tu-hont da red a zo dleet d'ar bewien,  
Diredet holl, o Bretoned, deut da glask peb a vleuen !

Ma *Bleunion* a zo kutuilhet dre hent-treuz ar vuegez,  
Gouzout kaer a ran n'o deus ket nemeur a dalvoudegez ;  
Mes roet d'eze, koulskoude, roet digemer gwirion,  
Ar Barz a ginnig ané d'ac'h o c'hinnig a greiz kalon.

O c'hinnig a ran da gentan ha gant doujanz da Zoue ;  
Mar d'on ganet en Arvorik, d'Ezan mil gwech trugare !  
N'ankouain ket e Vam zantel, hon Mam ar Werc'hez Vari,  
Ra vefont en Breiz da viken meulet, karet en pep ti !

Beleien ger, tud a spered, gwir noblansou koz hon Bro,  
D'am *Bleuennou* tener, tener, digoret ho torojo ;  
Chilaouet o galv truezus, int a laro d'ho kalon :

— « Dalc'hit, dalc'hit d'ar Brezoneg, markarit c'hoaz ar Breton »

Tud karet diwar ar maeziou, c'houi, labourerien douar,  
An darnvuian eus ma *Bleuniou* a zo d'ac'h-hu, c'houi hen goar,  
Eveldoc'h am eus bet ive redet roz ha lanneier,  
Ha ma *Bleuniou* — hen goût a ret — eo bleuniou ho parkeier...

Klaskerien-vara, tud izel ; micherourien, tud a boan,  
Kavout a refet em *Bleuniou* evidoc'h meur a ziskân :  
Eur bannac'hig tân en oaled a ra vad en-kreiz ar goanv,  
Eur ban-heol a-dreuz d'ar prenestr a ro kennerz d'an den klanv !

Yaouankizou ma Breiz-Izel, yaouankizou evurus,  
Dastumet buhan ma *Bleuniou* : evidoc'h int niverus ;  
Kaset ganac'h a vriajou, deut goude c'hoaz war ho kiz,  
Kanet dre-holl, dre-holl kanet... Bec'h d'ar *Bleuniou Yaouankiz!*

Kenvreudeur, leun a drugare, Barzed dispont Breiz-Vihan,  
Devezour an eur diwean a ginnig d'ac'h freuz e boan ;  
Evit e lod hen a zigas da di Breiz e ven dister,  
Ravo heuilhet e skouergant kalz, ma savfomp eur c'hastell kaer.

Tarnijet eta, ma *Bleuniou*, tarnijet a-us da Vreiz,  
Laket en kalon peb Breizad c'houez vad, levez e a-leiz !  
Ra zeuio mibien an Arvor etrezê d'en em zikour,  
Sed ar pezh a c'houlenn hepken diganac'h hoc'h oberour.

Ha mar tigouefe d'ac'h, *Bleuniou*, ober droug d'an disteran,  
Pedet-han d'am digarezi : n'eus den didech er bed-man ;  
Oh ! pedet-han, en han Doue, pa glevfet e vin maro,  
Da skuilh war ma be eur beden, eur beden en giz *Bleunio*...



## HANO AR BARZ

D'AN AOTRO GOASDOUE, KURE GWENGAMP.

En tu-all d'ar mor pell a oa  
An heol a oa kuzet,  
Hag en eun nosvez ar gaera  
Al loar a oa zavet ;  
Moueziou klemmus ar c'haouennou  
En noz na glevjed ken,  
Sioul ha didrouz dre an henchou  
E kerze an Awen (1).  
Neuze war douar Lexobi  
Lez-hanvet Ar Yeodet,  
Deus forz bale, ken dizoursi,  
Me a zo 'n em gavet ;

(1) La Muse.

Redet am eus lannierou  
 O klask lutined-noz,  
 Kannerezed ha spontailhou :  
 Traou eus an amzer goz !

Skwiz da vad o redek, ha faez,  
 Pa na gavis netra,  
 E teuis da Draez-ar-Werc'hez  
 Goude da ziskwiza ;  
 An amzer oa brao, dous meurbed,  
 Eun ezen ar floura,  
 En eur rei dudi d'am spered  
 Re d'am c'halon kana...

War ar mor braz, bannou al loar  
 Deule o sklerijen  
 Pebez evurusted dispar !  
 En dro d'in na oa den...  
 Trouz al lanô war ar bili  
 Re d'in trei ma zellou,  
 Ha mouez ar mor o hirvoudi  
 Gleven 'barz an aochou...

Gwelet a ren trezek ar Bae  
 Tour, gerrek *Kinier-Bel*

Ha dirak *Kinier-Dost* ive  
 E welen *Beg-Seruel* ;  
 Tostoc'h d'in c'hoaz *Poull-ma-Dogan*  
 — Fentusât da hano ! —

Zelle ouz an *Taro-Bihan*  
 Gant eun êr divalo...

Dirak ma zellou evurus,  
 E welen er pellder  
 Sklerijen an tour-tân, lintrus,  
 O henchal levier ;  
 Ar môr en plegiou e zae wen,  
 Gant al loar arc'hantet,  
 O tispak kant mil stereden  
 'N eur vont ha 'n eur donet...

Oan evelse eur pennad oa,  
 Kollet 'barz ma sonjou,  
 Pa welis... N'ouveen petra  
 O tont war 'r gwagennou...  
 Pell e oant c'hoaz, mes da welet  
 E teuent war-zu d'in ;  
 — Daoust na petra ez int ?... Teuzed !  
 ... Doue, penoz a rin ?

Tostât a rent, ya, ken founus.  
 Hag eul lestr war ar môr  
 Pa c'houe mat an avel nerzus.  
 En e weliou digor ;  
 Ma bleo war ma fenn a zave,  
 Boemet oan gant ar spont,  
 Ma c'halon em dreiz a lampe,  
 N'ouveen pelec'h mont...

— Henvel beo int eus skeudennou,

Gwisket ez int en gwen ;

Marteze ez int zeblanchou ?

...Gwall hir eo o banden ! —

Mes petra 'ta a welan-me,

Kollet 'm eus ma spered ?

Gwir awalc'h eo, o ma Doue,

'Ve ar re-man Barzed ?

O ma Jezus ! netra wiroc'h !

O gwelet ran breman

Dirak ma daoulagad kaeroc'h :

Eget an dra gaeran ;

Holl en o dorn deo e talc'hont.

Eun delen alaouret,

Ha war o dremmou e tougont.

Liou an evurusted.

Digouezet ez int dirakon,  
 En o zav int chomet ;  
 Mar n'am euz ken nemeur a aon,  
 Gante on zouezet.  
 Sellet kalz a reont ouzin  
 Hag oute me a zell...  
 Unan ane a dosta d'in,  
 Hen ken kaer hag eun el !

Elec'h unan, vel ar re-all,

Hen a zoug diou delen,

Diou delennig ken koant hag all

An eil evel eben ;

E zaoulagad a zo skedus,

E zellou a zo dôn,

Gant e gomz gwirion, entanus

E c'hone ma c'hallon :

— « Breizad, emezan, 'n eur sevel e vouez,  
 » Deut omp d'az kavout da Draez-ar-Werc'hez,  
 » Deus an amzer goz ec'h omp ar Varzed  
 » Karout reomp c'hoaz bro ar Vretoned,  
 » Klevet hon deus bet dimeus hon be don  
 » Hekleo ar c'horn-boud en Breiz o tiston,  
 » Klevet on deuz bet dindan troad ar Gall  
 » Hon broïg Arvor o klemm vel gwechall !...

- » Hag omp bet savet dimeus hon be yen  
 » Evit starda c'hoaz kerden hon Zelen...  
 » Siouaz ! ar maro kri ha didrue  
 » 'N eus war hon diou-yeuz laket eun alc'houe ;  
 » N'hallomp biken mui, en despet d'hon c'hoant,  
 » Ober d'hon Zelen kana t'êr ha drant !  
 » Kemer 'ta houman, breizad a galon,  
 » Gra d'ei zon bepred, dispont ha hep aon  
 » Evit da Zoue, 'vit da Vro garet,  
 » Ha dreist-holl evit da Yez binniget !  
 » D'ar gwir Vretoned argaset 'n o Bro,  
 » Digas breman sonj dimeus o zado,  
 » Lavar d'ê penoz Gouenn kaer ar C'helled  
 » N'an eo bet biskoaz gant ar Gall trec'het  
 » En anzav eo red, kri eo ar brezel,  
 » Krozal ra ar môr, krenv eo an avel...  
 » Mes kaer 'n eus al lestr bezan horjellet  
 » Derc'hel a ra penn d'ar môr kounaret...  
 » Ar roc'h a zo Gall, mes eur levier mad  
 » A zalc'h stard ar stur : bezan eo Breizad !  
 » Bezan eo Breizad, bezan ez eo Barz,  
 » E yez eo ar stur pehini a harz  
 » Al lestr dont da goll, da laret : **Ar Vro.**  
 » Holl o labourat en dro d'ezan zo

- » Martoloded vad ha gwir Vretoned,  
 » Tud t'êr, a galon, tud a lealded !  
 » Gant an unvaniez, en despet d'ar Gall,  
 » Al lestr a gerzo daoust d'am amzer fall ;  
 » Bez eta dispont, labour 'vit da Vreiz,  
 » Goude gwall amzer ar mor a deuy reiz ;  
 » Dibab « eun hano », kân war da delen  
 » Vel ar Varzed koz : — Breiz da virviken ! »

P'en evoa da gomz ar Barz koz achu,  
 E kinnigas d'in an Delen dustu ;  
 Kemer 'ris anei, evurus meurbed,  
 Hag e laris : — N'am eus hano abed,  
 Hogen pa fell d'ach ouzoc'h me zento  
 Ha diwar vreman am o eun hano :  
 A-uz d'hon fennou a zo eur chapel,  
 Savet en enor d'ar Werc'hez santel,  
 Eur chapelig koant am eus kalz karet,  
 En pelec'h ive am eus bet pedet !  
 Gwechall bep mintin, bemnoz em farkou,  
 Arm sklintin he c'hloc'h dreist d'ar meneou,  
 Lake ma c'halon dalc'hmad evurus  
 Pa zone ken drant vit an Angelus...  
 Enni d'ar Werc'hez, de ma Fask-kentan,  
 (Oh ! kaerât de oa hennez, pa sonjan !)

Me a ris al lê d'He c'harout dalc'hmad  
 Ha da heuilh bepred evel eur Breizad,  
 Al lezen gristen, gwir lezen Doue  
 'N eur difenn ma Bro, 'n eur zouten ma Fe  
 Hano ar chapel ez eo : Ar Yeodet,  
 Hag an hano-ze a garfen kavet...


— « Ra vo groet, kenveur, eus da garante,  
 » Laras ar Varzed en eur vouez neuze,  
 » Harp eta bepred da Zoue, da Vrc,  
 » Hon gwellan mennoz... Ha d'it : Kenavo ! »

Evit ma Doue ha ma Bro !  
 E laris ive d'e...  
 Kerkent kerden o zelenno  
 'N eur dridal vouskane  
 Eur ganaouen ken dudius,  
 Ken kaer ha ken tener,  
 Ma laren : amzer evurus,  
 Perag out-te ken ber ?

Pa zistrois ouz ar Varzed  
 E oant holl arri pell,  
 O skeudennou skedus meurbed  
 Deuze dirak ma zell ;

O gwelet ris c'hoaz eur pennad  
 Hevel ouz eur wabren  
 Ha goude-ze ma daoulagad  
 Na welas netra ken...

Glac'haret, rannet ma c'halon  
 E tihunis neuze,  
 Hag a welis gant kalz eston  
 Am oa groet eun hunvre ;  
 Daoust da gement-se koulskoude.  
 En amzer da zonet,  
 Ma hano-Barz diwar hirie  
 A vezo : Ar Yeodet





## N'anveez ket, Breiz ?

D'AN AOTRO HA D'AN ITRON BELBEOC'H, LANDERNE.

N'anveez ket er bed eur vro gaer ha dispar,  
Henvel en pep stum eus Baradoz an douar ?  
Eur vro en pehini e sav an heol lirzin,  
War behini ive e kuz en eur c'hoarzin ?  
— Ar vro-ze eo ma Breiz-Izel,  
Hi a luskellas ma c'havel !

N'anveez ket eur vro a ro d'he bugale  
Eur vagadurez yac'h ha levenez noz de,  
En pehini n'an eus nemed evurusted,  
En p'hini ar yec'hed a zo trec'h d'ar c'hlenved ?  
— Ar vro-ze eo ma Breiz-Izel,  
Hi eo ma mam, me he bugel !

N'anveez ket eur vro ha hi hanter gousket,  
Kelc'hiet gand ar mor braz ha gantan luskellet ;

N'ANVEEZ KET, BRIEZ

11

N'anveez ket anei gant he c'hoajou don, don,  
En pere an avel a gan klemmus e zon ?  
— Ar vro-ze eo ma Breiz-Izel,  
Hag hec'h ine mouez an avel !

N'anveez ket eur vro 'lec'h ma zo meneou  
Uhel ha ken uhel ma stokont d'an oablou,  
War bere aliez 'teu ar c'hrouadur kez  
D'an em goll a-wechou en eun hunvredigez ?  
— Ar vro-ze eo ma Breiz-Izel,  
Outi n'eus bro abed henvel !

N'anveez ket eur vro 'lec'h ma zo prajeier  
Karget a vleuniou kaer, a yeod mel ha tener,  
En pere hep paouez e hiboud ar wazig ?  
En eur laret sklintin eur goant a bedennig ?  
— Ar vro-ze eo ma Breiz-Izel,  
Flour he hano evel ar mel !

N'anveez ket eur vro hag he deus — o burzud ! —  
An dudiusan yez zo bet komzet gant tud ;  
Eur yez eus ar c'hrenvan, trec'h d'an holl amzerio,  
N'eo bet biskoaz mouget, na biken na vezo ?  
— Ar vro-ze eo ma Breiz-Izel,  
Ar *Brezoneg* eo he skoazel !

N'anveez ket eur vro, eur vro nerzus ha ter,  
A stourmas a viskoaz eneb da bep gwasker ;  
Eviti he mibien a skuilhas drant o gwad,  
En eur youc'hal spontus : — War zao ! Argad, argad !

— Ar vro-ze eo ma Breiz-Izel,  
An em difenn stard er brezel !

N'anveez ket eur vro he deus zavet dinec'h,  
Daoust e d'ar c'hanivejou, he fenn uhel d'an nec'h ;  
Hag a lavar d'an holl : « — Ya, kentoc'h ar Maro  
Eget 'n em vastari !... C'hoarzet neb a garo ! »

— Ar vro-ze eo ma Breiz-Izel,  
Eviti e fell d'in mervel !

N'anveez ket eur vro bet kanet en peb stum,  
Gand an Delennourien dalc'hmad a rum-da-rum ;  
Brudet en Hanter-Noz kenkoulz hag er C'hreiste,  
Meulet ebarz ar Zav hag er C'huz-Heol ive ?

— Ar vro-ze eo ma Breiz-Izel,  
He hano kaer war bep muzel !

N'anveez ket eur vro, elec'h ma zo Furnez  
O ren ar Yaouankiz, o rei d'ei levenez ;  
Elec'h mac'h a an holl laouen d'ar pardoniu,  
Lec'h ma klever bemnoz soniou, kanaouennou ?

— Ar vro-ze eo ma Breiz-Izel,  
Enni eman ma Zurzunel !

N'anveez ket eur vro a zo bet lezhanvet,  
Bro an touriou uhel, skanv ha dantelezet ;  
Bro ar chapelioù koant hag elec'h ma weler  
En peb kroaz-hent distro eur Groaz, eur c'halvar kaer ?

— Ar vro-ze eo ma Breiz-Izel,  
Ma Breiz karet laer gwech zantel !

N'anveez ket eur vro elec'h ma sav an derv,  
Lec'h ma kerz peb hini, hep damant, gant e erv ;  
Bro ar pennou-kaled hag ar c'halonou-dir,  
A deul ditourm, hep aon : **Eneb d'ar Bed ar Gwir !**  
— Ar vro-ze eo ma Breiz-Izel,  
He galvedigez zo uhel !

N'anveez ket eur vro 'lec'h ma chom an dudou  
Da vevan evurus en sioulder ar maeziou ;  
Lec'h ma kavont o be a damdost d'o c'havel,  
Lec'h ma chomont dalc'hmad doujus d'an Aviel ?

— Ar vro-ze eo ma Breiz-Izel,  
A vo er bed-all divarvel ?







## Eun devez a Blijadur

Kinniget d'eur Vreizadez vad a vro Gerne.

### I

Evel daou vignon koz e oamp c'hoaz 'n em gavet,  
Ha ken aliez gwech e c'hallemp 'n em welet



E vije plijadur... Nemed eun dra hepken :  
An amzer a dec'he evel eul luc'heden.

Kaer hon dije mala, kas en dro hon laten,  
N'hallemp ket en eun de dibuni hon c'huden ;  
Laret ha hadlaret, lonka kalz hag ankouaz  
Endespeld'hon hollc'hoant, na laremp trawalc'h c'hoaz,  
Evit gwir, daou vignon o deve da gonta  
Eur bern bitellajou, traou na dalvont netra,  
Hag o deus koulskoude o zam talvoudegez,  
Mar na vefent laret en em gavfer diez ;  
Rak n'eo ket, a dra zur, komzou lorc'hus ha kaer  
Eo a zalc'h karante er c'halonou tener :  
Ar galon na c'houll ken nemed eur sonj, eur zell,  
Eur gomz vad lavaret gant furnez ha gant poell...  
Dre-ze, etrezomp-ni, e oa gwir garante,  
C'hoant unan ac'hanomp a oa c'hoant egile...  
— N'a teus ket a sonj, Fanch?— Ankouaet teus, Yannig?  
— N'ouveau kaer petra... Gortoz eur pennadig...  
Hag evelse hon daou e redemp meneou,  
O tiviz war hon Bro, war an dud, ar c'hiziou.  
Pa gavemp eul lec'h koant, ha ni skwiz o redek,  
Ec'h azeemp neuze euz koste eur garrek ;  
Hon daoulagad batet, er pellder o c'hedal,  
Aliez e chomemp, hep goût d'imp, da sonjal...  
A-wechou e troemp an eil ouz egile,  
Hep na gredemp laret : — Petra zo a neve ?

— Kacrat ma 'z eo hon Breiz ! O dudiusat Bro !  
 — Mes na gav ket d'it, Fanch, ez eo poent mont en dro ?  
 Na glevet ket du-hont mouez koant ar mesaer ?  
 Ma fell d'impkaout hon c'hoan e vo red mont d'ar ger!...  
 — Gortoz eur peanad c'hoaz... Te, Yan, a zo betvet,  
 Chom eta da zellet ouz an oabl alaouret ;  
 Na glevet ket er bourk ar c'hloc'h o son ar c'hlaiz ?  
 N'omp ket re diwead... Deomp da redek c'hoaz ;  
 Rak ma vemp re abred... Anveout a rez Mon...  
 Hi na vefe ket pell o kana d'imp eur zon !  
 Na vefomp ket biken o lonka hen zam koan,  
 Chom aman da redek c'hoaz en touez ar balan...  
 Ha pa davo ar brud dre ar vro tro war dro,  
 Pa gerzo an teuz-noz dre an henchou distro,  
 Neuze da *Ger-Siou*, da dremen an nosvez,  
 Da welet Helena ec'h efomp, mar karez...

## II

Dao, dao... — Piou zo aze ? — Daou reuzeudig koz, koz,  
 Kollet gante o hent ha diwead en noz...  
 An oabl a zo du, du ha karget a goumoul,  
 Sonjet hon deus hon daou skei war dor *Ker-Siou* ;  
 Klevet hon deus laret e ve kavet en Breiz,  
 Dindan eun doën zoul, kalonou-aour a-leiz...

Hag ar Vreizadez vad a zigoras he dor :  
 — Ma zi a zo bepred evit Barzed Arvor ;  
 Allo, Fanch-an-Eubeul, zav d'ar penn uhelan,  
 Ha te, Yan-Dizoursi, kemer ar gador-man ;  
 Astennet ho tiou-c'har ha groet eur grazaden,  
 Pa vo tommet d'ho korf, 'refomp eur vlagaden...  
 — Doue, nag ez eo brao, dirak eun tantad tan,  
 Klevet er chiminal an avel o vouskan !  
 Nag ez eo dudius, diwar gorn an oaled,  
 Klevet er fornigel kanaouen ar skrilhed !  
 Evurus kant mil gwech an neb an eus toën,  
 Hag eun oaled tommet pa deu an amzer yen...  
 « Oh ! tudou pinvidik, miret 'n ho tiegez,  
 » Enpad ar gouanv kaled, skabel ar bewien gez ;  
 » Groet ma teuo ar paour d'azea warnezi,  
 » Bennoz 'n aotro Doue a gouezo war ho ti ! »  
 Neuze, evel gwechall, kontaden ha soniou  
 A ziruilh hep paouez dimeus sac'h-an-ardou ;  
 Tec'hel a rejont holl ken laouen, ken tener,  
 Ma krogas eur skrilhig da laret e bater...

## III

— « Gwechall goz, emezan, gwechall pa oan bihan,  
 » Tadig koz *Ker-Siou* dalc'hmad warlerc'h e goan,

» Azeet er gador, a lavare d'e dud :

» — Tostaet en dro d'in... Aman, braz ha munud !

» Hag e vouez krenerez, raouiet da vat ha skwiz,

» A gonte d'ê neuze e droïou yaouankiz ;

» An holl daoulagadou warnan vije troet,

» Gallout a ret sonjal na vije c'hoant kousket...

» Ken bravik e kontê, ma welec'h aliez

» Ar merc'hed o ouela gant teneridigez ;

» Hep sonjal, a-wechou, ar botred lavare :

» — Ar re-goz, evelkent, oa kanfarded ive !

» Ar potr koz a dalc'he hag e gontaden gaer

» Na baoueze morse nemed dre ar bater.

» Warlerc'h ar pedennou peb hini goude-ze,

» En e wele kloz, kloz a re meur a hunvre...

» Siouaz ! eme ar Skrilh, er bed n'eus ken a stur,

» An dud n'ouveont ken kemer o fljadur,

» Elec'h bezan zentus ha beva en o zi,

» Ar yaouankiz hiric a zo deut dizoursi...

» N'eus ken doujanz abed, n'eus ken furnez, na fe,

» Fall eo an dud yaouank... N'eo ket hep digare !

» Red mad eo d'e skampa evel traou-penfollet,

» Kaer a zo ober trouz, van abed na ve groet...

» — Pell araok ar c'huz-heol, gwechall eme o zud,

» Potr ha plac'h yaouank fur a zistroe d'o c'hlud...

» — Gwechall, eme, gwechall... An dud koz a oa zod,

» Yacuank a renk frinkal... Bec'h d'ei ha tro d'ar rod !

» C'houi, kos radoterien, c'houi n'anveet netra...

» Kousket aze en peuc'h... Paouezet da gana,

» Hag an dudou koz, koz a renk zerri o goug,

» Petramant, hepdale, e lamper war o choug... »

## IV

Ar Skrilh a roas peuc'h, ha, pleget hon fennou,  
Ni a boueze hon daou furnez e genteliou...

— Gwireo, Yan, eme Fanch, — Ya 'vat, Fanch, ma fotr kez,  
Bremen ez eo spontus bue an tiegez...

Ar mab eneb d'an tad, ar verc'h eneb d'ar vam ;  
Den na c'houll mui zenti, nan an disteran tam ;

Ar mevel, ar vatez a zo ken rok ive,  
Ma tigoue d'o mestrou daoulina dirake...

Kement-se n'eo ket mad ! Pep unan e vicher,  
Petramant an dizurz a zo mestr, barz ar ger !

Tad, mam, mestr ha mestrez a dle gourc'hemenni,  
Bugel, mevel, matez a zo groet da zenti...

— Mad, eme Helena, achu ho peus, potred,  
Da glem ha da dermal, da drailha ho spered ?

Lezel aze ar Skrilh, zavet ho taou war gwrec'h,  
Gant eur bannac'h jistr tom c'houi a vezo dinec'h...

Neuze ec'h ankouaomp ar Skrilh hag e gomzou,  
 Ar jistr tom a ra d'imp mouga hon zrubuilhou,  
 — Ma' z eo gwir — n'haller nac'h — ez omp arri diröll,  
 An dizurz, koulskoude, n'eo ket ken gwaz dre-holl ;  
 Ha ma teurve Doue rei d'imp bue, yec'hed,  
 Hon Breiz a hadvevo, war lavar ar Varzed !  
 ... Mes, hanter-noz a zon ! Poent eo monet en dro...  
 — Trugare, Helena, nosvez vad... Kenavo !  
 — Kenavo, Fanch ha Yan, Doue ha zent koz Breiz  
 D'o diwall 'barz an hent, da rei d'ac'h amzer reiz ;  
 Ar c'hentan ma c'hallfet distroet adarre...  
 — Oh ! nan, nan, evel kent ! Kenavo... Trugare !

## V

Al loar a bare splan er volz steredennet...  
 — Penoz, Yan, eme Fanch, mont rafemp da gousket ?  
 — Abredik ez eo c'hoaz... Gortozomp eur pennad,  
 Ni na vemp ket hon daou o vale bro dalc'hammad...  
 Oh ! gwellan da nosvez ! Perak ar Vretoned  
 O deus dilezet hent ar gwir evurusted ?  
 O Fanch, dre hon skridou, hon c'homzou, hon skoueriou,  
 Distroomp ane war wenojen o Zadou...  
 Greomp d'eze tanva, tanva ar garante  
 He deus hon Breiz-Izel evit he bugale ;

Touomp diwar vremen, en hano hon zent koz  
 Rei hon bue da Vreiz ha bemde, ha bemnoz !  
 ... Div eur a oa zonet en iliz ar barrouz,  
 Al loar a oa kuzet, an noz a oa didrouz...  
 Hag hon daou, evurus, e tistrojomp d'hon zi,  
 Tremenet re vuhan hon devez a zudi...  
 — Oh ! pegoulz, lavar Yan, pegoulz e teui c'hoaz ?  
 Ken liez ma teuez hon plijadur ve braz ;  
 Deus kentan ma c'halli, rak ma zi, ma c'halon,  
 A vo dalc'hammad digor d'it, ma gwellan mignon !  
 Bevomp da virviken evit Doue, hon Bro,  
 Na fallgalonomp ket... *Hon Breiz a hadvevo* !!!  
 Hag en em gwitaomp... Mes eun devez ken mad,  
 A lez en hon c'halon eun envor hag a bad ;  
 C'houez vad an holl bleuniou, kan tener an evned,  
 N'int ket ken dudius hag hon evurusted,  
 Devezioù evelse n'oc'h ankouaer biken,  
 Int hepken eo a gont en buegez an den !

D'ac'h-hu, Breizadez vad, d'ac'h ar barzoneg-man,  
 Eur blijadur eo d'in kinnig d'ac'h anezan...  
 O kana dre du-ze, mar klevet eun Evnig,  
 Kaset d'ezan, mar plij, gourc'hemennou Yannig.



## AR VLEUEN GENTAN

Ar gouanv oa tremenet, ar plac'hig a ouele,  
Enpad pevar miz hir, staget war he gwele,  
He devoa hirvoudet... Ha daoust d'am amzer vad,  
He foaniou a greske, gwasoc'h e oa he stad :

Eun devez koulskoude, eur bân-heol, o dudi !  
A gargas he c'halon a levez, a spi...  
— « O zav, eme he c'hoar, gant kan al lapoused  
» Dalc'hmad d'an dudou klanv e tizro ar yec'hed... »

» Deus ganin-me breman da vale ar maeziou,  
» Marteze e kavfomp en tu pe du bleuniou ;  
» Mar kavomp eur vleuen, eur vleuennig hepken,  
» Ar c'hlenved a dec'ho... Bez seder, bez laouen ! »

Hag ar glanvourez paour, kasti, dinerz da vad,  
Skoazellet gant he c'hoar, a ankoua eur pennad,  
Hag ar c'hlenved garo, hag he foaniou kaled :  
— « Oh ! ar yec'hed, emei, pebez evurusted ! » »

Pep tra en dro d'ezi a zeblante laret :

— « Bez seder, bez laouen, ar gouanv zo tremenet ;  
» Pa gân al lapoused gant an amzer-neve,  
» An den n'hall ket mervel... Re vantrus e ve ze !  
» Bez frealzet eta, hepdale ar glazur  
» A wisko a-neve ar c'hoajou ken hudur ;  
» Pa hadvev ar maeziou, pa ziwan ar bleuniou,  
» Komzomp eus ar vue, ankouaomp an Ankou ! »

Goneet hep gout d'ei, ar glanvourez neuze,  
Gant kalz a blijadur a hunvre er vue :  
— « Mervel breman, emei, hep bezan bet bevet...  
» Ar bleun na varvont ket hep bezan bet bleuniet ! »

Ha hi o vouskana, seder ive d'he zro,  
A glask, a hed ar c'hleun, ar vleuen a denfo  
Da laret d'ei eo gwir n'hall ket an den tec'hel  
En kreiz e yaouankiz : beva araok mervel !

Kavet ez eo ganti ar vleuen e klaske,  
Nag ez eo kuzet koant dindan ar yeod aze !  
A boan eo c'hoaz digor... Eun daou pe dri devez  
Ha hi a zispako evel eur rouanez...

Mar na vije pec'het he doa he c'hutuilhet,  
C'hoant he deus d'he lezel ken ma vezo gwelet

Hag hen hi a c'hallo bleunia ha dispaka :

— « Mar teu d'ezi bleunia, me a c'hallo beva ! »

Diwar neuze ar plac'h a deue heb kreiste,

Da welet he bleuen gant kalz a garante ;

Herve sonj he c'halon he yec'hed oa ken striz.

Hag eur vleuen dister kuzet dindan ar gliz...

Eun devez, o glac'har ! ar vleuen ken tener,

Dindan eun nosvez-reo a gollas he c'haerder ,

An de warlerc'h ar plac'h he c'havas pulluc'hed,

Outi na oa netra nemed deliou krazet...

Neuze ar glanvourez da sonjal a chomas,

War he diouchod koac'hed daerou stank a ruilhas

« Ar vleuen zo marvet hep bezan bet bleuniet,

» Me ive a dec'ho hep bezan bet bevet... ! »

Eun amzer ar yenan warlerc'h an heol klouar,

A lakeas an erc'h da c'holo an douar ;

Ar plac'hig kez, mantret, a gouezas adarre,

Ar c'hlenved milliget a grogas didrue.

Da dri devez goude, henvel ouz he bleuen,

Hi a dec'has pell, pell eus hon zammig traouien,

Hec'h ine vel eur goulm nijas dreist d'an oablou,

A yeas da vleunia da liorz an Nenvou !



## AL LEVRIOU KOZ

O levriou dispar, levriou dudius,

Nag ez hoc'h d'in-me kaer ha talvoudus

Ha frealzus !

Na skwizan kamet o lenn, o furchal,

Ho folennou koz, melen ha tenval,

Mes dishua !

C'houi, pa oan bugel, dinerz, hep skiant

A lake em c'hreiz poell ha diskamant

Hep nec'hamant.

Ganac'h e tiskenn ar wir zantelez,

Skianchou ar bed, evel ar furnez,

Al levez !

Ganac'h e tiskenn karout pep tra vad :

Doue, E lezen, ma mam ha ma zad,

Ma Bro ervad.

Ganac'h e welan dimeus ma bue,  
Pennadou seder arri pell hirie,  
Siouaz, du-ze...

Dre-ze pa gouezan warnoc'h a greiz-holl,  
C'houi ra d'am c'halon eur blijadur foll,  
Eur vad, eun digoll!

C'houi 'barz ma spered a zigas sonjou  
Dimeus eun amzer leun a envoriou,  
A hunvrecou...

Ped gwech, ouz o lenn, n'am eus ket kavet  
Plijaduriou kent a zeblante marvet,  
Raktal bevet?

Ped gwech ma-unan, warnoc'h daoubleget,  
Am eus ma zrubuilh, ma foan, d'ac'h laret,  
Ha me mantret?

Na ped gwech ive gant ho karante,  
Ho peus frealzet, leun a drugare,  
D'in ma ine!

O levriou koz, koz, levriou poultrennet,  
Oh! perak eta e chomet kuzet,  
Hag ankouaet?

Perak hirie e kemeret an tec'h  
Dirak levriou louz a zav en peb lec'h?  
— ... D'e c'houi vo trec'h!

Oh! zavet eta, zavet ho pennou,  
Ennoc'h 'man ine, skoueriou hon Zadou,  
O c'henteliou...

Hon zud koz dre-hoc'h o deus bet furnez,  
C'houi oa enoret en o ziegez  
Gant pep evez!

Pegoulz e teuy c'hoaz o ren kaer dre-holl,  
Pegoulz e vougfet al levriou diroll,  
A laz an holl?

Oh! deut levriou koz, bue zent hon Breiz,  
Bue hon Barzed, deut ha deut a-leiz,  
Bebet 'n hon c'hreiz!

Deut lutined-noz, deut kontadenno,  
Deut tud a vrezel a garas hon Bro,  
Oh! deut en dro!

Soniou ha gwerziou kanet a viskoaz  
Gant hon C'hendadou... Traou fur ha dinoaz,  
Deut ha deut c'hoaz...

Bebet en hon Bro, bevet didamall,  
Ma c'hallo ar Vad trec'hi war ar Fall,  
Evel gwechall !

Mes dreist da bep tra ha dreist d'ar Galleg,  
O levriou koz, koz miret ho yez c'houek  
Ar Brezoneg !

Neuze ar Breizad a roto bemnoz,  
Enpad ar gouanv-hir e wellan bennoz.  
D'ac'h, levriou koz !



## BLAVEZ MAD

Ar bla koz a dremen hag a goue en ankoua,  
Ha war e lerc'h e teu, renet gant an amzer,  
Henvel ouz eur bugel en e gammed kenta,  
Ar bla neve, leun a breder...

Kerkent zo neventi dre-holl war an douar ;  
Eur blavez deut ouspenn eus bue an den kez,  
Hag eur bla da zonet a vir d'ezan, hep mar,  
Hag evurusted, hag enkreuz...

Petra vo ar bugel a zo c'hoaz ken tener ?  
Petra e tigasao a neve dre ar bed ?  
Petra e lavaro dre ar maez hag en kêr ?  
Den, den na oar netra abed !

Dre ze an daou bried, eus kreiz o c'harante,  
Lar an eil d'egile : — Blavez mad, blavez mad !  
Hag ar vugaligou a bed ive Doue  
Evit o mam, evit o zad...



Ar mestr hag ar vestrez, roll dud an tiegez,  
A gas a greiz kalon o gwellañ mennoziou,  
Ma vezo o bue karget a levenez

Enpad kalz, kalz a vlaveziou...

Ar Pastor aketus en kenver e zened,  
— A anve ar vue ken finvus, ken marvel. —  
A c'houll digant Doue, vit e barrouz bepred,  
Eur blavez kristen ha zantel !

An holl dud en eur gir, tud paour, tud pinvidik,  
Bugale, tudou koz, tud yaouank a bep stad,  
A ra, en de se, dre garante birvidik  
Hetou wirion a vlavez mad,

Ha c'hoaz daoust e da ze ar bla vo mad ha fall ;  
Meur a wech eun devez a zigorro eur be...  
Aliez a teuio eun dra pe unan all  
Da denvalât ar bla neve...

Aliez an daerou a ruilho puilh ha stank,  
Rak an evurusted n'an eo ket eus ar bed !  
Hent garo ar vue a chom distouf ha frank  
D'an drubuilh ha d'ar boan-spered.

Ar bla a vezo mad, pegwir an amzeriou  
A ve dalc'hmad heñvel an eil dimeus eben

N'an eo ket, a dra zur, n'eo ket ar blaveziou,  
An den dister eo a dremen !

Eur blavez mad eta d'an dud dre ar bed-man,  
Eur blavez mad ha fur ha leun a drugare ;  
Ha 'vit m'o devo nerz hon mennoziou gwellañ :  
Eur blavez mad abeurz Doue !





## Pardon ar Goz-Yeodet

Ma fenn a oa pounar ha ma spered tenval,  
Ma-unan war ma roc'h 'oan chomet da sonjal...  
Dirak ma daoulagad e tremene founus,  
Ma bugaleaj aour, ma amzer evurus !  
Gwelet o ren du-hont eur vro kwitaet pell zo,  
Evel eun dra dec'het ha na deu ken en dro...  
... A greiz-holl, o sonjal er vro dudius-se...  
— O glac'har... Poan-galon ! An drived sul a vae !  
An drived sul a vae... Pardon ar Goz-Yeodet !  
Oh ! pardon binniget... Siouaz, n'az kwelin ket...  
Perag 'ta, ma Doue, chom hualet aman,  
Pa garan eur vro all gwelloc'h evit houman ?  
Perak chom da vervel ebarz bro ar c'hoajou,  
Pegwir e karan well ar môr hag e oachou,  
Oh ! perag n'am eus ket diou-askell gwennili,  
Evit mont d'ho pardon, hirie Gwerc'hez Vari ?

Evit mont d'ho kwelet d'ar vro meurbed karet,  
Elec'h 'man ho chapel, Itron ar Goz-Yeodet ?

Burzud ! buhan e kerz an avel,  
Mont a ran a-dreuz d'ar c'houmoul,  
Dindan-on mene ha tour uhel,  
Traouien, keriaden ha ti-zoul,  
A dremen evel luc'hedennou...  
A boan gwelet, kerkent kollet !  
Nijal a ran war ar gwabrennou,  
O Gwerc'hez, ec'h an d'ar Yeodet !

Setu Ploulech... Aman Kerninon,  
Poul-Ankou, ar vilin-avel,  
Breman e klevan sklintin o son  
Mouezig ken drant kloc'h ar chapel ;  
Biskoaz ken kaer-all — red eo laret —  
N'am eus klevet moueziou kleier,  
Gant mouez ar c'hloc'h ez on frealzet,  
Ma spered a zo dibreder !

Doue ! Ar môr braz, frank ha divent,  
O sailhat en bae Lanhuon...  
O môr ! da welet ran evelkent,  
Pebez dudi vit ma c'halon !

Setu ar Yeodet ! oh ! nag a dud,  
O vont hag o tont hep paouez,  
Bihan ha braz, holl a reont brud,  
Holl ez int leun a levenez...

Mont a reont war-zu ar chapel,  
Ha me d'o heuilh ive d'am zro...  
Hola ! arri eo tudou Servel,  
Ha Lanhuoniz, en bago ;  
O moueziou a deu beteg aman ;  
Bezant o deus evurusted :  
Skanv mad e savont war-lê breman,  
Ar yaouankiz a nij bepred !

Boutet, divoutet vel eur glaouer,  
Troet aman, douget aze ;  
N'an eus en dro d'in nemed traou gaer,  
Siouaz ! n'hallan sellet oute...  
Trouz ha safar ! Ar vugaligou.  
Darn o ouela, darn o c'hoarzin,  
Gante zonerez ha c'houtellou,  
A vouzar ma diskouarn paour d'in !

Petra a neve ? Ar c'hloc'h o son  
A zav e vouez sklintin ha drant...

Arri ez eo ar prozesion,  
Gwelet a ran ar Groaz arc'hant ;  
Oh ! nag eo kaer ! Pebez plijadur.  
Da welet en dro d'ar chapel ;  
Eur prozesion eo, a dra zur  
Bravan tra zo en Breiz-Izel !

Banniel Sant-Per, warlec'h ar c'hroaziou,  
Douget gant potred galloudus,  
A dro hag a zistro e blegiou  
Dindan an avel-vôr nerzus...  
— Mad eo d'ac'h, potred, ma 'z eo krenv c'hoaz  
Hag ho tiouc'har, hag ho tiouvrec'h,  
Rak, me gred, pa dostafet d'ar Groaz  
An avel a roïo d'ac'h bec'h !

Ar merc'hed gwisket eus ar bravan,  
Leun a yec'hed hag a c'hened,  
O tougen an Itron-Varia,  
A deu ive vel gwerc'hezad ;  
Evel ar botred o deus d'ober  
Evit derc'hel ar banniolo,  
O stourm ouz an avel emaint taër...  
Oh ! ar merc'hed zo divalo !

Setu al lestr braz, douget uhel,  
War diousskoa ar vartoloded :

Ar re-man ez eo a Vreiz-Izel,  
 Ar gwellan eus ar Vretoned ?  
 O fe birvidik, o nerz-kalon  
 Ar gwad ter a zo en o c'hreiz,  
 A viro bepred ouz ar Zaozon  
 Da zont da walla hon bro Breiz !

War diou rengenn ar vugaligou,  
 Eledigou koant, evurus,  
 A gan drant d'ar Werc'hez kantikou,  
 Gant moueziou brao ha dudius ;  
 O c'han kaer gant flammou an tantad,  
 En kichen ar Groaz o tevi,  
 A zo d'an ine eur bleun c'houez vad,  
 Karget a zouster hag a spi...

Warlerc'h an tantad e teu neuze  
 Ar prozesion d'ar chapel,  
 Peb tra 'dizro en urz adarre  
 En despét da nerz an avel ;  
 Kaerat tol-lagad ! Vel evned-môr,  
 Dispak gante o diou-eskell,  
 Pe eul lestr gant e oueliou digor,  
 Eo ar bannielou eus a bell.....

Achu ez eo goueliou an Iliz,  
 — En hon Bro bepred da gentan, —


Krighi ra pardon ar yaouankiz,  
 Nag int seder dre ar vro-man !  
 Ar merc'hed yaouank hag ar botred,  
 Kazel-ouz-kazel o vale,  
 Laouen o c'halon hag o spered,  
 A zo evel bleuennou-mae...

Etreze komzou karantezus,  
 Zellou birvidik ha tener,  
 Vel eostigou ez int evurus,  
 Dinec'h, dizoursi ha seder ;  
 Ar yaouankiz, ô kaeran tensor !  
 Pa ve ganti gened, furnez ;  
 Madou an douar, madou ar mor  
 N'o deus ket he zalvoudegez !

Tostad ra d'an noz ; war ar môr dôn  
 E tiskenn an heol entanet,  
 An holl zo tec'het eus ar pardon,  
 Ma-unan ec'h on er Yeodet...  
 Buhan d'ar chapel ; araok kwitad  
 Eur beden d'ar Werc'hez santel :  
 — « Itron-ar-Yeodet, klevet ervad,  
 » Diwallit bepred ho pugel ! »

Ma Doue !... Petra zo ?... Setu me dihunet,  
 Ha diwar ma garrek war an douar ruilhet...  
 Oh ! nag ez eo c'houero bue ar paourkez den,  
 Netra 'med eun hunvre ma fardon na oa ken !  
 Siouaz, red eo kredi pa gomz ar wirione.....  
 Bet ez on er Yeodet enpad ma c'houisk-kreiste ;  
 En avel eo nijet ma hunvre alaouret,  
 Gantan ez eo tec'het pardon ar Goz-Yeodet !

Kâvet 'm oa ma frankiz ha kollet ma hual,  
 Aman on adarre ma-unan o sonjal...  
 Bet am eus plijadur, kalz a evurusted :  
 Vad e ra d'eur c'hlanvour eur pennadig yec'hed !  
 Hunvre kaer ha dispar... O pardon binniget,  
 Bepred me da garo, da veulo... O Yeodet !!!



## HUNVREDIGEZ

Diwean bannou kaer eun heol-hanv entanet  
 A ruzie ar c'houmoul hag an oabl binniget,  
 Hag a alaoure koant lein an touriou uhel,  
 Euz pere e tec'he mouez ar c'hleier zantel...  
 Warlerc'h an Anjelus ar maez a oa zioul,  
 Peuc'h padus a rene a-us d'an tier zoul ;  
 Hepken eun ezen flour a c'houee en deliou,  
 Hag a zigase d'imp trouz ar mor, en aochou,  
 Pe ive, a wechou, c'houez ar bleuniou balan,  
 Mesket gant re ar bruk, ar melchon hag al lan..  
 War ze hiboud ar waz o tremen en draouien,  
 A glevemp hep paouez, hevel ouz eur beden..  
 Ar gliz, en eur goueza, a zistane pep tra  
 Hag a roe d'ar bed nerz neve da veva...


An trouziou, ar zioulder lake hon c'halonou  
 D'ober sonjou dispar, dous evel hunvreou..

Hon ine dishual a zave dreist ar bed  
 Hag ac'h e da vale betek bro ar stered ;  
 Rak bezan oamp hon daou en kreiz eul liorzig,  
 Laouen ha dibreder, drant evel daou costig ;  
 Biskoaz c'hoaz em bue n'am oa bet he gwelet,  
 Biskoaz en he c'hichen na oant en em gavet ;  
 Ha heno, p'he gwelen, eno ken dudius  
 E chomen dilavar, seder hag evurus... !  
 Hi oa en he c'hoaze o tibab bleuniou kaer,  
 Gwech he daoulagad c'hlaz, leun ouz eur zell tener  
 A bare war ma re... Hag he mouez 'n eur grenn,  
 A vouskane sklintin eun diskan ar c'hoanta ;  
 Oh ! neuze e chomen diraki da sonjal...  
 Da sonjal ! Ma Doue... kentoc'h da hunvreal !  
 Hi a oa evidon adalek an noz-ze  
 Turzunel ma c'halon, ma gwellan karante !  
 D'ei m'am ije kredet... Mes ma c'halon spontik.  
 Na lavare netra nemed komzou doanik...  
 Ha dirak he c'haerder, he c'hoantiri dispar,  
 C'hoantaen koulskoude laret d'ei : — Me da gar !  
 Rak, ma Doue, red eo en anzav, en laret,  
 Hini betek houman n'he doa ma goneet ;  
 D'ober he foltrezig e kollfen ma amzer  
 Ha na rafen, siouaz ! 'med labea paper ;

Na c'hallin birviken, o nan, nan, birviken  
 Laret da zen abed pegen koant he c'haven !

An amzer 'n he c'hichen a dremene buhan  
 Hag an noz a deue dizeblant ha distan :  
 — Poent eo breman, emei, distrei d'an diegez,  
 Eur c'huz-heol vel heman zo eun *Hunvredigez*...  
 Ya, eun hunvredigez... ! E laren em c'halon,  
 Hunvredigez diou wech ez eo bet evidon...  
 Me garfe e teufe da vezan hepdale  
 Nan eun Hunvredigez, o nan : eur Wirione !!





## KAERDER AN NOZ

D'AN AOTRO HOUEYOU-KERIZEL, PERSON PLISTIN.

### I

En divez ho tevez araok mont da gousket,  
'N eur c'hoat pe 'n eullannek n'hoc'h-hu biskoaz chomet,  
En eul lec'hig distro, pell eus trouz ha safar,  
Da hunvreal en noz ouz sklerijen al loar ?  
Evidon, meur a wech, 'm eus bet 'n em ankouaet  
Da zellet ouz kaerder an noz steredennet,  
Da zellet ouz al loar, Rouanez an noziou,  
O neuzial dudius ebarz bolz an Nenvou...

### II

Pa sko war an douar he sklerijen liou kouar,  
He bannou hir neuze a lak pep tra dispar ;  
Dindanne pep traouien, kuzet gant eur voren,  
A zeblant eur ster vraz pe eur gaer a blenen ;

KAERDER AN NOZ

43

Ha kriben pep mene dreist d'an holl blennou  
Zo vel eun enezen kollet kreiz ar moriou...  
A bep tu d'in neuze n'an eus nemed dudi,  
Kement tra a welan a zo d'in neventi...  
Ar gwe braz ha sioul a zistag o skeuden  
Reiz, reiz war an douar dindan ar sklerijen,  
Hag en o deliou glaz vel a-dreuz d'o brankou,  
Al loar, en eur c'hoari, a strink nerz he bannou ;  
Ar re-man d'an douar a goue ken kaer ive  
Ma kred d'an den bezan ebarz bro an Hunvre

### III

Mes ma tec'h ac'hane vit gwelet uheloc'h,  
Us d'e zellou a zo eun daolen kalz kaeroc'h ;  
Ar stered lugernus, hadet a villierou  
A zo evel perlez en splanded an oablou ;  
Trei, dizrei a reont, dalc'hamad 'maint o lintri.  
Eun nerz a zo enné hag a ra d'e birvi,  
Ma zeblantont d'an dud bezan zellou skedus  
An ele hag ar zent, a lavar evurus :  
— « Entrezek an Nenvou zavet ho kalonou,  
» Ha war zu ho Toue kaset ho pedennou ! »

## IV

Evurusoc'h pell, pell vit an evurusan,  
 En e hunvredigez an den en em ankoua...  
 N'hallfe ket birviken laret ar blijadur  
 A zo en e galon, — hen, paourkez krouadur ! —  
 Pa glev en dro d'ezan eur vouez krenv ha tener :  
 Mouez vraz ar bed divent o veuli e Grouer !  
 Eur pennad d'he chilaou, hen a chom zebezet...  
 Ar vouez a zo ken kaer... Ganti eo goneet !  
 Ha, stouet d'an daoulin, e-unan gant Doue,  
 'N eur zellet d'an Nenvou, ganti lavar ive :  
 — O Doue-Galloudus ! Dirak ho labour gaer,  
 Ma c'halon, ma feden a zo o diou dister.....  
 Mes n'am eus nemetê... Chilaouet ma mennad :  
 — Groet m' Ho karin henoz, hag arc'hoaz, ha dalc'hmad



## Bez soudard, o Breizad !

O soudard yaouank o vont da gwitâd,  
 Me wel daerou puilh en ez taoulagad,  
 Perak 'ta gouela ha kavout glac'har ?  
 Da vicher zo kaer, uhel ha dispar...

Sec'h da zaerou ha bez laouen,  
 Ankoua peb kalonad,  
 Kas pell diouit keun ha anken :  
 Bez soudard, o Breizad !

Aboue ma teus sonj ha ma teus skiant,  
 Da dammig bue zo tremenet drant,  
 Dindan skoazel dous tud karantezus,  
 Bet en ez kenver kêñ madelezes...

Arri da dro da vezan den,  
 Hirie chilaou ervad  
 Eus da Vam-Vro ar c'halvaden :  
 Bez soudard, o Breizad !



Na chilaou biken an aliou fall  
 E rofe d'it tud diskiant ha dall ;  
 Laret a refont : — « Serviji ar vro...  
 Petra ez eo ze ? Eun dra divalo ! »

An dud-ze a zo trubarded,  
 Skornet ez eo o gwad ;  
 Dirake zav da benn-kaled :  
 Bez soudard, o Breizad !

En amzer gwechall — Sell eus an histor —  
 Ar Vretoned koz... Oh ! mir oc'h Envor !  
 N'o deus bet biskoaz lezet an trubard  
 Da waska ar Vro hep he difenn stard ;  
 O disk gante harpa ar Gwir  
 En pep lec'h ha dalc'hmad,  
 Evelte 'z po eur galon dir...  
 Bez soudard, o Breizad !

Ha te a c'hallfe gwelet hep krena,  
 Troad an ermeziad warnout o koueza ?  
 Ha te a garfe gwelet an estren  
 Oc'h ober warnout en ez pro lezen ?  
 Kentoc'h evit se e rofez  
 D'ezi da vannac'h gwad :  
 — Ar Maro kent evit ar vez !  
 Bez soudard, o Breizad !

Da Vro a hirvoud, bezan he deus nec'h  
 Ezom braz he deus dimeus da ziouvrec'h ;  
 Daoust hag eur bugel a lezfe e vam,  
 Hep he zikour hag he difenn eun tam ?

Na rafe ket ! Ha 'vit ma vo  
 Krenv ha welloc'h he stad,  
 Gant kalon hen he difenno...  
 Bez soudard, o Breizad !

Difenn da vro gaer evit ma c'hallo  
 Hada hep anken da dud o farko ;  
 Bez bepred dihun evel eur gedour,  
 Diwall anezi eus an enebour,

Ma vo enni pinvidigez,  
 Peuc'h padus hag urz vad,  
 Ma vo laouen pep tiegez  
 Bez soudard, o Breizad !

Breizad, bez soudard ! Bez den a galon,  
 Difourm er brezel, direbech, hep aon ;  
 Bez dalc'hmad doujus, leun a lealded,  
 Difenn ar Frankiz hep damant abed ;  
 Harp an intanvez hep skoazel,  
 Zikour an emzivad,  
 Zouten pep mad, pep tra uhel,  
 Bez soudard, o Breizad !

Ha 'vit ma c'halli vel da Gendadou,  
 Kerzet en hent con ha heuilh o roudou,  
 Bez en pep amzer leun a vadelez,  
 Vit da genvreudeur eur skouer a Furnez ;  
 Ha dreist peb tra, dalc'h sonj ive,  
 Penoz eur breizad mad,  
 Zo da gentan **soudard Doue**,  
 Bez soudard, o Breizad !




## AR C'HLANVOUR

War e wele a boan, staget gant ar c'hlenved,  
 Ar c'hlanvour reuzeudik, kollet gantan ar spi,  
 O welet dirakan pep den leun a yec'hed,  
 Glac'haret e gálon, a deu da hirvoudi...

C'hoant an eus da zével, da stourm eneb d'e zroug,  
 Mes e zaoulagad dôn hag e ziouchod koac'het  
 A ra d'ezan klevet en e greiz eur vouez moug :  
 — O paourkez den, neuden da vue zo torret !  
 — Red vo neuze mervel ! emezan, 'n eur ouela,  
 Koulskoude me a glev an evned o kana,  
 Hag an neve-amzer war ar maeziou o ren... !

Hag ar c'hlanvour mantret, hadkouezet 'n e c'hourve-  
 A c'houll ouz e Grouer yec'hed vit e ine,  
 Rag d'e gorf dinerzet bue na deuto ken !



## TROUZ AN EOST

En dremwel ar zav-heol, an oabl zo entanet,  
An heol, bue ar bed, zo o vont da zével,  
Dirakan ar voren war an douar ledet  
A dec'h gant an avel...

War ar maeziou an dud a zo war zav abred,  
An eost a c'hourc'homen, outan eo red senti ;  
En holl diegezou e poanier stard meurbed,  
Bec'h zo war bep hini !

Er parkou a glever moueziou ar vederien  
Ha trouz skanv ar filzier o vont dre an ed sec'h ;  
Zeblantout a reont bezan bepred laouen,  
Evurus ha dinec'h...

Araok ma 'z eo ar gliz tec'het diwar an ed,  
Eo kroget ar c'hirri da sklokal en henchou ;  
Mont a reont buhan ha buhanoc'h bepred,  
Stank e vo o zrofoù,

Dreist da drouziou an de, a zeblant c'hoaz kousket,  
Mouez drant an dornerez a yud en eur franval,  
Ha skourje ar c'haser, us d'ar c'hezec savet,  
A glever o strakal !

Hag a greiz holl ive hekleo an traouiennou  
A ve dihunet gant eun dornerez dre dân ;  
Houman eo ar gwellañ 'tousez ar mekanikou,  
He labour zo buhan.

Ouz he c'hlevet an holl a chom gwall zouezet  
— Henvel eo ouz an Diaoul ! e lavar ar re-goz ;  
Enni e zo, marvad, ineou tud daonet...  
D'ei hon gwasan malloz !

Hag evel testeni dimeus o fenn-kaled  
Ar re-goz a gemer ha c'hwistou, ha frailhou,  
Ar re-man a ziston, a zistag sec'h meurbed  
War al leur, a daoliou.

An heol a zo uhel, trouz a zo tro war dro,  
Dre-holl e poanier stard a gorf hag a galon ;  
Na glever en pep lec'h nemed mekanikou  
O franval hag o son...

Gant nerz kaled an de an drouz a vihana,  
An holl dornerezed eo goloet o mouez ;

Dre an domder bervet ar vrud a bounera,  
Pep trouz zo digompouez...

Dre ma tistan an heol ha ma tosta d'an noz  
Ar vue a zeblant hadveva dre ar bed,  
An drouz a zo reisoc'h dre al lann hag ar roz  
An eost a gerz bepred.

Ha goude ar c'huz-heol, war eul leur diwead,  
E vo klevet trouziou an dudou o poanial ;  
Ar c'hirri marteze a skloko eur pennad,  
Ha peuc'h a vo raktal...

Ar gliz war an douar pa vo tavet ar brud,  
Gant an denvalijen a gouezo sioul ha stank,  
Ha neuze, — poent e vo — e tiskwizo an dud,  
Braz, bihan, koz, yaouank.

Ar bed ive, d'e dro, a ziskwizo neuze ;  
Warnan eun ezen flour a c'houeo gant dudi,  
Hag a gano d'an den eur zon a garante,  
A levez, a spi...

Ar maeziou gant miz eost da welet a zo koant,  
Pep hini a labour evit e vara-goanv ;  
Pep hini, daoust d'e boan, a zo seder ha drant,  
Rak eosti a zo skanv !



## Bennoz ar Paour

Ouz an dud ezommek, o kemeromp true,  
Harpomp ar gwall-eñrus ha karomp ar bewien,



Gwelomp ané bepred vel izili Doue,  
Digoromp hon c'halon, roomp d'ê aluzen !

Mar teu ar paour da glask, n'eo ket dre lorc'h, kredet,  
 Mar n'hen dije ezom n'astefte ket e zorn ;  
 Roomp d'ezan seder, hen eo hon breur karet,  
 Torromp d'ezan e naon, goude hon do return

War vordig eun hent braz, zammet war e flafou,  
 Brevet gant al labour ha gant an dienez,  
 Daoubleget gant an oad, goloet a zruilhous,  
 Eur paour koz a c'houlle aluzen eun devez.

Dirakan aotrone a dremene dinec'h,  
 Leun a binvidigez, gwisket vel rouane ;  
 O daoulagad façus, zavet uhel d'an nec'h,  
 Na deurvezent disken war-zu ar baourente.

Int o deus a viskoaz bet leve, peadra,  
 Int o deus, hep poanial, bet bara goneet ;  
 Trubuilhou an den paour na ra d'eze netra,  
 Poaniou kri ar vue oute a zo kuzet...

— « An aluzen, mar plij ! e lavar an den koz,  
 » An aluzen, tud kez, eur gwennegig hepken !  
 » N'am eus ket debret tam, tam aboue dec'h da noz,  
 » True, en han Doue, true ouz ma anken ! »

Mes holl e tremenont, dizeblant ha digar,  
 Int n'o deus ket a naon... Penoz 'ta e c'hallfe

Bezan tud gwall-eürus, pewien war an douar ?  
 Hag e tec'hont pell, pell... an dud didrugare !

Hep tam fallgaloni — kustum eo ar bewien, —  
 An den koz a c'hortoz hag a glem ar pinvig :  
 — « An dud-se, emezan, o deus eur galon yen,  
 » Me garfe o gwelet eur pennad reuzeudig... »

Takennou dour neuze a ruilh war e ziouchod...  
 An amzer a zo fall, an ezom a greska ;  
 Ar madou a zo frank, mes bihan eo e lod,  
 Ha da dorri e naon n' eus ket eun tam bara.

Kerkent eur c'hrouadur, laouen ha dibreder,  
 A deu gant an hent braz, a deu en eur gana.  
 Ar bugelig ken koant a zo beo ha seder,  
 Eus e zaoulagad glaz ar yec'hed a strinka...

Ar paour ouz e welet a zav warnan e zell ;  
 Hen ive a zo bet ken evurus gwechall...  
 Siouaz ! An amzer-ze a zo breman pell, pell,  
 Breman na chom gantan nemed deveziou fall.

Ar bugel, zavet mad, a vouse'hoarz ouz ar paour,  
 Ha gant eur vouez sklinton, mouez flour eun el bihan :  
 — « Me n'on ket pinvidik, n'am eus arc'hant, nag aour,  
 » Me garfe koulskoude distana d'ac'h ho poan...

» Ho tilhad a zo skany, an amzer a zo kri...  
 » Mar karet dont ganin da di ma mam, ma zad,  
 » Du-man c'houi a c'hallo tomma hoc'h izili,  
 » Eur bannac'hig tân sard a rei d'ac'h kalz a vad...  
 » N'ho peus ket riu hepken, naon ho peus, marteze ?  
 » Marvad aboue pell zo c'houi n'ho peus ket debret...  
 » Kemeret ma bara, me a gavo goude,  
 » Ra vo gantan ho naon eur pennadig torret ! »

— « Nan, nan, ma bugelig, na gredin ket kemer  
 » Digant da galon vad an tammig bara-ze ;  
 » Aluzen eur bugel, a dra zur, a zo kaer...  
 » ...Eur rebech e ve d'in... Nan eta, trugare ! »

— « Oh ! kemeret, m'ho ped, ezom ho peus, m'hen gwel,  
 » Kemeret hep damant, bezan eo evidon  
 » Eun evurusted dreist, eur blijadur zantel,  
 » Rei d'ac'h ma zam bara... Kemeret 'ta, hep aon ! »

Digant ar c'hrouadur ar reuzeudig neuze,  
 A gemer ar bara hag a lar truezus :

— « D'it-te, kalonig aour, d'it mil bennoz Doue,  
 » Doue n'ankouao ket da zorn madelezes...  
 » Ra vezo binniget an tad hag ar vam vad,  
 » O deus stummet ennout eur galon ken kristen ;

» Trugare c'hoaz eta ; en distro ar c'hoziad  
 » A rofo d'it breman aluzen eur beden ! »

Ar bugel a dec'has sederoc'h vit biskoaz,  
 N' en doa c'hoaz tanveet kenkouls evurusted ;  
 Ha bennoz ar paour koz d'e ine a roaz  
 Eul levenez tener ha dudius meurbed.

O tudou pinvidik, a ruilh war an danve,  
 Dirak ar bugel-man kemeret eta mez,  
 Bezet mad en kenver dienez, paourante,  
 Pa eneb d'ac'h eun de Lazar 'zavo e vouez !





## Skeuden ar vuegez

DA FANCH KENEC'H DU, « HUELVAR ».

Pell dimeus ti ma zud, en bro dom ar C'hreiste,  
 War eul lestr a vrezel en em welchomp eun de  
     Goude eun nebeud blaveziou ;  
 Diwar neuze bepred bep beure ha bemnoz,  
 E vijemp hon daoufg evel mignoned koz  
     O konta hon zammou troñou.

Dalc'hmad vijemp seder, dalc'hmad vijemp laouen,  
 N'anavezemp kamet na trubuilh, nag anken,  
     Beva a remp evurus braz...  
 Hon c'halonou dinec'h ha drant evel evned  
 A gane hep paouez ha dudius meurbed.  
     Ar martolod hag ar mor glaz.

Pa goueze ar zerr-noz enpad an defou-hanv,  
 Pa c'houee en dro d'imp eun ezen flour ha skanv,  
     E pignemp war ar wern uhel ;  
 Ha neuze, luskellet gant trouz ar gwagennou,  
 Kollet etre ar môr ha bolz kaer an Nenvou,  
     E hunvreemp d'hon Breiz-Izel...

Oh ! ya meur a bennad a dremenemp eno,  
 O sonjal gant dudi en devez an distro,  
     Pe c'hoaz o konta goustadik  
 Hag o laret hon daou dirak ar mor divent,  
 E oa beo en hon c'hreiz, ken beo ha diagent  
     Karante dener eun dousik !

Siouaz ! eur c'hlenved kri a greiz holl a deuas,  
 Ha war eur gwele-poan didrue am stagas,  
     Neuze kenavo levenez !  
 Ma mignon a ouele, hag araok ma c'hwitad :  
 — « Hepdale, emezan, en em gavi yac'h mad,  
     D'ez kwelet ec'h in aliez... »

Aliez e teuche, emezan, d'am gwelet...  
 Eiz zun a dremenas ha hen na deuas ket !  
     Ma c'hlenved a gouezas neuze ;  
 Hag e tizrois c'hoaz dinerzet ha kasti,  
 Seder, rak em c'halon me a vire ar spi  
     Da gaout ma mignon adarre.

A boan am oa laket ma zreid war al lestrig,  
 E c'houlennis dustu : — Pelec'h eman Yannig,  
     Ma mignon koz, ma mignon mad ?  
 — Yannik, oa d'in laret, a zo tec'het pell zo,  
 Tec'het ez eo aboue eur seiz zun pe war dro,  
     Hag hen evurus o kwitad...

Yannig a oa tec'het...! Ma-unan a chomen !  
 Eviden ar vue a oa goullou ha yen,  
     Karget a c'hlac'har, a boaniou !  
 En dro d'in an holl draou a zeblante maro ;  
 Digouezet miziou-du, an amzeriou garo,  
     War ma diouchod 'ruillhas daerou...

Ma daerou a ruilhe stank ha kri, ha poanius,  
 Hag em spered sonjou a dremene founus :  
     Gwasan dishenvelidigez !  
 Seiz pe eiz zun a boan a oa bet tremenet,  
 Hag hon evurusted en keit-se oa tec'het,  
     Nag eo dister ar vuegez !



## Karante Doue

DA VIGNON MA FASK-KENTAN..

Savet gant tud zantel 'n eun tiegez kristen,  
 Aboue ma oas bugel te gare ar beden ;  
 War varlen eur vam vad te az poa bet disket  
 Meuli hano Jezus, hini e Vam garet.  
 Da blijadur vije en ez oad teneran  
 Klevet komz ouz Doue ha pedi Anezan...

Abred en ez kalon e save karante,  
 N'az poa 'med eun hunvre : karout, karout Doue !  
 Dimeus madou ar bed te a oa dizeblant,  
 Dre ma kreske d'an oad kreske ive da c'hoant,  
 Da welet o tostad an devez ar c'haeran  
 Teus bet war an douar : devez da Bask-kentan !



An de-se, sonj am eus — n'ankouatn birviken ! —  
 Ma Fask-kentan ive am oa groet 'n ez kichen,  
 Te az poa d'ar Werc'hez gwestlet, ha hep dizro,  
 Da ine, da galon, da vue war an dro...  
 Kaer hen deus bet goude Satan da enebi,  
 Kollet an eus e boan : bugel oas da Vari !

Bugel oas d'ar Werc'hez, rak Hi gant levenez,  
 Zigemeraz d'al lé evel eur Rouanez,  
 Kement a blijadur reas-se d'he c'halon,  
 Ma kinnigas d'He mab da garante wirion ;  
 Ma roas da Jezus, evit e vrasan gloar,  
 Kalon glan he bugel vel eur vleuen dispar !

Adalek an de-se plijaduriou ar bed  
 Dirak da zaoulagad na oant nemed moged  
 A ziavez Doue te wele skler ha reiz  
 Na oa nemed gevier, displijadur a-leiz...  
 Gout mad a res penoz an den war ar bed-man  
 Oa krouet gant Doue vit karout Anezan !

Eur zoursi ken kristen en ez kalon dener  
 Entane ac'hanout bepred vit da Salver ;  
 Mouez Jezus da c'halve evel mouez eur mignon,  
 Bezan beleg Jezus e oa c'noant da galon...

Kerzet gant an Hini a oa, en gwirione,  
 Ar Vadelez, ar Gwir, an Hent hag ar Vue !  
 Daou. t e d'ez karante oas c'hoaz 'barz an anken,  
 Na gaves ket reiz awalc'h da hent, da sklerijen...  
 Neuze eur vam garet, a teus gouelet kement,  
 Vidout bedas Doue, ma roje d'it da hent ;  
 Hag ar c'hras a-hent-all oe ive ken dalc'hus,  
 Ma larjout hep damant : — D'ac'h on, o ma Jezus !

Hep marc'hata pelloc'h ec'h ejout d'ar c'hloerdi,  
 Lec'h tremenjout d'amzer er beden, er studi...  
 Eno, evel eun él, te a oa evurus  
 O c'hortoz, an devez ma vije da Jezus ;  
 Sed hirie digouezet an de ken gortozet :  
 Beleg out da Jezus... Jezus ra vo meulet !!

Beleg out da Zoue ! Laouen, hep keun, seder,  
 E kwitaez ar bed vit bezan d'ez Salver ;  
 Pell zo oas o c'hortoz, hirvoudi 'res bemde,  
 Hirie eo deut da wir hunvre kaer da vue...  
 Karout, karout Doue ha gonit ineou  
 A vezo da loden betek fin da zeiou !

Kaerát de, o mignon, ez eo heman d'it-te,  
 Na gavi ken eun de ken kaer en ez pue !

Ar zent hag an éle a gân gant levenez  
 En eur veuli Jezus hag e vam, ar Werc'hez ;  
 — Bezan vo beleien daoust d'an amzer direiz :  
 Ar beleg eo bepred zikour ha skoazel Breiz !

Kaerât devez d'ez mam, hirie 'barz an Nenvou,  
 Gwelet a rez anei ebarz kreiz ar joaïou  
 O laret da Vari gant teneridigez !  
 — « D'ac'h ha d'ho mab, Jezus, eo ma bugel, Gwerc'hez,  
 » D'ac'h am oa hen gwestlet pa oan war an douar,  
 » Beleg eo da Jezus... Ma joa a zo dispar ! »

Kaerât devez ive d'ez tad en e gozni,  
 Vitan an devez-man a zo leun a zudi...  
 Roet 'n eus eur beleg da Zoue gant e boan  
 Ha Doue hen paeo kant gwech evit unan !  
 Evurusât devez d'ez preur, d'ez c'hoarezed,  
 En eur gir, devez kaer d'ez kerent, mignoned...

Holl en dro d'it o deus en em vodet hirie,  
 Na ra 'med eur galon da hini gant e re ;  
 Pedi reont Doue evit ma teurvezo  
 Rei d'e veleg yaouank nerz-kalon ha graso,  
 Ma c'honeo d'Ezan an danvad dianket,  
 Ha ma lako ar peuc'h er galon drubuilhet...

— O Jezus, hon Salver, chilaouet hon feden :  
 Roet bepred skoazel ha harp d'Ho peleien ;  
 Mar teufe da c'houea eun avel fall warne  
 Ni holl o difenno gant eur wir garante...  
 Ha goude eur vue leun a boan, a zaerou,  
 Groet mac'h efomp gante d'Ho meuli d'an Nenvou !





## Ar zoudard kristen

D'AM ZAD, ZOUDARD PI IX.

### I

En despet d'o galloud, d'o nerz, zoken d'o fe,  
Trec'het gant an niver, ar Re-Wenn a golle !  
.....

An de-se an emgann oe bet kri ha garo ;  
Yudal a re an dir, ouz e heuilh ar Maro !  
Ar Re-Wenn, gant kalon, hep sellet ouz o foan,  
An em zifenne stard eneb d'ar e'hele'h a dân  
En pehini e oant tapet kreiz an argad,  
Eus pehini, siouaz ! en despet d'ar stourmad,  
N'hallchont biken tec'hel... Ar C'hazed a oa Mestr !  
Ar Chouaned trec'het na oant mui digabestr...  
Lorc'hus eus o gonid, ar C'hazed a bep tu  
A lake an holl draou en tân hag el ludu ;  
Vel eur blijadur gaer en kreiz o bue fall,  
An tan en eun ti zoul a re d'eze tridal !

Mes, en kreiz ar joa vraz, gant eur C'houan tizet,  
Aliez d'an douar eur Glaz goueze lazet...  
Neuze an dud fallakr a lare d'ar Re-Wenn ;  
— « Gwad ar C'hazed maro a bouezo war ho penn ! »  
Hag evel testeni dimeus o lavariou,  
Stankoc'h war ar Re-Wenn e tiruilhe taoliou ;  
Ar re-man a gerze didrouz ha dilavar,  
Karget o c'halonou a anken, a c'hlac'har,  
Ha, dirak o farkou, gwechall labouret mad,  
Dirak an henchou dôn, lec'h ma ruilhas o gwad,  
E choment da sonjal... Rak douar o zud koz  
Dindan troad ar gwasker a deule e valloz !  
Holl o dije karet... Mes, siouaz, o diouvrec'h  
A oa breman dinerz : d'an estren oa an trec'h !

### II

Kerzet a rent bepred, p' en em gavchont neuze  
En eul lec'hig koant, koant, hanvet Bas-Briacé ;  
Eul lec'h eus ar bràvan, kollet touez ar bleuniou,  
Elec'h na oa gwechall nemed plijaduriou...  
Alaz ! aboue m'eo deut amzer ar gasoni,  
An ti bihan didrouz 'n eus kollet e zudi...  
Dirak al lec'hig koant kalon unan a dom,  
Rak en ti distro-ze eman e dud o chom ;

Hennez eo ti e dad, ennan ez eo ganet!  
 Hag en e ziabarz elec'h ma 'z int kuzet,  
 Eman e vam, e c'hoar, e wreg, e vugel...  
 Aze 'man e vue hag hen a renk mervel!  
 Teneret e galon e tistank da ouelan,  
 Hag ar C'hlazet kerkent da wapad anezan:  
 — « Sell-hi, ar galon yar... Sell hi 'ta o ouela...  
 » Abenn eur pennadig refomp d'ezi kana...! »

## III

Bale rent evelse gant eur galon vantret,  
 Pa laras ar mestr gall: « Halte! » pe gentoc'h... Chomet!  
 En kichen eur c'hroaz-hent, groet gant diou wenojen,  
 E oa eur groazig koat, zavet war eun dosen:  
 — « Ripoch, eme ar mestr, m'a teus c'hoant da veva,  
 En eur distrei dimeus an den oa o ouela...  
 — Ripoch, laras ar mestr, en eur skrignal e zent,  
 An tammig koat brein-ze a stouf diouimp an hent,  
 C'hoant e teus d'hen diskar ha, vel 'm eus laret d'it  
 Az pezo da vue, n'eo ket stard da c'honit! »  
 — « Diskar ar Groaz zantel! 'me Ripoch, me kristen! »  
 — « Ya te! eme ar mestr, p'eo me a c'hourc'hemen! »  
 — « Ha goude? » — « Ha goude? O chouan, bez dinec'h! »  
 Ripoch a zellas ouz kerden moan e ziouvrec'h...


E zaouarn a oa stag, ken ma n'halle finval,  
 — « Lar ya, eme ar mestr, hag e vi dishual!  
 Hag evel eur Chouan, kalonek e poani,  
 Sell, gant ar vouc'hal-man, kerz, ha hep damanti! »  
 Ar C'hlazet hen boutte gant beg o fusulioù:  
 — « Kerz 'ta! Na welez ket ti koant da Gendadou,  
 Zo du-hont alaouret gant an heol-ru o kuz,  
 Pelloc'h da barkeier, lec'h oas ken evuruz...  
 — « Kerz 'ta hag e vevi, petramant ar maro  
 Alako eun termen d'ez kreden divalo! »  
 Ar Chouaned, d'o zro, lare d'o c'henvroad:  
 — « Biskoaz eur wir gristen n'an eo bet renead...  
 Na vez ket eur Judaz, Ripoch, bugel Doue,  
 Diwall dre eun torfed da zaoni da ine!  
 Betek hirie e teus difennet mad da Vro,  
**Bez kristen ha zoudard** beteg eür da varo!! »  
 ... Den na lare netra,.. Ripoch a oa nec'het...  
 Sevel reas e benn vel eun den dihunet:  
 — « Lemmet d'in ma c'herden, roet d'in ar vouc'hal,  
 Ma 'z an breman zouden didrue da boanial... »  
 Ar Re-Wenn o ouela: — « O Jezus, ma Doue,  
 Kemeret dioutan ha diouimp-ni true!  
 Kalz ane d'an daoulin a stoue da bedi:

— True evit hon breur... True, Gwerc'hez Vari ! »  
 Ripoch, hep ober vâ, entanet e lagad,  
 A zell dimeus ar Groaz hag a zailh ouz he zroad ;  
 Ar vouc'hal 'n e zorn deo, e gein harpet er Groaz :  
 — « Kroaz santel ! emezan, deut aman, potred c'hlaz ! »  
 — « Kroaz santel ! e lavar ar Chouaned kerkent,  
 Kalon, kalon, Ripoch, gra d'e skrignal o dent ! »  
 Ar C'hlazed 'n em zelle, estlammet braz meurbed,  
 — « Deut 'ta, eme Ripoch, deut eta, lamponed ! »  
 Hag an daou-c'hant tra louz, dalc'het gant nerz eun den,  
 A deu, en eur yudal, da stourm ouz ar c'hristen,  
 Dont reont niverus, Ripoch a zo spontus :  
 E zaoulagad deul tâ, e vrec'h a zo nerzus...  
 Skei e ra war an dro taoliou stank, ken pounar,  
 Ma laka ar re-all da skrijal gant kounar !  
 Unan eneb daou-c'hant, ar fe deu d'hen zouten  
 Ha korfou ar C'hlazed a c'houlou an dac'hen :  
 Pemb, dek, pemzek den laz, beuzet en o gwad,  
 Na glaskont ken na Gwenn, na Chouaned gwapad !  
 Ar C'hlazed a dosta 'n eur zerri o banden :  
 Bezan ez eo diez dont abenn eus eun den !  
 Kaer o deus holl yudal, evel ar chas klanvet,  
 Ripoch a sko bepred, mui-ouz-mui kounaret...  
 Siouaz ! daoust e d'ar c'hoant, nerz eun den zo dister,

Ma renk Ripoch plega, e vue a vo ker...  
 O krena gant ar vez, ar C'hlazed milliget  
 A zailh war ar zoudard : Ripoch a zo trec'het !  
 Daou-ugent den fallakr henvel beo ouz diaoulien,  
 A lavar da Ripoch : — « 'N em difenn 'ta, kristen ! »  
 Hag an taoliou stank, stank a goue evel grisilh  
 War an den reuzeudik, chomet c'hoaz a dribilh  
 Ouz ar Groaz vinniget an eus bet difennet,  
 Ouz ar Groaz a garo ken ma vezo laz...  
 — Lazet eo !... E ziouvrec'h betek eur e varo  
 A zifennas ar Fe en eur zifenn ar Vro !  
 E gorf paour d'an douar, dinerzet a ruilhas,  
 Ha dindan o zeulio, ar C'hlazed hen flastras...

## IV

Neuze dre gounar goue, ive dre gasoni,  
 Pa na oa den abed da zifenn anezi,  
 En tammou ar C'hlazed a lakeas ar Groaz  
 En eur douâd Doue gwasoc'h evit biskoaz ;  
 Hag araok achui — O tud leun a grizder !  
 E skochent an tammou war gorf paour ar merzer... }  
 Goude e oe laket 'barz an hevelep be,  
 Korf ar zoudard kristen, gwir zifennour ar Fe,  
 Ha koat ar groaz santel, an evoa ken karet,  
 Kerzomp war e roudou... **Ripoch, o bez meulet !f**



## MENNOZIOU-EURED

D'AM MIGNON Y.-M. BOULANGER HA D'E ZOUSIG  
MARIA-AR-BARZIC, PLOULEC'H.

N'an eus ket c'hoaz gwall pell e klevis eur c'helo  
Hag a lake seder an holl dud dre ar vro ;  
Diou galonig tener ha karget a furnez,  
Diou galonig yaouank a dlee hepdale,  
Dre ar briedelez  
Skoulma o c'harante.



Klevet am oa ouspenn na oa ket gwelet c'hoaz  
Eun dimezi kenkoulz en bro abed biskoaz ;  
An daou bried a oa skouer ar yaouankizou,  
Ar vue a vije d'eze o daou laouen,  
Groet oa o c'halonou  
An eil evit eben !

En gwirione, peb tra a deu, dre eur burzud,  
Da harpa en peb stum lavariou mad an dud :  
Adalek *Keraloaz* beteg bourk koant *Ploulec'h*,  
Ar bed he deus gwisket he mantell ar c'haeran,  
Hag an evned, d'an nec'h,  
A gân eus o gwellan...

Ar bleun er prajeier, ezen flour ar maeziou,  
An heol sard ha lirin o sevel en oablou ;  
Eur rum gant o c'houez vad, eben skanv ha yac'hus,  
Egile dre e dân, a laront en eur vouez :  
O bezet evurus  
Enpad ho puegez !

Ha kleier ar barrouz, nag a oant hirie drant,  
Int o deus bet sonet evit ho Padeziant !  
Ha p'ho kwelent ho taou o tont 'barz an iliz,  
E vrallent sederoc'h ouz lein o zour uhel,  
'N eur rei d'ac'h, en o giz,  
O mennoziou santel.

Me gred ive Zent Breiz kenkoulz hag ho tud koz,  
 A dlee mousc'hoarzin ouz lein ar Baradoz,  
 Ha teul war an douar eur zell a drugare ;  
 Ho karante dener 're d'e evurusted,  
     Ha, hep mar, int ive  
     A zo deut d'an eured !

Pewien, tud pinvidik, kerent ha mignoned,  
 O deus holl dilezet o labouriou kaled,  
 Vit dont da zigas d'ac'h : ar re baour eur beden,  
 Ar re-all eul loden dimeus o c'halonou,  
     Pe c'hoaz eur c'hoarzaden  
     Gant o gourc'hemenou.

Dirak an holl draou-ze, me ive am oa c'hoant  
 Da gana ho tudi... Mes pebez nec'hamant...  
 Rak aon da vad am eus da denvalât ar gouel ;  
 Penoz e c'hallin-me lavaret d'ac'h netra ?  
     Ma mouez zo re izel,  
     Na ra nemed krena...

Ah ! perak n'am eus ket da vouezig drant, eostik,  
 Pa ganez hed an noz er c'hoat don ha sioulik ?  
 Oh ! neuze am bije kemeret ma Zelen,  
 Ha kanet warnezi dirak ar Vretoned,  
     Eur gaer a ganaouen,  
     Evidoc'h, daou bried.

Plijadur kalz ho peus, ha levezet hirie,  
 Ha petra a virfe ? Dleet eo, ma Doue !  
 Dalc'hmad ho peus renet eur vue ar gwellan,  
 Bet ez eo gant an holl ho yaouankiz meulet ;  
     Sed ho furnez breman  
     Paeet ha kurunet !

Ya, da furnez, mignon, a zo tremen paeet  
 Gant ar vleuen ken kaer e teus bet dibabet ;  
 Eur vleuennig ken koant, kutuilhet en draouien,  
 Traouien ken dudius dimeus hon Breiz-Izel ;  
     Hi zo eur berlezen...  
     Hi eo da durzunel !

Kâd e teus, nan hepken enni eun durzunel,  
 Pell welloc'h, eur wreg krenv, *gureg krenv an Aviel !*  
 En tu-hont d'he gened, pehini zo dispar,  
 He deus eur galon aour, tenzor a vadelez,  
     Hi vo war an douar  
     Elig da diegez !

Petra e larfen d'ei breman diwar da benn ?  
 Kalz am eus da laret mar larfen penn-da-benn  
 Da vue mad hag... Mes, anveet out ganti !  
 Dre-ze na chomin ket re bell da gaozeal,  
     Hag ec'h an d'achui  
     Buhan, hep hunvreal...

Ganit hi he deus bet eun den euz ar reisan,  
 Mad dreist ar re wellan, fur dreist ar re furan !  
 Da spered a zo eon, da galon zo kristen,  
 Ganit hi he devo bepred evurusted :  
     Rag eur c'hristen hepken  
     A zo eur gwir bried !

En tu-hont da ze c'hoaz hi zo seder da vad,  
 Bezan ez out ouspenn eur poanier, eur Breizad ;  
 Eur Breizad... Penn-kaled pa fell difenn ar Gwir !  
 Ganit hi a dreuzo hep spont môr ar vue...  
     Rag ar c'halonou dir  
     Na vent ket kâd bemde !

D'ac'h ho taou, mignoned, d'ac'h ma gourc'hemenou,  
 Ra vo hent ho pue goloet a vleuniou ;  
 Ha mar teufe Doue, eus kreiz e garante,  
 Da zigas en ho ti kalz a evnedigou,  
     Ra vefont holl neuze  
     Henvel ouz o zudou...

Bevet eta seder, ha pa deñ ar Maro  
 Da hench a ac'hanoc'h en trezek ho kwir Vro,  
 Ra zeñ d'ho tigemer en porched an Nenvou,  
 Holl Zent koz Breiz-Izel hag ho kerent karet ;  
     Setu ar mennoziou  
     A gas d'ac'h *Ar Yeodet*.



## Mariyonig

Naontek vla he devoa ; na koant, na divalo,  
 Eun tam ér da blijout ha hi laket faro ;  
 N'he c'hoarze ken buhan, eur bán a garante...  
 A lintre en e zell a wechou, koulskoude...



Pa digoueze d'ezi ober eur zell ouzin,  
 He seblante laret : Na te a blijfe d'in !



Me, dimeus eun tu-all, a oa Yan diberc'henn,  
 Sonj abed da zimei na oa deut c'hoaz em fenn ;  
 N'am oa ket kennebeud na dousig, na mestrez,  
 Ma c'halon a verve gant teneridigez...  
 Ha ma c'hoant ar brasan, gallout a ret kredi,  
 Oa kaout eur galon all henvel ouz ma hini.  
  
 Ebarz eun eured kaer en em welchemp eta,  
 Eno ec'h anveis anezi da genta ;  
 Hi he dije karet, me kement all ive,  
 Bezan en em gavet an eil tal egile ;  
 Mes eun dimezel all a zigouezas ganin,  
 Ouz tól Marivonig a oa a damdost d'in...  
 Nag a daoliou-lagad enpad ar pred neuze,  
 Nag a dezen fentus etrezomp, ma Doue !  
 Tezen, taoliou-lagad skoet a-dreuz, a hed,  
 Hep na sonjer ouspenn pa ver 'barz eun eured ;  
 Hag a-wechou ive ar c'homzou goustadik  
 Vijet malet ganimp stank, stank ha munudik...  
 Ar yaouankizou-all a c'hoarze dre zindan :  
 — Daoust na Petra c'hoarve etre Monig ha Yan ?  
 — Me gred, eme unan, e vo c'hoaz eureujou...  
 — Ya potr, eme eun all... Fristi hag ebatou ! —  
 Hag an holl da c'hoarzin ; ni na laremp netra,  
 Int a c'hoarze bepred... Hi, hi, hi... Ha, ha, ha !

Pa deuas fin ar pred, hep sonjal en neb droug,  
 Me, beteg ti he zud, 'ris da Vonig ambroug,  
 Dindan ar c'helve glaz ha dre an henchou don,  
 Hep lavaret eur gir, e tride hon c'halon...  
 Hi doanik eun nebeud, me abaf eun tammig :  
 — Nag eo brao an amzer, nekwir Marivonig !  
 Neuze he daoulagad a bare war ma re,  
 Hag e teuemp hon daou ken mud all adarre ;  
 N'eo ket hon doa damant o lavaret komzou,  
 Karout eo a remp kalz sioulder, peuc'h ar maeziou ;  
 Hag etre diou galon eun taol-lagad tener,  
 A lavar kalz hirroc'h eget komzou kaer, kaer...  
 Evelse an amzer ganimp a dremenas,  
 Ha goude an eured peb hini a dec'has,  
 Hadet gantan, hep mar, en kalon egile  
 Envoriou talvoudus hag a vleunias goude ;  
 Evel eur beajour war an hent poultrennet,  
 Pa chom faez en e zav war e lerc'h da zellet,  
 Marivonig ha me, ya meur a wech, marvad,  
 A zistroas ive war deveziou ken mad...  
 N'eo ket ar garante, mes eun draig henvel,  
 Hekleo eur gomz karet, chomet warlerc'h ar gouel,  
 Eun digare-all c'hoaz, an dra-man, an dra-ze,  
 A grouas etrezomp eur zeblant karante ;

Hag ar c'hartennou koant, eun daou pe dri lizer,  
Kaset n'ouzon penoz vit tremen an amzer,  
A reas d'imp kredi e oamp hon daou galvet  
Da vezan eun devez marteze unanet...

— Da vezan unanet !... Biskoaz c'hoaz, ma Doue,  
N'am oa sonjet ervad, na pouezet kement-se ;  
Lezet am oa ma fenn da heuilh e froudennou,  
Petra eo eul lizer etre yaoukizou ?

Siouaz ! Marivonig he doa kredet ervad,  
Ha dilezel he sonj, gwasan da galonad !  
Perak eta kana yaouankiz, karante,  
Pa na ver ket en zell da zimezi goude ?  
Koulskoude, ma Doue, c'hoaz eur wech sonj abed  
Da zimei d'ar plac'hig na oa deut em spered ;  
Ha n'hallen ket ive, hep bezan digalon,  
Lezel anei re bell da hunvreal ennon.  
Seulvui en deus padet, seul diesoc'h e ve  
Lakât eun den yaouank da ankouas eun hunvre ;  
Ha na chome ganin nemed eun dra d'ober :  
Laret ar wirione hep damant, ber ha ber,  
Setu me gwall nec'het... — Penoz, Gwerc'hez Vari,  
Ha dre petore penn laret eun dra ken kri ?  
Eur c'hélo ken poanius a vruzunche, hep mar,  
Hag a ranche kalon Monig gant ar glac'har ;

Chom hirroc'h da c'hortoz a oa kreski ar boan,  
Pa zo eun dra d'ober e fell ober buhan.  
Hag eun devez neuze e klaskis kalz a dro  
Evit espern d'ezi hirvoud, keun ha daero :  
Rak ar c'haletan tra evidon er bed-ma  
Ez eo bezan kiriek d'unan all da ouela...  
Siouaz ! kaer am oa bet lakât kalz a evez,  
Klask eur bern digare, sonjal peb tra gant pouez ;  
Kaer am oa bet skriva : — Na oamp ket gant Doue,  
Herve ma sonj, galvet d'unani hon bue...  
Evel eun taol-kurun ar c'hélo a frailhas  
Kalon Marivonig... — Ar plac'h d'in a skrivas :  
— « Gant eur galon vantret, Yannig, ma mignon ker,  
» E teuan da respont, da respont d'ho lizer...  
» Ar c'hélo a zo deut ken disonj ha ken kri,  
» Nan, nan, ze n'eo ket gwir... Nan, n'hallen ket kredi !  
» O ma Doue, perak n'eo ket deut ar maro,  
» Evit n'am ije ket klevet <sup>eur</sup>seurt kêlo !  
» Marvad, o Yannig ker, ho peus kavet eun all  
» Hag a garet welloc'h... O bezet didamall ;  
» Ouzoc'h n'am eus ket droug, nan, pell braz ac'hane,  
» Evidoc'h, en eneb, me a bedo Doue,  
» Me a bedo Doue m'ho po evurusted,  
» Rak me, birviken ken, na gavin joaüsted !

» Pa 'z eo breman koezet ma hunvreou karet,  
 » Ma plijadur ive a zo gante kollet ;  
 » P'eo tec'het ar bân-heol a deulas eun devez  
 » Em ine evurus tomder ha levenez,  
 » Ya, p'eo nijet breman na garan netra mui,  
 » Hag ar Maro hepken a c'hall ma frealzi...  
 » C'hoaz eur gir diwean... Oh ! me ho ped, Yannig,  
 » Dalc'hit bepred envor dimeus Marivonig ! »

Dimeus Marivonig mirit bepred envor...

Hag a-dreuz meneou, du-hont, war ribl ar môr,  
 Me wele eur goulmig, mantret gant ar glac'har,  
 O hirvoudi poanius war eun dilez digar ;  
 Me gleve he c'hlemmou... D'he foan e oan kiriek,  
 Ha, glac'haret d'am zro, me a ouelas dourek...  
 Forz pegeit e vevin, evel m'he doa laret,  
 Me sonjo, meur a wech en Monig ankeniet...

.....  
 Ha d'ac'h, tudou yaouank, e roin eur gentel :  
 Kent skoulma ho kalon, eostig ha turzunel,  
 Bezet ar vadelez d'en em sonjal ervad  
 Kwit da gavout goude poan-spered, kalonad ;  
 Mar na ve karante etrezoc'h, me ho ped,  
 Na sklabeet komzou nag a-dreuz, nag a hed ;

En eun eured eo brao hada joa, levenez,  
 Mes kredet ac'hanon, mar zo eun dra diez,  
 Ez eo sec'ha daerou eur galon zorc'hennet,  
 Zorc'hennet gant eur sonj, pe eun hunvre karet...





## AR MIGNON


D'ALFRED LAJAT « MAB-AN-ARGOAT ».

Pebez tra frealzus, kavout eur gwir vignon,  
Unan-all hag a zo eun eil c'houi-hoc'h-unan ;  
Unan an eus ganac'h eun hevelep kalon,  
En pehini, dinec'h, e tizammet ho poan...

Ar mignon 'vit an den a zo evel eun tad  
Pe c'hoaz evel eur vam, dalc'hmad leun a zouster ;  
Bezan an eus bepred aliou fur ha mad,  
A goue evel ar gliz ouz e galon dener...

Poan ho peus, pe enkreuz ? Ho mignon 'n eus glac'har  
Bezan hoc'h evuruz ? E joa a zo dispar...  
Karout e ra trubuilh ar pinvig hag ar paour !

Siouaz ! Ar gwir vignon a zo hirie tano,  
Mar hon deus unan mad... oh ! meulomp e hano,  
E garante zo d'imp talvoudusoc'h vit aour !



## Mouez eun Delen

D'AM MIGNON YAOUANK « ROC'HLANN ».

Eun noz war ma garrek e oan o tiskwizan,  
Dinec'h hag evurus, vel ma ven peurvuian...  
Sonjal a ren en Breiz hag en amzeriou gaer  
Ma oa enni an holl digabestr, dibreder ;  
Ma rene en pep lec'h ar peuc'h, al levez, e  
Ar gizioù mad ha fur hag ar gwir zantelez ;  
Ha sonj an amzer-ze, tec'het vel eun hunvre,  
A re d'in hirvoudi war stad ma Bro hirie...  
Gwechall goz, emeon, e save ar Varzed  
Evit difenn dalc'hmad Hermin ar Vretoned.  
Pa felle d'ar Gall brein pe d'ar Zaozon treitour  
Gwaska douar Arvor... Kerkent, vel eur gedour,  
Vije gwelet peb Barz o krigi 'n e delen,  
Hag o teurel dre-holl garm skiltr ar Stourmaden.  
D'e vouez krenv ha nerzus ar Breizad a zave,  
Hag ar Gall, hag ar Zaoz eus ar vro a dec'he...

Perak ive hirie na glever en hon Bro,  
 Pa 'z omp ken gwall-gaset, korn-boud ar brezello?  
 Pegeit, o ma Doue, e vo c'hoaz Breiz-Izel,  
 Gwasket ha mastaret gant an estren diboel?  
 Daoust hag en hon amzer n'eus ken ar memeus gwad,  
 O virvi birvidik en kalon ar Breizad?  
 Daoust hag aliou fur hon Barzed koz karet,  
 Vefe ganimp hirie dilezet, ankouaet?  
 Ha mar 'man c'hoaz ennomp tân sakr o c'harante,  
 Perak na zav dre-holl Barzed ter evelté?  
 Ma hadkembro Breiz, gant he frankiz gwechall,  
 He nerz hag he brazder en touez ar poblou-all...

Setu ar sonjou kri 'deue war ma spered,  
 P'am eus klevet zouden eur vouez kaer, kaer meurbed,  
 O tiston dudius war lein ar meneou,  
 Hag o tihun dre-holl hekleo braz ar c'hoajou...  
 Dre ma tride ganti ha lannek, ha traouien,  
 Am eus hec'h anveet evit mouez eun delen;  
 Gwech he sone dispar, tener, karantezus,  
 Gwech he c'hleven ive evel eur galv skiltrus,  
 Ha ganti, tro ha tro, ma c'halon 'barz ma c'hreiz  
 A zave d'an Nenvou pe a zailhe vit Breiz!  
 — Mes da biou c'hall bezan an delen drant ha ter,  
 A zon ken frealzus war douar Kalanher?

Piou gant e vizied a denn ouz he c'herden,  
 Ar beden galonek a glevan o tremen?  
 Piou...? — Mes te, o Roc'hlan, te ez eo ar Barz-ze,  
 Ha mouez kaer da delen eo a glevan du-ze...  
 Entanet on ganti, rak he c'hân zo kristen  
 Evel m' eo ar bugel a chach war he c'herden...  
 Oh! bez kristen eta, rak eur Barz n'an eo krenv  
 Nemed dre an ere 'zalc'h anezan d'an Nenv!  
 War ar vein-hir pell zo ez eo savet ar Groaz,



**Ha dre ar Fe hepken ar Barz a vezo braz !**

Gwenklan, ar Barz pagan, a zo eur skouer vad-tre,  
 Mes pell welloc'h ez eo Sant Weltaz, Sant Herve...  
 Heuilh bepred o roudou, mir ive an Envor  
 Dimeus ar garante o doa holl vit Arvor !

An hano-barz, mignon, a teus bet dibabet

A zo talvoudus dreist ; eveltan n'an eus ket !

**Roc'hlan!** — **Roc'h** vel eur roc'h te a chomo dalc'hmad

Stard, stard en ez kreden, en kreden ar Breizad !

O Barz ! evit da Vreiz te a vezo garrek

Soun ha nerzus 'n ez sav evit ar Brezonek !

Ha gant aon na deufe trubarded d'az gwallan,

Teus laket d'ez tiwall eur gouriz ar gwellan ;

**Lann!** — En dro d'it al lann gant pikou lem ha hir,

A rei eur gward enor, evel klezeier dir ;

Eneb d'eur seurt difenn netra na dalvezo,

Hag en despet d'an holl, da delen a gano !

Klevet e vo he mouez a dra zur, o mignon,

Tra ma kani warni gant fe grenv da galon,

Karante ar Werc'hez, da vam dous ha tener,

Ha hini da Zoue, da Grouer, da Zalver !

Klevet e vo he mouez gant ar gwir Vretoned,


A hirvoud c'hoaz hirie dindan ar C'hallaoued ;

Laret a refont holl, goneet evit mad :

— « N'an eo bet ar Breizad biskoaz trubard d'e wad,

Da vouez an telennou... War zao ! evit hon Bro,

**Keit m' he devo Barzed, Breiz-Izel na varvo ! »**





## KROAZ = AL = LANNEK

A-damdost da Bempoull, war douar Pleranek,  
Dirak ar môr divent hag en kreiz eul lannek,  
Pell ouz pep krouadur, tost d'an holl koulskoude,  
Hec'h unan a-us da chapelig koant Perroz,

Eno, war ar mene,  
E kaver eur Groaz koz.

Laket ez eo eno gant fe ar merdead,  
Da vezan evitan eun difennourez vad,  
Da diwall e lestrig eus an amzer garo,  
Da frealzi ive e wreg, e vugale,

Ma kavfont en distro  
Levenez a neve.

Ouz he zroad azeet, na kaeran da daolen  
A zispaka neuze dirak lagad an den !

Dirakan, tro war dro, hirran ma c'hall gwelet,  
Ar mor ken dudies a zeblant er pellder,  
Ouz an oabl unanet  
Gant e zae c'hlaz ha kaer.

Ouspenn dudi al lec'h, ar Groaz a zo brudet,  
Daoust e ma 'z eo distro, hi zo darempredet ;  
Oh ! nag a bedennoù he c'hallfe disrenvel,  
Pedennoù truezus mesket gant an daerou,  
Daerou gwreg ha bugel,  
Poaniet o c'halonou...

Rak aman eo e teu da ze ar c'himiad kri,  
Gwreg kez ar martolod, mantret, da hirvoudi ;  
Beteg aman e teu, e teu da welet c'hoaz  
Al lestr a gas gantan, du-hont d'ar moriou yen,  
A gas gantan, siouaz !  
He fried paour, he den...

Aman hec'h-unanig hag ouz ar Groaz harpet,  
Tra ma vezo gwelet hi na gwitao ket,  
Ha ken ma vo kuzet evit mad en dremwel,  
War al lestrig dister he lagad a baro...  
Pa vo kollet ar wel,  
He daerou a ruilho !

Neuze d'ar Groaz karet e vo laret ar boan,  
 Enpad eiz mizez hir nag a nec'h, nag a doan !  
 Ped ha ped evelti a zo bet deut aman  
 Da rei, hep gouzout d'é, d'ar bried a dec'he,

Ar c'himiad diwezan,  
 Rak hen na zistroe... !

Piou a laro d'ezi na vo ket he doare,  
 Evel kalz a re-all ken poanius marteze ?  
 Ha na deui ket eun de ar môr-ze en kounar  
 Da lonka gant al lestr ar vartoloded kez,

En eur hada glac'har  
 En he zi, intanvez ?

Setu perak bemde, da c'hortoz an distro,  
 Ouz troad *Kroaz al Lannek* aman hi a deui,  
 Nan da glask al lestrig, mes da laret d'ar mor  
 Bezan madeleuz ha digas c'hoaz d'ar ger,

Martolod an Arvor,  
 Ar paourkez pesketer...

Ha dre eur beden gaer, eur beden kalonek.  
 — Peden gwreg martolod, pa ouel dourek, dourek —  
 Ar plac'h a c'houlenn digant Mestr braz pep tra,  
 Rei enpad an-amzer da listri bihan Breiz,

Gant eur môr ar gwella,  
 Eun ezen flour ha reiz.

Ha da goulz an distro, pa deui miziou-du,  
 Pa gouezo an deui, pa nijfont a bep tu,  
 En kichen ar Groaz koz, aliesoc'h neuze  
 E vo kavet ar plac'h — gedourez aketus —

O furchal adarre  
 An dremwel koumoulus...

Mar tigouez er pellder d'eun dra bennak para,  
 War an tol en he c'heiz he c'halon a lampa...  
 — « Ya, ya, setu ar wern... Anveet eo ganin !  
 » Deus buhan, deus buhan... Oh ! deus eta, lestrig  
 Digas ma fried d'in,  
 Digas d'in ma Yannig ! »

Siouaz ! ma teu d'ar vro pep lestr nemed unan,  
 Ya, ma tizroont holl nemed hini he Yan,  
 E ve gwelet ar plac'h o vonet ankeniet  
 Hec'h-unan d'al lannek en eur guz he glac'har :  
 — He den n'eo ket kollet...  
 Distrei a rei, hep mar !

Na c'houllo ket kredi d'an neventi spontus,  
 O nan, n'hall ket bezan breman ken gwall-eürus ;




P'eman ar gwraze all en kreiz al levenez,  
 P'o deus holl hadkavet ar gwir evurusted,  
     Hi a vo intanvez,  
     Dilezet dre ar bed !

Ha koulskoude perak, perak c'hoantât en nac'h ?  
 Beuzet eo he fried en Island, paourkez plac'h ;  
 Na dalvezo ket d'ei hen gortoz el lannek...  
 ... Skrivet e vo breman hano an dianket,  
     En bered Pleranek  
     En touez ar « **Re-gollet** ! »

Ha goude, d'ar zerr-noz, hi a deuto bepred  
 Da welet c'hoaz ar Groaz, **Kroaz an Intanvezed** ;  
 Ha pa vo o tremen, an holl dud a laro,  
 O welet anezi hag en du, penn-da-benn,  
     E vo groet, barz ar vro  
     Eun intanvez ouspenn...

Eun intanvez ouspenn !... Hirvoud, anken, daero,  
 Stouet ouz troad ar Groaz, ar wreg paour a bedo...  
 Rak en kreiz an drubuilh, ar boan hag an enkreuz,  
 Ar Groaz a-zo evit ar galon glac'haret,  
     Eur gwir Frealzerez...  
     — Deut d'ei, tudou mantret !



## DOUE...

N'an eus Doue abed ! e lavar an dud fall,  
 Doue a oa mad-tre d'ar gwraç'hed koz gwechall...  
 Mes da dud a skiant, da dud eveldomp-ni,  
 Doue n'an eo netra, na dalv ket hen pedi !

Penez en eun amzer ken kaer hag hon c'hantved,  
 Komz d'imp a zoueou... ? Ar gwir evurusted  
 Ez eo bepred beva en kreiz ar blijadur,  
 Herve ar vue frank hag ar vue distur !

Hag evelse an holl a dremen o bue :  
 Bugale, tud yaouank ha tudou koz ive,  
 Pell, pell dimeus Doue ebarz an dizurzo...

.....  
 An-hunvre a achu ; pep tra 'n eus e amzer ;  
 Dirak falc'h an Ankou eo kouezet ar gevier ?  
 Doue a ve klasket pa dosta d'ar Maro !



## AR VILIN GOUEZET

Pell dimeus trouz ar bed, en eun draouien goant, goant,  
Elec'h veve he zud sioul, seder ha drant,  
'M eus gwelet relegou eur vilin bet gwechall  
Brudet ebarz ar vro... Pell zo ez eo kouezet;  
Hag an tremener dall  
Van outi na ra ket...

Nag a dra koulskoude d'an den ve o furchal,  
Larfe ar mogeriou ma c'hallfent kaozeal....  
Nag a evurusted n' o deus ket bet kuzet!  
En tiegezou plouz kollet en traouiennou,  
Ar peuc'h a zo karet  
Dreist d'an holl drubuilhou.

Poaniet braz ma c'halon on tostaet outi,  
Rak daoust e d'hec'h ankoua en dro d'ei zo dudi :  
A bep tu lanneier, bec'hiet a vleun melen  
A skanva d'al lec'hig zamm pounar e zilez



Hag eur waz o tremen  
A vouskan hep paouez...

Holl vein ar vilin baour, en he c'hreiz bern war vern,  
A zo breman kuzet gant an drez hag ar spern ;  
Na weler en o fez nemed eur men-mala  
Chomet en e c'hourve kichen toull ar rod vraz,  
Ha moger an toull-ma,  
Goloet a ill glaz.

Eun tam pelloc'h ar stank, sec'h evel eul lannek,  
A ro eur pèuri treut d'ar saout ha d'ar c'hezek ;  
Kollet he deus pell zo ha pâl, ha ruzelen...  
N'an eus en dro d'ezi nemed eur ween fô,  
Lec'h klever an ezen  
O vouda a daolio...

Kement tra a welan a ra d'in hunvreal ;  
Hag ar wazig drant drant, a glevan o ruilhal,  
Ha mouez skanv an avel o kana er foën ;  
O diou en em spered a digasont sonjou,  
Sonjesonnou laouen,  
Hag ive hirvoudou...

Nag e oa dous beva 'n eul lec'h ken dudius,  
Eus eur vue guzet, eur vue evurus !

Siouaz ! hirie an de hon milinou dister  
 Zo barnet da vervel, lazet gant ar re vraz,  
     Hag ar Barz-miliner  
     Gant se a zo a waz !

Rak hon milinerien oa gwechall, peurvuian,  
 Barzed pe ganerien eus ar re vrudetan ;  
 Perc'henn ar vilin-man oa ive, marteze,  
 Brudet braz evel Barz pe c'hoaz evel kaner,  
     Hag e zoniou bemde  
     Lake ar vro seder.

Marteze eo e vouez a glevan er foën,  
 E vouez pe, piou a oar ? Mouez klemmus e delen,  
 A deu c'hoaz da gana en dro d'ar vilin goz  
 Evit klask al lec'hiou he deus karet gwechall,  
     Ha dont enpad an noz,  
     Hed an de d'o diwall...

Pa gwitean al lec'h an ezen zo krenvoc'h,  
 Hag ar wazig vihan a hiboud sklintinoc'h !  
 Zeblantout a reont laret d'in en eur vouez :  
 — Trugare, trugare ! — Ma c'halon frealzet  
     A lar d'e aliez :  
     — M' ho kar, treo dilezet !



## “ Kroaz ar Vretoned ”

*Da F. Vallée “ Abhervé ” Sant-Briek*

Ar gwerziou, ar zoniou a zeblante maro,  
 Na glevet trouz abed oute ken en hon Bro,  
     Dilezet e oant gant an holl ;  
 Gante hon yez brudet, enoret a viskoaz  
 Enpad ar c'hantvejou, oa ankouaet, siouaz,  
     Ha war ar poent da vont da goll...

Dre hon maeziou kousket, ar Vretoned koz, koz,  
 Daoubleget gant an oad, a c'houlle : — « Daoust ha noz  
     » E vefe d'ar yez brezonek ?  
 » Daoust ha rok hon maro ha ni na wellfemp ket  
 » Hadsevel c'hoaz en Breiz ar Brezoneg karet,  
     » Yez an dud vad ha kalonek ? »

Darn ané, ô glac'har ! mantret gant an anken,  
 A hirvoude noz de er c'hoat hag en draouien,  
     'N eur skuilh daerou war stad o Bro...

Ha truezus larent da gern ar meneou :  
 — « N'hall birviken mervel Spered hon C'hendadou,  
 » Barzed neve, zavet d'ho tro ! »

Int holl, gwall c'hlac'haret war doare Breiz-Izel,  
 A ouele evelse d'he yez kaer ha zantel,  
 Ar maro kri en o ine...

Pa glevchont o sevel en dro d'e eur vouez krenv,  
 A zihune hekleo an douar hag an nenv :  
 — Beva rei ho yez adarre !

Beva rei adarre yez karet ar C'helled,  
 Trugare ha bennoz da Groaz ar Vretoned !  
 A zo zavet, ken lugernus,  
 Da rei bue d'ho Pro ha da skuilh warnezi,  
 Gant eur bannac'h heol-hanv, ar garante, ar spi  
 Hag ar gizioù koz ha yac'hus...

Kerkent hag ar c'hélo, an dudou frealzet  
 A gane evurus : — Hon bue zo hirret...  
 Hon yez a vevo a-neve !  
 Zevel a rent o fenn en eur drugarekât  
 An Doue-Galloudus a deue da lakât,  
 Warlerc'h an noz du, ar beure !

Gant Kroaz ar Vretoned peb breizad kalonek  
 A wel hirie o ren ar c'hizioù brezonek,  
 Ha gante an evurusted !  
 En pep tiad kristen an dud, ar vugale  
 A lenn ar Groazig koant gant kalz a garante,  
 Rag hi eo « Kroaz ar Vretoned » !

Ar gelaouen dispar a vale war an dro,  
 War roudou zent koz Breiz : evit Doue, ar Vro  
 — Eno 'man he zalvoudegez ! —  
 Enni pep gwir Vreizad a gav e blijadur,  
 Evel pep den yaouank aliou mad ha fur ;  
 Hi a had dre-holl madelez !

Ganti ar c'hoziad paour, arri tost, tost d'e ve,  
 O klevet he gwerzioù, a drid c'hoaz e ine,  
 Hag a sonj en e yaouankiz...  
 Gant he zoniou fentus an dud yaouank seder  
 A'gav ive dudi d'o c'halonou, tener  
 Evel ar bleun karget a c'hliz..,

O kroazig ar gwellan, kerz war araok bepred,  
 Evit mad Breiz-Izel, evit ar Vretoned,  
 Pegwir out krouet evit Breiz ;

Zav da benn ha hep aon, ma c'halli eun devez  
 Bezan eun el a beuc'h ebarz pep tiegez  
 Ha lakât ennan joa a-leiz !

Setu pezh a sonjan henoz dirak ma zân, (1)  
 Hag en eur hunvreal e teuan da vouskan

D'ar Groaz karet ha d'e Rener :

— Blavez mad ! Blavez mad ! Ha kalz a lennerien  
 Evit ma chomo Breiz eur vro fur ha kristen,  
 Leun a zantelez, a gaerder !!



(1) Gouel an Nedelek 1904.



## Malloz an Anaon

KINNIGET DA GEMENT LAER ANAON A ZO 'BARZ AR VRO.

Ar c'hlaz a zo tavet... Trouz abed dre ar vro,  
 Netra ken na drubuilh Spered ar Re-Varo...  
 Breman e c'hallont holl — evel m' eman ar c'hiz —  
 Dont da glask aluzen digant o c'henvroiz,  
 Hadsevel adarre eus donder o be yen,  
 Ha goulenn truezus : eur beden, eur beden !  
 Siouaz ! elec'h kwit, elec'h mont da vale,  
 E chomont er vered... Petra zo a neve ?

.....  
 Eun ezennig flour, flour a dremen er gwe braz,  
 Hag a zo henvel-beo ouz mouez klemmus ar c'hlaz ;  
 An ezen tam ha tam a zo deut da greski,  
 Zeblantout ra bezan mouez tud o tamanti...  
 Mouez tud o tamanti... Ya, mouez ar Re-Varo,  
 O sevel eus o be : henoz eman o zro !

Nag eo trist ha poanius !... Laret vefe klemmou,  
Troc'het gant an anken, mouget gant an daerou...  
— O bediz didrue, deut eta, me ho ped,  
Dihunet eur pennad ha deut holl d'ar vered,  
Deut da chilaou, mar plij, glae'har an Anaon,  
Mar n'hoc'h ket c'hoaz yenet, e ranno ho kalon...

— « Malloz ! eme eur vouez, krenvoc'h vit ar re-all,  
» Ra vezo milliget al laeron, an dud fall !  
» Ra vezo da viken disprizet o hano,  
» Int a chomo dalc'hmad mez o zud hag o Bro...  
» ... War ma gwele-marzo, me am oa, emezi,  
» Roet d'ar veleien peadra da bedi...  
» Gant iliz ma farrouz am oa lezet leve,  
» Ma vije, war ma lerc'h, pedet gant ma ine ;  
» Laret am oa d'am zud, daoulinet en dro d'in :  
» — Me ya dirak Doue... Oh ! bezet sonj ouzin !  
» N'eus nemed ar beden, hag ar beden hepken...  
» Oh ! pedet evidon... N'am dilezet biken !  
» Ha ma dorn a zinas neuze eun donezon  
» E rois d'an Iliz evit an Anaon...  
» Enpad eur pennadig freuz an oferennou,  
» Evel eul louzou mad a dorre d'am foaniou ;  
« Mes, siouaz, a greiz-holl... Ine paour dilezet !  
« Dinerz dirak Doue, ma foan a oa kresket...

» Sunveziou a deue an eil warlerc'h eben  
» Hep na goueze warnon gliz vad eun oferen...  
» Ha me da hirvoudi, gwasoc'h evit biskoaz :  
» — Pelec'h ez eo chomet an dud-se am c'haraz ?  
» Ha, koulskoude du-hont pa oan 'vont da dremen,  
» Holl a lavarent d'in : — N'hoc'h ankouafomp biken !  
» ... Pelec'h ez int chomet ?... Kerent, en han Doue,  
» Eur bedennig. mar plij... Mar plij, bezet true !  
» Kaer am oa damanti, oferen abed mui,  
» Ar gwasan, ma Doue, n'am bezo ken hini...  
» Roet am oa leve, ma leve zo laeret,  
» Hag evit ma ine na vezo ken pedet !  
» Rag eun dornad tud fall, milliget, digalon,  
» O deus, dre gasoni, laeret an Anaon...  
» ... Oh ! pebez tol fallakr ha pebez tra spontus,  
» Laerez eun den maro zo eun torfed heuzus !  
» Nac'h dimeus eun den beo e vad, e beadra,  
» Kement-se zo grevus ; koulskoude n'eo netra ;  
» Rag eun den en bue, da vihanan a c'hall,  
» Zoken a doliou-baz stourm eneb an dud fall !  
» Kichen eun den maro n'an ens ken a c'halloud,  
» N'am eus ken evitan nemed poan ha hirvoud...  
» Oh ! bezet milliget... ! Laeron braz an Iliz,  
» Hon moueziou eneb d'ac'h a zavo en peb giz !

- » Klask a red digare... — Gouarnamant abed  
 » N'an eus gallet, en ven, flastra al Lealded !  
 » Klask a red lezennou... — Na barner, na lezen,  
 » N'o deus laret biskoaz kemer mad an estren !  
 » Kaer en do an nerz-goue ober d'ar Gwir plega,  
 » Ar Gwir a chomo Gwir... N'hallfet ket en mouga !  
 » Hirie ez omp laeret... Arc'hoaz ni a drec'ho,  
 » Doue a zo d'imp test hag a glev hon c'hlemmo !  
 » Na dec'het ket eta, tud lorc'hus ha diboell,  
 » Gant ar madou laeret, n'hallfet ket mont a bell...  
 » Rag dre-holl, kaer ho po, dre-holl, bemnoz, bemde,  
 » Malloz an Anaon a zammo ho pue ! ! »

.....  
 Ar vouez a davas mik... Hag hekleo ar malloz,  
 A zistonas garo neuze en kreiz an noz...  
 — Oh ! bezet milliget ! laeron an dud varo,  
 Hirie ez omp gwasket... Arc'hoaz e vo ho tro !



## AR VOTADEG

Kwitât e ris ar bourk, rukunet ha heuget,  
 Taolen ken hudur all n'am oa ket c'hoaz gwelet !  
 Na dalve ket en nac'h, biskoaz, biskoaz urz vad,  
 N'an eus gallet sevel diwar labour korfad ;  
 Keit ma vo evelse, ar gonid a vo treud,  
 Rak dimeus eur sac'h glaou na deuto biken bleud !

Mar goar en implia, pep den an eus hirie  
 Eur benveg ijinus ; fall daonet pe vad tre.  
 Herve e dam labour e vo lod an den kez,  
 D'ezan e vo an droug, d'ezan ar vadelez...  
 Koulskoude ma karfe, nag a evurusted,  
 Ha nag a blijadur hag a beuc'h dre ar bed !  
 A dra zur, mar chomfe gant pep den e frankiz,  
 Ma c'hallfe, didamant, rei e vouez hep diviz,  
 Na wellichemp ket breman ar Gasoni hudur  
 Oc'h ober d'imp lezen hag o talc'hen ar stur...



Mes adalek ma ve gwelet eun tam paper  
 Etre daouarn eun den ha n'eo ket disket kaer,  
 E teu kerkent bleizi, dindan kroc'hen denved,  
 Leun a gomzou flour, flour, tener, melus meurbed...  
 Peurvuian n'o devo na micher, na danve :  
 — « Bah ! diwar goust Fanch-Kouer ni a vevo ! emê  
 » Brao e vo d'imp bouta ar mevel war ar mestr,  
 » En eul laret d'ezan : — Bez eun den digabestr !  
 » Hisa refomp ive ar mab eneb d'an tad,  
 » Ha d'ezan e larfomp : — Da dro a zo, marvad !  
 » Ha d'ar bewien goude : Bevet ar Republik,  
 » Ra vezo troad ar paour war goug an den pinvik !  
 » Hag evelse bepred ni hon devo moueziou,  
 » Ha goude, war an holl, e tennfomp hon zeodou...  
 » Mar na gerz ket an traou ganimp evel hon c'hoant,  
 » E glaskfomp d'hon zikour hostiz ha gwin-ardant ;  
 » Ouz eur bannac'h Ioko Gwiljan n'halla ket stourm,  
 » Bezomp eta dinec'h... Demp araok, ha difourm !  
 » Hon holl enebourien pa welfont ac'hanomp,  
 » A laro truezus : — Oh ! eur vez eo... Tec'homp !  
 » Ha mar na dec'hont ket, rak kaled eo o fenn,  
 » E huchfomp krenv warne : — Na fell ken a Re-Wenn !  
 » Ar Gwenn a die tec'hel dirak ar « *botred-ru* »...  
 » Allô, evaj d'an dud, ha da voti dustu !

» Ha mar ve red ouspenn e savfomp war ar groaz,  
 « Eno e tigorfomp hon geno brasoc'h c'hoaz :  
 » — Gwechall, mignoned kez, henvel ouz al loened,  
 » Ho tadou koz n'o doa nemed yeod evit boued...  
 » An noblanz a oa mestr, ive ar veleien,  
 » Hag an holl a zente dimeus o gourc'hemen...  
 » Noblanz ha beleien a garfe c'hoaz sevel,  
 » Marvad c'houi n'hoc'h ket zod ? C'houi zo mestr, int mevel !  
 » Eus ar pez a larfomp, na gredfomp ket eur gir,  
 » Mes ar bobl a laro : — Kement-se a zo gwir !  
 » Rak — hep diskadurez — an dud na glaskont ket  
 » Gouveout petra oa an amzer dremenet ;  
 » Ha mar voulomp anê eneb d'ar veleien  
 » Ez eo dre ma kavomp, eno, eur gwall zouten :  
 » Pa ve dispartiet denved ha mesaër,  
 » E ve brao, brao d'ar blei ober e droïou kaer !  
 » Mar na ve ket awalc'h e c'hallfomp c'hoaz goude  
 » Huchal abouez hon fenn : — *Vive la Liberté !*  
 » Ar gir-ze e-unan ha gantan... bannac'hou,  
 » A lako da virvi ar gwad er gwaziou...  
 » Ar paourkez Fanch neuze, war an tol dallet pik,  
 » Hanter-veô, a laro : — Ya... Gwin-ardant ha mik !...  
 » En hano ar Frankiz e vouez a vezo d'imp,  
 » Ha, frankiz d'hen gwada a vo lezet ganimp...

» Rak, pegwir a renomp, daoust e n'hon deus netra,  
» Gant madou an dud all ni gano : *Tra, la, la !!*

*Frankiz, nag a dorfejo*

*A ve groet en ez hano !*

Oh ! ya Frankiz, Frankiz... O te, gir burzudus,  
Perak en ez hano kement a draou mezus ?  
Perak e teuez-te, dre da hano hepken,  
Da lemmel e skiant digant ar paourkez den ?  
Perak dre da hano, e koll an den spered,  
An em lak izeloc'h 'vit al lousan loened ?  
— O nan, Frankiz, Frankiz, n'eo ket te a ra ze,  
Mes an hini a zo diouit dishenvel-tre !  
Rak da hano, Frankiz, n'hall bezan *Liberte*,  
Nemed hen a harpfe dre-holl ar Wirione !  
Nemed hi a harpfe Furnez ha Lealded,  
Al *liberte* n'hall ren en neb lec'h dre ar bed !  
Nan, n'eo ket ar Frankiz... Ar Gasoni direiz  
Eo a laka dizurz ebarz ar vro a-leiz ;  
Hag evit peurdalla an dud gwelloc'h a ze,  
An dizurz a gemer mantell al *Liberte*...  
— Oh ! gouela e ran c'hoaz, gouela gant ar glac'har,  
Pa welan stad mantrus ma c'henvroiz digar.  
Ar votadeg... Fœei, fœei !! Eun toullad tud meô-dall,  
Douget, banter-stlejet gant eur rummad tud-all

O zellou dislonket hag o fenn o vralla,  
O dilhad labeet, eur c'hlaouren o koueza ;  
Eun troad o vont da Vrest, egile da Bariz,  
Daou du ha kreiz an hent ha c'hoaz e sellont piz !...  
Kement-se, da c'hortoz ma ruilhfont a goste,  
Eno, digor o forn, a c'houlfont dour goude...  
Ha ze n'an eo netra ; tec'het eun tam pelloc'h  
Hag e welfet re-all henvel-beo ouz ar... moc'h !  
P'an eus karget e gorf al loen, da vihanan,  
A oar pegoulz paouez... Ma Doue, a re-man  
A garg betek mervel ; nan betek dislonka  
Ha teul eun tammig kresk kentoc'h evit mouga...  
Neb na vo ket re veô a gavo eur yec'hed,  
Eur blijadur dispar o teul tân ha moged ;  
Ar malloz, ar nondi, pe chapeled Satan  
A dec'ho dipitus eus korf an amprevan ;  
Ha, mar kav war e hent eun eubeul eveltan,  
Eun nebeud taoliou-dorn... An trec'h vo d'ar c'henvan !  
Abenn eur pennadig unan a grancho gwad,  
Egile a vezo duet korn e lagad...  
Ha nerz ar gwin-ardant, dimeus daou den reizet,  
A rei daou enebour... An evaj milliget !  
Ha sed aze petra e hanver ar Frankiz...  
— Daoust ha n'eo ket spontus, laret, ma c'henvroiz !

Evidon, na c'houlfen birviken, gant ar vez,  
 Kavout digant mevier, nan, an disteran mouez ;  
 Ma' z eo hudur d'an dud rei o mouez er stad-se,  
 Huduroc'h êz eo c'hoaz bezan hanvet gantê !  
 Ha, pa welan gwerza ken buhan eun ine,  
 Lakat dindan an treid enor, brud-vad ha fe,  
 Ya, pa welan eun tad, hep sellet war e lerc'h,  
 Hep sonjal en e wreg, en e vab, en e verc'h,  
 Pa welan anezan o tilezel a-grenn  
 Kenteliou ar Furnez war zigare *ru, gwenn*,  
 E huchan gant kounar : — « Petra rez, o mevier,  
 » Gwerza da diegez evit tregont diner ?  
 » Lemmel dimeus da di ar peuc'h, ar garante,  
 » Muntra kalon da wreg, ine da vugale ?  
 Ha, heuget evit mad dimeus votadeier,  
 Elec'h na wel an den nemed droug ha gevier,  
 E tapan ma faper ha, warnezan d'am zro,  
 E skrivan gant kalon : **Ma Doue ha ma Bro !**  
**Evit Doue ha Breiz !** An daou c'hir-ze hepken  
 A dlefe d'ar Breizad bezan eur reôlen...  
 — An neb n'eo ket kristen, neb na gar ket e Vro,  
 A dle bezan harzet da dostât d'ar c'hargo ;  
 Neb na zent ouz Doue, neb na bleg d'E lezen,  
 Na dle ket bezan gouest da ren ar gristenien !

.....  
 Pell a vefomp, marvad ; mes pouez ar Gasoni  
 A zigorro, m'hen toû, daoulagad pep hini ;  
 Deus forz bezan peilhet, disprizet ha taget,  
 Deus forz bezan touzet, kignet ha gwall gaset,  
 Lêr ar paourkez Fanch-Kouer a deui da danilha,  
 Ha neuze *Malloz-ru !* da gement hen gwaska  
 Neuze ar votadeg na vo ken eur marc'had,  
 Na vo ket kennebeud tra ar c'hentan korfad :  
 Ar votadeg a vo tra an dud a galon,  
 Tra an dud a zever, an dud leal hag eon ;  
 Tra an dud a glasko pep mad o c'henvroiz,  
 Harpet war an Urz-vad, an Doujanz, ar Frankiz,  
 Hag hon Bro, dizammet dimeus gwaderezed,  
 A vleunio adarre, kaer, lugernus meurbed,  
 En eul laret d'an holl : — **Peuc'h, Frankiz, Karante,**  
**N'hallont beva en Breiz en diavez Doue !**





## An nôr Drailhet

D'AN AOTRO HERVÉ, PERSON PLUFUR.

A bep fallagriez oe gwelet dre ar vro ;  
Ar Gwir a oa trec'het gant ar Gaou tro-war-dro.  
Evel eur wagen-vôr flastret ganti peb tra,  
Ar spered dizoue a deue d'hon gwalla...  
Dirakan pep tra gaer a vije labeet,  
Dindanan pep furnez a vije mastaret ;

Lealded ha Glanded, kaeran traou zo er bed,  
A zo deut da vezan divalo braz meurbed.  
An devez a hirie n' o deus talvoudegez  
Nemed al loustoni, an droug, an hudurnez !  
— Red eo, eme ar Fall, mouga ar Fe gristen,  
Kredennou diskiant n' hallont ket beva ken !  
Kredennou gwrac'hed koz, mad en amzer gwechall,  
N'int ken dimeus ar c'hiz ; breman e fell traou-all !

Hag eur pennadig zo— avel a zotoni, —  
Ar bed zo daoubennet, trubuilhet mui-ouz-mui ;  
Menec'h, leanezed, breudeur ha beleien,  
Servichourien Doue, mignoned ar bewien,  
Holl ez int gwapeet, hargaset, harluet,  
Barnet hep lealded, tamallet ha laeret.  
Dirak an torfejou ken kri ha ken poanius,  
Dirak ar fallente, en pep stum ken heuzus,  
Kounar ar bobl kristen a deuas da grozal,  
Hag ouz an drubarded e stourmas reut raktal...  
En despet d'o c'halon ha d'o fe birvidik,  
An nerz goue a drec'he an dudou reuzeudik ;  
Kraban an Diaoul a zav zoken war an iliz,  
— Petra a refomp-ni outan, ma c'henvroiz ?

Eun de, ar sperejou a zo nec'het da vad,  
Keleier fall a deu hep paouez ha dalc'hmad...  
— Hepdale, e larer, a vezo mastaret  
An iliz kaer ha koant 'lec'h omp bet badezet ;  
C'hoant o deus an dud fall, c'hoant d'ober eur vro goue,  
Gant Bro ar Vretoned, Bro ar zent hag ar Fe...  
Kerkent hag a bep tu an holl a vouez uhel,  
A lavar kounaret ! — Biken, kentoc'h mervel !  
Biken, emê, biken, ni a chomo bepred,  
Kristenien, Bretoned, tud ter, pennou-kaled !

Deuont aman eta !... An dud fall a welo  
 Hag en oar ar Breizad mervel c'hoaz vit e Vro... —  
 Dont a rejont dre-holl ; neuze en pep parrouz,  
 Eun de, dreist ar re-all, e savas brud ha trouz...  
 — Petra zo a neve, ma klever, ankenius,  
 Ar c'hloc'h-galv o teurel taoliou lem ha skiltrus ?  
 Petra zo a neve?... Tân ? — Kalz wasoc'h, siouaz !  
 Buhan war an avel ar c'helô a redaz...  
 An iliz vinniget a zo breman kelc'hiet,  
 Den n' hall tostât outi ; an dra zo difennet !  
 Setu perak an dud a zired leun a spont  
 Endro d'an iliz koz... Mes petra a welont ?  
 O bered ken peuc'hus, o beredig zantel,  
 A zo deut da vezan... Oh ! eun dachen vrezel... !  
 Eur vanden zoudarded, archerien war gezek,  
 Gante *Potr-al-Lezen*, hag int holl gwall-vezek,  
 A glask, unan ané, teul e bao war an nôr,  
 Ar re-all hen harpa d'ober an **Invantor**...  
 Ar bobl a deu bepred da zifenn e iliz,  
 Da huchal d'al laeron : — Frankiz, frankiz, frankiz !  
 Dirak kounar ar bobl ar Fall a gemer doan,  
 Al laer n' eus ket amzer hag a renk mon buhan :  
 — « En hano al Lezen, digoret d'imp an nôr ! »  
 E huch al laeron gars, war ar paourkez Pastor,

— « En hano al Lezen ? eme ar pastor mad,  
 » Lezen abed er vro na raïo d'in kwitad,  
 » Ha dilezel ganac'h gwiriou an iliz sakr,  
 » N'hallan ket en ober hep bezan den fallakr ;  
 » Ma c'harg eo o diwall, biken na vin trubard,  
 » Betek bezan trec'het me o difenno stard !... »  
 — « En hano al Lezen ! An eil gwech eo, aotro,  
 » Mar na c'houllet plega, neuze c'houi a dorro... »  
 — « Terri a rin kentoc'h ! » — Ha mouez beleg Doue  
 A zo kerkent stanket... An dud a lar ! — True !  
 — « En hano al Lezen ! An daerved gwech, houman,  
 » Digoret d'imp an nôr, rak ni eo ar c'hrenvan... »  
 — « An Nerz a zo ganac'h, ganin eman ar Gwir,  
 » C'houi ho pezo, m'hen goar, ya, an diwean gir,  
 » Mes na vo ket laret en do ar mesaër,  
 » Dilezet tra e vestr etre daouarn al laer...  
 » Kemer a ran hirie Anaon ar barrouz,  
 » Da vezan testeni dimeus ho micher louz ;  
 » Ober rin ma dever, ma dever hep sponta,  
 » Beleg on da Zoue, difenn a rin e dra ! » .  
 .....  
 Ar bobl a zo didrouz ; *Potr-al-Lezen* a gren,  
 Eur peuc'h gwall ankenius eur pennadig a ren...  
 — « Aman buhan, potred, pellaït an aotrou,  
 » Ha goude, didamant, d'an nôr gant benviou ! »

Ha daou archer garo a ziframm den Doue,  
 Hag hen kas, divergont, da ouela a goste...  
 Breman, da vihanan, al laer a c'hall poanial,  
 P'hen deus ar mesaer war e dreid eun hual...

Eun nebeud **boued-ifern** a goll amzer ha poan,  
 A drailh o benviou... Mes an nôr na ra van!  
 + « Ar vouc'hal, ar vouc'hal ! eme *Potr-al-Lezen*,  
 » N'hallomp ket marc'hata ha termal da viken...  
 » Allo, c'houi zoudarded, war araok ha kalon,  
 » An nôr a zigoro, en despet d'ar person ! »  
 Neuze, o' tra spontus ! eur zoudard a dosta,  
 Eur gourc'hemen ken fall a ra d'ezan krena,  
 Karet en dije well, hep mar, ober traou-all,  
 Eget plega, hep klem, da lezennou ken fall ;  
 Mes an urz zo roet, eun urz garo a kri,  
 Ar gourc'hemen zo striz, n'haller ket dizenti !  
 ...Eun taol bouc'hal pounar... O glac'har hag anken,  
 A ra d'ar gristenien loskel eur griaden !...  
 An taoliou a stanka ; o hekleo truezus  
 A ziston en iliz... Oh ! nag ez eo poanius !  
 Ar c'hloc'h a zon klemmus, klemmusoc'h vit biskoaz,  
 E vouez a vesk daerou gant hirvoudou ar c'hlaz...  
 Ar bobl war e zaoulin, mantret gant ar glac'har,  
 A zistank da ouela dirak an dud digar ;

Us d'ar vered zoken ineou an dud koz  
 A darnij hag a glem, hag a deul o malloz...  
 Zeblantout a reont huchal d'o bugale :  
 — « Oh ! difennet eta, difennet ti Doue ! »  
 Ar vouc'hal, didrue, a sko bepred stank, stank,  
 Hag en dor an iliz, he deus groet eun toull frank ;  
 Dre an toull ez eo bet an nôr baour digoret,  
 Ar *Gwir gant an Nerz-goue eur wech ouspenn trec'het !*

Hag an hailhoned louz o deus, en ti Doue,  
 Teulet o fao hudur war bep tra, pep danve...  
 Emæz ar gristenien, dour en o daoulagad,  
 Gant doujanz ha gant fe a zastumas ervad  
 Tammou an nôr drailhet ; hag evel relegou,  
 E stardchont aneze war boull o c'halonou...  
 Bezan e voïnt dalc'mad eun tenzor talvoudus  
 A zigaso sonj d'ê eus eun devez skrijus ;  
 Bezan vefont ouspenn eun testeni a Fe,  
 Hag a lako bepred lorc'h en o bugale.  
 O bugale laro gant eur galon gristen :  
 — Hon zud koz a stourmas stard evit o c'hreden ;  
 Pa fellas d'an dud fall labea an Iliz,  
 Hon Zadou a zavas da zifenn ar Frankiz !  
 Enor, enor d'eze ! O bugale vihan,  
 A outo eveltê, mar ve red, mont d'an tân...

Biken, en Breiz-Izel, nan, ar Fall na gludo,  
 War roudou hon zud koz dalc'hmad ni a gerzo !  
 « Ni a zo bugale d'an dud a zoug bleo hir,  
 » N'hallont bezan trec'het p' o deus roet o gir ! » (1)



(1) Lavariou Brizeuk, troet en brezonek.



## An Anaon

« Pedomp eta braz ha bihan,  
 » Koz, yaouank, tud a bep stad,  
 » Evit an Anaon en poan,  
 » Oh ! pedomp a galon vad ! »

Noz gouel an Holl-Zent ! Moueziou ar c'hleier  
 A zam ma spered a boan, a breder...  
 Deut ez on aman en kreiz ar c'hoat bras  
 O sonjal pellât hag evit ankouas  
 An envor poanius a wash ma c'halon  
 Gant tristedigez gouel an Anaon.  
 Karet am ije marteze tec'hel...  
 Ha c'hoaz nan ! — Pep tra a deu d'am gervel  
 Ha da laret d'in : — « O kemer true,  
 Lavar eur beden evit hon ine ! »


An noz a zo splan, an oabl digoumoul,  
 Ar reo-gwen a goue war ar bed sioul ;

Ouz lein an Nenvou, steredennet kaer,  
 Al loar o sevel a strink he sklerder,  
 Deliou ar c'hoajou n'int ket c'hoaz kouezet,  
 Mes an darnvuian a zo alaouret,  
 Ha na c'hortozont nemed eun ezen  
 D'o distaga ouz ar skour da viken...  
 O kaeran taolen evit eun hunvre  
 Mar na vije kaon... — Peuc'h, en han Doue  
 Dre ar vro tro dro, eus an holl douriou  
 Ar c'hleier a deul o c'hlemmadennou,  
 Hag eus an draouien da lein ar mene,  
 N' eus nemed eur galv : kemerit true !...  
 Ar c'hlaz hirvoudus a garg an douar  
 Gant eur voubouen zo leun a c'hlac'har...  
 Kerkent, o burzud ! gant ar c'hlaz galvet,  
 Dre-holl, en dro d'in, bue zo savet :  
 Ar c'hoat a zihun dimeus e sioulder,  
 Hag an ezennig a c'houe gwall-dener,  
 An deliou melen a grog da drouzal,  
 A goue d'an douar... Na gredan finval...  
 Holl a-us d'am fenn o deus tarnijet,  
 En dro d'am botou ez int 'n em vodet ;  
 Setu me nec'het ; trouz peb delien sec'h  
 A zeblant mouezig eun ine en bec'h !

Ha me, hep gouzout, a chom war o hent,  
 Koulskoude henoz, evel diagent,  
 E kustumont c'hoaz dont d'an tiegez  
 Elec'h tremenchont o zam buegez...  
 An nosvez-man eo Noz-an-Anaon,  
 Henoz e klaskont peden hon c'halon ;  
 — O, ma mignoned, na varc'hatet ket  
 Eur bedennig d'an Anaon karet !  
 Breman eo o zro ; arc'hoaz hon hini ;  
 An amzer a deu, an Ankou zo kri...  
 Dre-ze pa glevan trouz deliou ar c'hoat,  
 Hag an avel flour skanv o c'houbanat,  
 Pa glevan ac'han kân trist eur gaouen.  
 O sevel du-hont eus eur goz derven,  
 Pa welan a-dreuz da vannou al loar  
 O nijal didrouz skeudennou liou-koar,  
 E laran dustu : — Setu ineou  
 O redek ar vro, o klask pedennou...  
 Darn ane a ouel, darn-all a hirvoud,  
 Ha war ma c'halon o deus holl galloud ;  
 Ha gant kalz a fe 'laran eur beden,  
 Eur beden, evit « **Ar re n'emaint ket !** »  
 Int o deus pleustret al lec'h a bleustran,  
 Int o deus karet an traou a garan ;



Da ouel an Holl-Zent o deus aliez  
 Sonjet en poaniou an ineou kez...  
 A greiz-holl warne eo deut ar Maro,  
 Ar Varnedigez a zo bet garo ;  
 Evelte ive — hepdale, marvad, —  
 Ma ine a vo en hevelep stad ;  
 Evelte e teuf da c'houlén zikour,  
 Da glask aluzen eur werennad dour...  
 Neuze, ma Doue, piou sonjo ennon ?  
 Piou dre ar vro-man a bedo 'vidon ?  
 Daoust hag eur mignon, eur mignon hepken,  
 A glevo er c'hoat klemmou ma zelen ?  
 ... Me a gred... An Anaon anaoudek,  
 N'ankouaont ket eur beden galonek !



## Avel ar Yaouankiz

Daoust ha bezan a zo eur potr yaouank hepken,  
 Ha n'en deus hunvreet frankiz, avel, frouden ?  
 Pelec'h eman hennez n'an eus gwech pe amzer,  
 Savet war ribl an dour kestell uhel ha kaer ?  
 Pelec'h eman hennez n'an eus ket c'hoantaet,  
 Bezan eur reder-bro, pe c'hoaz eun den brudet ?  
 Neblec'h ! — An ugent vla, ar vué o strinkal,  
 A lak pep den yaouank da gana, da nijal...  
 Eur sec'hed braz a ve d'anavezout ar bed,  
 Ha netra n'hall terri c'hoant direiz ar spered.  
 Ar servij da gentan ; goude kêr ha broiou,  
 Kargou, pinvidigez da leunia kalonou ;  
 An diezamanchou na vezont ket kontet,  
 Gant tân ar yaouankiz pep tra a dle kerzet !  
 Daerou eun tad, eur vam a gont nebeutoc'h c'hoaz :  
 Daerou a ruilh hirie a baouezo warc'hoaz...

Setu ar c'hoantaden a grog en pep kalon,  
 Hag ar c'hoantaden-ze n' espernas ac'hanon.  
 Pevar bla warn-ugent ha ma servij achu,  
 Em gwaziou yaouank ar gwad a ruilhe dru ;  
 Baleet am oa bro, redet am oa môriou,  
 Eur martolod n'hall ket chom en kreiz ar c'hoajou...  
 Hed an de ha dre-holl e hunvreen d'ar môr,  
 Ha pa digoueze d'in, ouz tosennou Arvor,  
 Furchal ar vro tro dro ha zellet er pellder,  
 E vijen evurus... Rak eur voren dener  
 Ledet war an dremwel evel eur vantell vraz  
 A vije evidon eur zeblant a vôr glaz ;  
 Pell, pell dimeus an aod, vel eur pesk war ar sec'h,  
 Ma c'halon a wenne... Na gaven peuc'h neblec'h !  
 Ar môr a zo eur vam evit ar merdead,  
 Ha pa gar he bugel he c'harante a bad ;  
 Bezan ez eo ouspenn eun dousig, eur vestrez  
 Hag a dalc'h he c'hoantiz hep ober d'ezan lez...  
 He c'hân a bep eil tro a zo garv ha tener,  
 Ha liou he gwiskamant a dro gant an amzer ;  
 Evit ar c'halonou dalc'hmad lec'h karante,  
 Evit an daoulagad taolen bepred neve,  
 Neb an eus chilaouet mouez tener ar Vorgân  
 Gwaz eo ze evitan, kelc'hiet vo gant ar c'han !

Ha ne vezo ket brao outi hen distaga,  
 Kredet mad ac'hanon, gouzout e ran an dra.  
 Rak mar karen ar môr eo e klasken ennan  
 Frankiz ha levez ar muian ar gwellan...  
 Frankiz ha levez !... Evned o tarnijal,  
 Listri o horjellat, o gwerniou o strakal ;  
 Gwagennou zod ar mor o sailhat, fuloret,  
 Avel a-us d'ar penn o yudal kounaret ;  
 Berniou pounar a zour o koueza war ar pont,  
 Ha martoloded gweon o vonet hag o tont !...  
 Pe c'hoaz môr dudius, ster vraz ha mezellour,  
 War behini e red eun ezennig flour, flour,  
 War behini eul lestr dispak e oueliou gwenn,  
 O zeblantout kousket o c'hortoz korventenn,  
 O zeblantout henvel, henvel ouz gouelan faez,  
 A zec'h e ziou-eskell goude môr digompouez ;  
 War gwerniou al lestrig merdeidi evurus  
 Luskellet o ine gant zon karantezus,  
 Hag o feden dener douget war an avel,  
 O nijal evité betek bro Breiz-Izel,  
 O nijal evité betek eun draouiennig  
 Evit sec'ha eno daoulagad eun dousig.....  
 Piou eta a c'hallfe stourm ouz eur seurt hunvre  
 Hadbezan martolod oa ma c'hoant adarre !

Hag eun devez, doanik, e lavariz d'am zud ;  
 War an tól, eur pennad, e chomchont o daou mud...  
 — « Sonj c'hoaz, emema zad... M'hengoar, yaouank ez out  
 » Ar môr a c'hall bezan talvoudus evidout ;  
 » Ne gav ket d'it ive penoz war an douar  
 » En em dennfes ervad ? — Gwelloc'h ! war ma lavar,  
 » C'hoaz eur wech, gra da sonj ; da c'hoant vo ma hini,  
 » Ha me a gavo mad evel ma tibabi... »  
 Ha ma zad a dec'has, mes e gomz diwean  
 A oa muioc'h mouget eget ar re gentan...  
 Ha dre ma pellae, p'hen gwelen o tec'hel,  
 Eur vouez a lare d'in : — Perak hen dilezel ?  
 N'eo red abed d'it-te kwitât da dud, da vro,  
 Mar ve red d'it biken... Abred awalc'h e vo !  
 Ha ma mam, o ouela, a lavaraz ive :  
 — « Na gredan ket, ma mab, e rafes an dra-ze...  
 » Petra ta e vank d'it en ti da vam, da dad,  
 » Evurusted e teus ha plijadur, marvad !  
 » Petra e talv d'eur vam bezan bet bugale,  
 » Mar tigoue d'ei beva hec'h-unanig goude ?  
 » Mar ne chom eur bugel da harpa he c'hozni,  
 » Kalz well a vije d'ei n'he defe bet hini !  
 » Oh ! pa glevin d'ar goanv an avel o krozal  
 » E teuin, gant glac'har, bemnoz da gunudal...

» True ouz ma daerou... Kalon mam zo tener,  
 » O chom en han Doue, chom gant da dud er gêr ? »  
 Ma mignoned, d'o zro, warlerc'h en em gave :  
 — « Petra hon deus klevet ?... Gwir mad eo kement-se ?  
 » Kwitât a rez da dud, kwitât a rez da vro ?  
 » Red eo d'it bezan zod, ya zod, war hon menno !  
 » Bezan e teus kalon, ive anaoudegez,  
 » Petra 'ri elec'h all ? Koll da dalvoudegez,  
 » Ha bezan ankouaet en touez eun toullad tud ;  
 » Aman da vihanan, hep kavout kalz a vrud  
 » E c'halli ober vad... Ne gav ket d'it ouspenn  
 » He deus ezom da vro tud evit he difenn ?  
 » Perak neuze tec'hel ? Chom aman da veva  
 » Ha kas da sorc'hennou pell diouit da stoupa ! »  
 En despet d'aliou leun a boell, a furnez,  
 Roet gant tad ha mam, gant mignoned a bouez,  
 Ma sonj e oa groet mad : martolod e vije,  
 Ha netra, nan netra, n'am distroche biken !  
 Hag eul lunvez-beure, en kreiz ar boan-spered,  
 Ar marc'h-du am c'hasas en trezek ker Naoned.  
 Ah ! pa oan ma-unan warlerc'h an disparti,  
 Ma daerou a ruilhas dourek, poanius ha kri ;  
 Neuze hepken, neuze ec'h anveis ervad  
 Glac'har ma zudou kez, o foan, o c'halonad...

Tra ma skrinje roudou an trèn war an hent dir,  
 Tra ma loske ar marc'h c'houistelladennou hir,  
 Tra ma tec'he gant herr ar gwe hag ar c'heuniou  
 Ha tra ma tremene prajeier ha parkou ;  
 Tra ma welen o trei ha mene, ha traouen,  
 Ha ma Breiz o c'houlen : — Na distroï ket ken ?  
 Ma sonj a deue c'hoaz, a deue d'an ti-gar,  
 Ha taolen ar beure a greske ma glac'har...  
 Oh ! ebarz an ti-gar, gant ma zad briatet,  
 — « Ma fotr, ne greden ket, az pije kwitaet...  
 » P'eo red dispartia... Kenavo, kenavo !  
 » O perak ne chomez... Ne chomez.... Deus en dro !  
 Ha ma mam ha ma c'hoar, beuzet en o daerou,  
 O zellou truezus ha stanket o moueziou...  
 Eus ar beure o doa groet d'in ma fakaden,  
 Urziet enni pep tra, roet kant gourc'hemen.....  
 Chom a rent dilavar... Eur galon vruzunet  
 N'hall nemed hirvoudi : ar gomz he deus kollet !  
 .. Eun tól c'houistel garo... Diwean kenavo !  
 Daerou a ruilh puilloc'h... — Pegoulz e teuf en dro ?  
 — Kenavo !... — Kenavo !... Betek ma oant kuzet,  
 Ma zellou na dec'has diwar ma zud karet...  
 Hag an tren a ruilhe... Ha, hini da hini,  
 Mouez ma zad, mouez ma mam ha mouez ma c'hoar Mari

Mesket gant an drouz all, a gleven poaniusoc'h  
 Hag a re d'ar c'himiad bezan d'in kalz krisoc'h,  
 Meur a sonj a verve neuze ebarz ma fenn :  
 Awalc'h eo, pa ve red, gouzav mestr ha perc'henn ;  
 An neb a c'hall kavout eur vue a frankiz,  
 O plega da vestrou a zo gwall diaviz...  
 — Kenteliou ar furnez, a dra zur, kement-se,  
 Mes, dimeus eun tu-all, dilezel ma c'hunvre ?  
 Dilezel eun hunvre maget ganin keit-all !  
 Na dalve ket termal... Pe rin mad, pe rin fall  
 Red a vo d'in monet ; ma c'hoant eo bale bro,  
 Mar na gerz ket an traou goude me a welo...  
 An noz a dostae ; en kreiz gwiniennou  
 Ar marc'h-du a nije, a dreuze plenennou ;  
 Eun heol miz-gwengolo o tiskenn en dremwel,  
 A roe c'hoaz eur pok d'an devez o vervel ;  
 Ha d'ar c'houlz-ze an de pa dav er bed peb brud,  
 Pa nij a denn-askell al lapousig d'e glud,  
 Pa ziskwiz an douar ha pa gas an ine  
 En trezek ar C'hrouer eur zell a drugare,  
 Ma Doue, nag eo kri d'an den dispartiet  
 Sonjal ebarz ar gêr, er re a zo chomet !  
 Ha ma fenn em daouarn me a ouele bepred...  
 ...Eun drouz-ifern ha bec'h : — Naoned, Naoned, Naoned !

Naoned... Penn ar veaj ! — Ouz sklerijen al loar,  
E tiskennis en kêr touez an drouz, ar safar ;  
Dirakon listri kaer gant o gwerniou uhel,  
A zeblante dispar dindan loar o sevel ;  
En despet d'o c'haerder ha daoust d'o bravente,  
E vilé n'am oa ken ar memeuz karante...

An de warlerc'h-vintin, penn-rener ar bureo,  
P'en em gavis gantan, a lavariz : — « Gwir eo,  
» Betek dec'h diwean e klaskemp merdeidi,  
» Hirie hoc'h diwead, n'hon deus ezom hini...  
» Gortozet, mar karet, abenn eur pemzek de  
» Eul lestr o tont en Franz a c'houll tud adarre... »  
— Gortoz eur pemzek de !... War an töl en em c'hreiz,  
E tihunas beo, beo, karante ma bro Breiz,  
Marvad n'eo ket red d'in redek rufoù Naoned,  
Pegwir en ti ma zud e zo labour ha boued !  
— Dec'h ho poa ezom tud, perak n'ho peus hirie ?  
... Kenavo ar c'hentan, aotro ker, trugare !  
Ha ma fek war ma chouk evel Yan dizoursi :  
— Demp d'ar gêr da hada levezet ha dudi !  
Penez laret ar joa a grogas em ine,  
Hag an evurusted e c'houzanvis neuze !

Ma spered dizammet dimeus e fec'h pouner  
A deuas adarre skanv, d'neec'h ha seder...  
— Ma Jezus, emeon, red oa d'in bezan zod,  
Hag e kanis kerkent **Distro ar Martolod !**  
Pa deule ar marc'h-du e c'houistelladennou,  
E krede d'in klevet bombard ha biniou...  
— Bale, bale, ma fotr, bout ha term, chach ha red,  
Kaer az pezo frinkal ne vefomp re abred !  
Hag an holl blenenn ou dirakon a droe,  
Hag e tistroen c'hoaz da veneou Kerne...  
Pa welen bro Kerne... Me gred n'am oa ket c'hoaz  
Anavezet anei ken seder-all biskoaz ;  
Ar pezh a oa gwechall evidon divalo  
A deue, war an töl, eur mignon a bell zo :  
Adalek ar mene gant e benn hunvreer,  
Betek an draouien d'ôn, karget a brajou gwer ;  
Adalek ar c'hoat braz o hirvoudi klemmus,  
Betek ar park ed-lu gant e vleuniou melus ;  
Adalek al lapouz o kana ken lizzin,  
Betek ar wazig dour o hirvoudi mibin ;  
Adalek al loened o peuri 'barz ar roz,  
Betek, en toull e zor, eur C'hernevad koz, koz ;  
Pep tra a vouskane eur zonig ar c'hoantan,  
Hag a lavare d'in : — O chöm ganimp breman !

Biskoaz n'am oa klevet peden dudiesoc'h,  
 Biskoaz ma Breiz-Izel n'am oa karet welloc'h !  
 Dre-ze p' en em gavis war ma c'hiz evit mad  
 Ne oan mui martolod : *Bezan oan eur Breizad !*  
 Ne dalve ket laret plijadur ma zud kez :  
 Distro an dianket, devez a levenez !

Elec'h bezan kollet, beuzet er c'heriou braz,  
 Evel ma c'hoarve stank gant eur bern tud, siouaz !  
 Breman ebarz ma Breiz e choman da vevan  
 Ha ma foan, ma amzer a zo d'ei da gentan.  
 Ar C'hrouer da bep den an eus groet eur rouden,  
 Hag etre ma daouarn e lakas eun Delen ;  
 Avel ar yaouankiz ha nerz eur c'hoantegez  
 Am c'barzas da glevet mouez ma galvedigez ;  
 Mes en e vadelez, en e furnez divent,  
 Dorn Doue am lakas adarre war ma hent.  
 Trugare d'ezan ! Freuz frouden ma yaouankiz  
 A dalvezo breman d'am Bro, d'am c'henvroiz ;  
 Hag enpad ma bue ne vevo en em c'hreiz  
 Nemed diou garante : **Hini Doue ha Breiz !**



## Daou Lizer

Hag ar vam, evurus, a distroas d'ar ger :  
 Bet he doa, eur wech c'hoaz, digant he mab lizer...  
 Eul lizer martolod ! Piou a c'hallo laret  
 Ar blijadur ra ze da galon vam nec'het ?  
 Gallout re al lizer digas d'ei levenez,  
 Ken aliez ive he devoa bet enkreiz !  
 Kement a digouezas d'he daoulagad gouela,  
 Ma n'he gemere ken eul lizer hep krena...  
 Bezan oa intanvez, intanvez a bell zo,  
 Ah ! he bue, kredet, na oa ket bet faro ;  
 Gwelet he doa ar môr o lonka he fried,  
 Hag o lezel anei hep toën, tân, na boued...  
 Poan he diouvrec'h hepken, he fizianz en Doue,  
 A reas d'ei zével p'var a vugale :  
 — Pa voint zavet, emei, e sikourfont o mam,  
 Ha d'am zro, mar gallan, e tiskwizin eun tam

An diskwiz, paourkez mam, na vije ket d'ezi,  
 En oñeb, he foaniou a dlee c'hoaz kreski ;  
 Dre ma teuent en oad, a bep eil he fotred  
 A deuas da vezan ive martoloded,  
 Hag he c'halon a vam a rannas edarre ;  
 Tri ané, en eun tól, a gollas o bue...  
 Ar môr, en e gounar, evit gwasât he foan,  
 A rentas daou d'ezi hag a viras unan !  
 Ne chome mui ganti nemed he Benjamin ;  
 — Ma Doue, emezi, lezet heman ganin !  
 An amzer o kerzet a zistan peb anken,  
 Mes sonj an dud varo, hennez n'hall ket tremen ;  
 Hec'h-unan, peurvuian, gant he mab pa c'halle,  
 War be ar *Re-veuzet* ar vam gez a stoue...  
 Eun devez he c'halon gwasoc'h-gwas a frailhas,  
 He bugel diwean d'ar servij a yeas ;  
 O disparti poanius !... Ar vam skuilhas daerou,  
 Hec'h unan e chome hep frealz d'he foaniou !  
 He mab a dalc'has sonj hag a viras ervad  
 Diwean gourc'hemen roet gant ar c'himiad :  
 Eur wech bep penzek de, pe bep miz d'an hirran  
 Hen a skrive d'he vam, — ha ze hep fazian, —  
 Al lizer he doa bet a deue a Doulon,  
 A boan e oe lennet e tridas he c'halon :


— « Mam ger, eme he mab, hirié ez on seder,  
 » O laret d'ac'h ec'h in hep dale pell d'ar ger ;  
 » Marvad abenn disul, disul, Gouel an Holl-Zent,  
 » E c'hallin daoulina vel ma ren diagent,  
 » Ha lavaret ganac'h war o be binniget,  
 » Eur beden galonek evit hon zud karet...  
 » Ne ret ket a wad fall... Disul en em gavin...  
 » Ar bugel ho karo da viken : Benjamin ! »  
 Ar zul en em gavas, ar zul ken gortozet ;  
 Gant an evurusted ar vam na bade ket.  
 Eun nebeudig amzer... eur wech ouspenn, dinec'h,  
 He stardche he bugel c'hoaz etre he diouvrec'h...  
 Oh ! enpad an ofern, nag a beden neuze  
 A yeas eviti betek kalon Doue !  
 Rak an intañvez paour er boan, el levez,ez,  
 Ouie trugarekât mestr braz pep madelez...  
 P'achuas an ofern eun tam araok kreiste,  
 ..... — Na glevet ket, mam goz ?... Eul lizer adarre !  
 — Eul lizer adarre ? Na peseurt neventi ?...  
 Hag ar vam gez, mantret, 'n enr grena mui-ouz-mui,  
 A astennas he dorn da botr-al-lizerou,  
 Hep gallout, kaer he doa, stourm dimeus he daerou,  
 — Mes n'eo ket e skritur !... Eul lizer a Doulon ?  
 Ha, stanket, glac'haret, en he c'hreiz ar spouron,

Aon d'ezi da zempl, hi a deuas d'ar ger...  
 Eno, hec'h-unanig, he lennas al lizer.  
 —... Doue !... Gwir e vefe ! Gwerc'hez, pebez kêlo !  
 He bugel diwean... He mab a zo maro ?  
 Siouaz ! taer gwech siouaz ! Al lizer didrue  
 A ziskuilh penn-da-benn d'ezi ar wirione :  
 — « En dro d'ar c'hanoliou gant e genvrendeur-all,  
 » Ho mab a oa dimeurz pa deuas an eur fall...  
 » Ar c'hanol a darzas... ha trizek merdead  
 » A ruilhas war ar pont, maro, beuzet 'n o gwad ! »  
 Hag eus tre he daouarn al lizer a gouezas,  
 Ha war leuren an ti, ar vam baour a zemplas...  
 Displega he glac'har, piou a c'hallfe ober ?  
 He mab diwean marv... maro he mabig ker !  
 Ah ! gwelet he devoa meur a ouel an Holl-Zent,  
 Mes ken gwaz ha heman n'he gavas war he hent...  
 Hag etre ar glac'har, an daerou, an anken,  
 An noz a dosteas, an noz d'ezi ken yen ;  
 Elec'h kavout he mab evel m'he doa sonjet,  
 He mab oa en Toulon maro, lazet, friket !  
 En kreiz an noz tenval, mouez ar c'hlaz o tremen,  
 A denne diganti hirvoud ha klemmaden.  
 Pa gleve an avel o vouta war an nôr,  
 Hevel ouz eur paour kez, eur paour o c'houll digor ;

Pa gleve anezan, tener e vouboual,  
 Hag o tiskenn en ti dre veg ar chiminal,  
 E seblante d'ezi klevet mouez e mabig  
 O c'houll, en han Doue, glizen eur bedennig...  
 Ha, war an oaled yen, enpad an noz stouet,  
 Ar vam a bedas start evit he mab karet.

Gwasât noz-Anaon ! Pa deuas ar beure,  
 Hi a c'hoantae c'hoaz mouga ar wirione...  
 Mes al lizer garo, chomet war leur an ti,  
 Zammus evel eun test, a greske he gouli :  
 — O Doue, ma Doue, zikouret me ho ped,  
 An intañvez en poan, hec'h-unan war ar bed !

Prat, 25 here 1908.







## Ar Groaz, an Alar hag an Delen

D'an Aotro Dubourg, arc'heskop  
karet ar Vretoned,  
Kinnig doujus.

Al labour eo lezen, lezen ar c'hrouadur,  
Ar beden a frealz krizder an Donkadur (1);  
Ra zeuio peb Breizad da glevet ar zoniou,  
Hag en disheol ar *Groaz* da harpa e zeiou !

### I

En eun draouien a Vreiz, karget a c'hliz-veure,  
Taer vleuennig dispar a zispake d'an de ;  
Tri vugelig tener, en hevelep amzer,  
A vouzc'hoarze ive dindan nerz an domder.

A-gevred gant o c'hresk pep kelennadurez  
A sturie o spered ebarz hent ar furnez ;

(1) Destinée.

Hag en o ineou, temzet gant tud vad-tre,  
Ar c'hredennou yac'han buhan a ziwane...

Ganet er memeuz bla, zavet er memeuz bro,  
Bet redet a-viskoaz an hevelep parko,  
Daoust na gemerchont ket ar memeuz gwenojen,  
Ar garante skoulmas o c'halon da viken.

Ne sonjent ket, marvad, an tri vugel dister,  
Pa redent lannou Breiz digabestr, dibreder,  
E teurvezche Doue o c'hemer, taer blantenn,  
Evit ober gante eun dreinded, eun derven...

Eun dreinded madelez, dreinded louzou dispar  
Eneb da beb anken, peb ezom, pep glac'har ;  
Eun derven galloudus, gwriou don, penn uhel,  
A zalc'h penn d'an arne, d'an heol ha d'an avel !

Ar mestr braz koulskoude, en e furnez divent,  
A lakas, dizeblant, pephini war e hent ;  
Da beb-unan ane, herve pouez e venvek,  
Hen a roas skiant ha spered anaoudek...

### II

War skoueriou zant Erwan, zant Herve, zant Weltaz,  
Ar c'hentan zibabas evit benvek eur *Groaz* ;

Eur groaz ! Beleg Doue, pesketer ineou...  
Kacran, uhelan karg en-touez an holl gargou !

Eur Groaz ! Arouez a beuc'h... Mammen a garante !  
Beleg Doue zigas ar yec'hed d'an ine ;  
Hen a zistân pep poan, a lak war bep gouli  
Louzou dous ar beden, louzou nerzus ar spi !

Bugel d'ar parkeier evel e Gendadou,  
An eil a garo dreist bue frank ar maeziou ;  
Mestr d'ezan e-unan, roue war an douar,  
Netra na dalvezo e benvek : *An Alar !*

Tra ma sanko en Breiz an Alar e zouc'h dir,  
Tra ma troo enni bommou ledan ha hir,  
Breiz na vezo fallakr ; ha, da vraz, da vihan,  
He douar a rento kant gwech evit unan...

Bet gantan o c'heneh eur spered hunvreer,  
Dizeblant, peurvuian, ouz trouz ar bed dister,  
E zellou dôn kollet ebarz koumoul, goabren,  
An drived a deulo dre holl zon e *Delen*.

E ganaouen dener a skanvao pep bec'h,  
E zon karantezus a bellao pep nec'h ;  
Hag, evel dre vuzud, e werziou da bep den  
A vezo diou-askell... Trugare d'an Delen !

## III

Telen, Alar ha Kroaz... Barz, Labourer, Beleg,  
An taer garg dishenvel zo taer garg talvoudek :  
D'ar beleg o pedi e fell boued : freuz ar boan,  
Ha d'ar gonidek kez eo dleet eun diskân...

Evelse e tremen bue an tri vugel,  
O c'hargou unanet zo d'an dud eur gentel ;  
O c'hentel eo alc'houez ar gwir evurusted,  
A dle bezan douget gant an holl Vretoned.

.....  
O dreinded burzudus : Kroaz, Alar ha Telen,  
Skoazel ar c'hrouadur, e c'halloud da viken ;  
Mar fell d'it, o Breizad, ren da vae hep poan,  
Kerz gant an dreinded-man : **Oh ! ped, labour ha kân !**





## Me a zo Breizad !

D'AM C'HEVREUR L. NICOLAZ, « PENN-BRETON ».

Nag eo dous d'an den pa 'z eo divroet,  
Sonjal er vroïg elec'h m'eo ganet  
Hag er maeziou an eus bet ken karet !

Rak evit karout eur Vam-vro da vad  
Ez eo red tec'hel outi eur pennad,  
Bezan elec'h all vel eun divroad...

Neuze e teuer d'he c'harout ouspenn  
Ha d'en em dâna prim diwar he fenn  
Vel da gavout kaz ouz neb he dispenn !

Vad e ra d'an den anzav e Vam-vro,  
Pa ve pell outi morse n'he nac'ho ;  
En eneb, dalc'hmâd d'an holl he meulo !

Da galon pep den mar talc'h an dra-man,  
D'ar galon vreizad e talc'h ar gwasan,  
Dreist-holl er servij ez eo ar startan !

Eno e tihun birvidik 'n he c'hreiz,  
Ar wir garante, karante he Breiz,  
A skanva enni an anken direiz...

Eur zoudard breizad en servij Bro-C'hall,  
Eun devez en touez ar zoudarded-all,  
A sonje dinec'h 'n e amzer gwechall.

Dirak e spered, laouen, dibreder,  
E teue founus e yaouankiz ker,  
Pa glevas eur vouez o c'houlen ken ter :

— Ha c'houi a zo Gall ! laret, ma den mad...  
Kerkent en e greiz e sailhas ar gwad :  
— N'on ket, kabiten, me a zo Breizad !

Me a zo Breizad !... komzou kalonek !  
Ar c'habiten gall 'droas kein mezek,  
Ne laras netra d'ar zoudard pennek...

— Me a zo Breizad ! — Pebez penn kaled,  
E laras raktal an holl zoudarded,  
Hennez gar e Vro dreist pep tra er bed !

Adalek neuze an holl 'anzavas  
E oa nerz-kalon er Vretoned c'hoaz,  
N'o doa ket mez eus ar Vro o ganas...

Vel ar zoudard-man, direbech, hep aon,  
Pep Breizad a dle huchal gant kalon ;  
— **En despet d'ar Gall me a zo Breton !!!**



## Eil loden



**GWERZIOU ha KANAOUENNOU**



## Da Alan-Meur, Roue Breiz

D'AM C'HENVREUR LOEIZ-MORICE « PENN-DERO ».

En amzeriou-ze bro ar Vretoned  
A oa ar c'hentan eus brofou ar bed.

He roue koz 'n eur vrezelli stard,  
O doa he miret dimeus an trubard,

Broig an Arvor a oa koant dispar,  
Bro an Herminig a oa digailhar !

Zent evel Gweltas, evel Gwenole,  
A zigasas d'ei sklerijen ar Fe.

Ha da heuilh o skouer, o c'homzou kristen  
Arvor a deuas eur gwir berlezen !

Dre ar vro tro dro, Barzed leun a dân,  
Gant eur vouez nerzus a deule o c'hân...

Hag hon zraouiennou, hag hon henchou dôn,  
A dride bemnoz o klevet eur zon ;

O klevet eur zon, kán flour an eostig,  
Zon tener ha drant kloareg pe goulmig...

Siouaz ! a greiz holl gwerziou ha zoniou  
A zo holl mouget gant youc'hadennou,

Youc'hadennou goue bandennou tud kri...  
Dirak aochou Breiz eman o listri.

Dont a reont holl eus an hanter-noz  
Tud Arvor warne a deul o malloz !

Dre ma tremenont e hadont er vro,  
Dismantr ha tân-gwall, poan-spered, daëro...

Tud yaouank ha koz, bugale, merc'hed,  
A gri forz bemde war an Normaned ;

Kenkoulz en ti plouz, kenkoulz er c'hastell,  
Dirak an dud fall, netra na bad pell.

Iliz ha chapel, kouent, manati,  
Dre zorn an dud-goue a deu da dévi...

Beleg ha manac'h, tud fur, eskibien,  
A gav ar maro... O pebez gwalen !

An holl zo mantret, rak an dudou goue  
A dan hag a laz ; ar vro a zo d'ê...

Dre ma tostaont d'ar c'heriadennou,  
Tud ar vro a d'ec'h, a dec'h d'ar c'hoajou ;

Eus ar c'hoajou dôn o moueziou neuze  
A zav truezus war-zu o Doue...

— « Doue zant Weltas, Doue-Galloudus,  
» Oh ! pella diouimp ar walen spontus...

» Mar ne chilaouez breman hon feden,  
» Arvor a gouezo dindan an estren ;

» Ha ganti ive, en noz an amzer,  
» E kouezo hon gouenn hag hon yez ken kaer ! »

O burzud, burzud ! Doue-Galloudus  
A chilaon peden Arvor gwall-eürus...

Savet zo eur vouez dimeus kalon Breiz,  
Hag an holl kerkent a zired a-leiz.



Mouez ter ha nerzus, ha mouez entanet,  
Da vouez, Alan-Meur, o Roue karet !

Dimeus lein mene Arez, mene-Dû,  
 Eur youc'haden grenv a nij a bep tu ;  
 Eur youac'hden grenv, eur you a stourmad :  
 — « Frankiz d'an Arvor... d'an trubard, argad !!! »  
 Gant skouer Alan-Meur, kennerzet kerkent  
 Arvoriz, d'e heuilh, en em lak en hent...  
 Enebourien Breiz a zo spouronet,  
 Bugale Arvor a zo kounaret !  
 En o fenn Alan, tad karet ar Vro,  
 Breiziz er brezel a zo tud garo !  
 Evit kaout an trec'h, Alan da Zoue,  
 En hano Arvor, Alan ra eul lê :  
 — « Mar teu d'in trec'hi war m'enebourien,  
 » D'ac'h, o ma Doue, e vin da viken ;  
 » An dekved loden dimeus ma mado  
 » A vo roet d'ac'h mar salvan ma Bro ! »  
 En bro Kistember zoudarded Alan,  
 A dizam o bro dimeus an Norman ;  
 Krenv eo ar stourmad ha war an dachen,  
 An Normaned louz a varv vel keilhen ;

Stankoc'h vit ma koue greun dindan ar freilh,  
 Korf an Normaned zo mad d'ober teilh !  
 Douar Kistember gant ar gwad zo ru  
 Gwad Norman hepken eo a ruilh dru, dru...  
 D'o zro, an dud fall a yud gant kounar,  
 Alan-Meur a zo eur roue dispar !  
 Dismantret, drailhet, gant tud an Arvor,  
 An amprevaned a glask hent ar môr ;  
 C'hoant da vat o deus da vont d'ho listri,  
 Ne dalve ket d'ê... O zro zo arri !  
 Pemzek mil outé a deuas d'hon Bro,  
 Pevar c'hant hepken a yeas en dro !  
 Dre c'halloud Alan, e c'halloud hepken,  
 Ez eo dishual Arvor da viken !  
 Holl vugale Breiz, tud yaouank ha koz,  
 A roto d'Alan o gwellan bennoz...  
 Ra vezo karet Alan, tad hon Bro,  
 Ra vo gant an holl meulet e hano !  
 Ar Roue Alan, tachen Kistember,  
 D'ar galon vreizad dalc'hmada a vo ker...

Eno he deus bet Arvor he frankiz,  
Miromp an Envor outé, kenvroiz,

Ma vezo dac'hmad betek fin ar bed  
Meulet o hano gant ar Vretoned !



## Gwerc'hez Plizidi

D' AN AOTRO JOANNO, PERSON PLIZIDI.

I

O ma Breiz dudies, bro a viskoaz meulet,  
Gant an holl out karet, n'eo ket hep digare,  
Kaer e vo da gana, awalc'h na vi meulet,  
Rak koant ez out, en gwirione !

War da zouar hepken e ve kavet lec'hiou,  
Ha n'o deus ket o far 'barz ar Grouadelez ;  
Me a garfe beva kalz, kalz a gantvejou  
Evit da gana hep paouez...

.....  
En touez meur a vene, kollet en bro Kerne,  
En sioulder ar maeziou, pell eus ar skoueriou fall,  
Piou n'anve eul lec'hig binniget gant Doue,  
Eul lec'hig fur dreist ar re-all ?



Eul lec'h en pehini eman an holl doujus,  
 Elec'h mar kerz an dud war roudou ar zent koz,  
 Elec'h m'eo ar bugel d'e d'ad, d'e vam zentus,  
 Elec'h zo peuc'h ha de, ha noz ?

Piou n'anve ar barrouz, — o gwellan madelez ! —  
 Ar barrouz dibabet gant ar Werc'hez Vari,  
 Da vezan eul loden eus he Rouantelez,  
 Piou eta n'anve Plizidi ?

## II

Plizidi a zebtant, pa ve gwelet a bell,  
 Bezan dimeus bro Lourd eun henvelidigez :  
 — « Perak ne vefe ket eun eil Masabiell,  
 » E laras eun de ar Werc'hez,

» Perak ne deufen ket da gavout eur jijen,  
 » En harz an iliz koant hag ouz troad ar mene ?  
 » Aman ma bugale a larfe eur beden,  
 » Aman e taoulinfent gant fe... »

Neuze — burzud dispar ! — eur zulvez d'ar mintin,  
 Kristenien Plizidi a zavas zouezet ;  
 Moueziou drant ar c'hleier a vralle gwall sklintin,  
 Ouz lein o zour dantelezet.

War askell an avel, dre ar vro tro war dro,  
 E rede eur c'helo : — « O gwellan neventi...  
 » Plijet eo gant Mari dont da chom en hon Bro.  
 » Bretoned, deut da Blizidi ! »

Hag an holl a deue, karget a levenez,  
 A-dreuz d'al lanneier, traouiennou ha parkou,  
 D'enori o Mam vad, da bedi ar Werc'hez,  
 Ha da gana d'ei kantikou...

Dirak ar skeuden gaer pep kristen a stoue,  
 Ha dimeus pep kalon, dre anaoudegez vad,  
 E tec'he eur beden, peden a drugare...  
 Lourd oa deut da vro ar breizad !

Ya, Lourd en gwirione, gant roc'h Masabiell,  
 Lourd gant eur skeuden goant, skeuden dener Mari.  
 A zav war zu an nenv he daouarn hag he zell...  
 Lourd, Lourd war douar Plizidi !

Lourd ebarz ar vered, — o taolen frealzus ! —  
 Ar Werc'hez o tiwall beziou ar Re-Varo ;  
 Oh ! Anaon karet, c'houi a zo evurus,  
 Mari a glev ho hirvoudo !

Ganac'h me a garfe dindan kenkoulz skoazel,  
 Kousket en ho pered, ya, ma hun diwezan,  
 Ha bezan luskellet gant ar c'hleier zantel,  
 A zon klemmus ar c'hlaz aman...

## III

— O Gwerc'hez Plizidi, chilaouet ma feden,  
 Difennet Breiz-Izel, m'ho ped, en han Doue,  
 Nag e teufe ar Fall war brofou-all da ren,  
 Miret bepred hon Bro d'ar Fe !

Miret enni, miret gizioù koz ha furnez,  
 Miret ane dreist-holl en parrouz Plizidi,  
 Ma laro peb breizad dimeus ho tud, Gwerc'hez,  
 Sed aman bugale Mari !

Plizidi a zo d'ac'h, d'ac'h he deus 'n em roet,  
 Ha c'houi ho péus kavet anezi deread,  
 Da vezan gant ho Mab ha ganac'h binniget,  
 Bezet ganti karet dalc'had !

Binniget anezi hag arc'hoaz evel dec'h,  
 Plizidi a chomo skouer ar barrouz kristen ;  
 Ha, goude en Nenvou, he bugale dinec'h,  
 A veulo ho Mam da viken !



## Gwreg ar pesketer

An avel zo fuloret, ar môr a zo diroll,  
 Dimeus ar besketerez ez eo dizro an holl,  
 An holl en kichen an tân zo evurus meurbed,  
 Goude eun devez trubuilh, eun devez poan-spered.

Neuze war lein an dosen e welched eur plac'h kez,  
 En he daoulagad daerou, en he c'halon enkreuz ;  
 En dro d'ei tri vugelig, juntet o dornigo,  
 O laret : — Mam, na ouel ket, hon zad a deñ en dro !

— Pell zo, eme ar vam baour, tleje bezan er ger,  
 Na gustum chom diwead pa ve fall an amzer ;  
 Ma bugaligou vihan, an noz zo tenval, du,  
 Pedet Doue evitan, et da gousket dustu... !

Ar vugale 'n eur bedi a zo et da gousket,  
 An anken gant eun hunvre oute zo pellaet !

Gwelet reont en dro d'e zent hag éledigon :  
Baradoz ar vugale a zo en hunvreou !

Ar vam gez a zo bepred war he zosen uhel,  
Yudal e ra 'n he dioukouarn trouz ar môr, an avel ;  
Ouz he zreid war ar gerrek, gant eur gounar spontus,  
E tilamm ar gwagennou, gante eun drouz heuzus,

Ous ar môr dichadennet hi a chom dizeblant,  
He daoulagad er pellder a zell gant nec'hamant,  
Kredi ra d'ei a-wechou, eus kreiz he foan-galon,  
Klevet eur vagig vilhan o tont war ar môr dôn...

Siouaz ! pa zell en dro d'ei he wel ar wirione,  
An avel a yud bepred, ar mor zo didrue ;  
En pep ti, en pep lojen, an dud a zo kousket,  
He fried n'eo ket distro... He c'halon zo rannet !

Distrei ra d'he zi bihan, dour en he daoulagad,  
Kousket eo he bugale, kousket ha kousket mad ;  
Neuze he tec'h adarre daoust e d'an amzer gri,  
Da chapelig ar Werc'hez hec'h a da hirvoudi...

— « O Gwerc'hez ar Gwir-Zikour, Mari Stereden Vor ;  
» Miret ouz ma bugale d'en em gavout minor ;  
» Roet d'eur vam ankeniet gwir frealzidigez,  
» Miret outl, o Gwerc'hez, da vezan intanvez... ! »

Eun hanter-eur pe war dro hec'h eo bet er chapel,  
Daerou puilh he deus skuihet ouz treid he Mam zantel ;  
Deut ez eo c'hoaz war he c'hiz da chilaou er mor braz,  
War ar mor braz dirollet n'he glev netra, siouaz !

Glac'haret-tre ar wreg paour a distro c'hoaz d'he zi,  
Hanter-noz a zo zonet, he den n'eo ket arri ;  
War he daoulin eo kouezet, braz, braz eo hec'h anken :  
Da gennerzi ar c'hristen n'eus ket vel ar beden !

Pedet he deus ar Werc'hez, pedet he deus Doue,  
Pedet evit he fried, evit he bugale ;  
Tre ar beden, an daerou, e tremen an nosvez,  
N'eo ket evit diskwiza : he fried zo er-maez ?

Er-maez ar môr dichaden, gant an avel zavet,  
A zailh ebarz e aochou vel eul loen pennfollet ;  
An noz a zo ankenius, ober ra grizilh, glao,  
Vit ar vagig dilerc'het an amzer n'eo ket brao !

— O pebez nosvez anken, e lavar ar wreg kez,  
O de, deus buhan en dro, ma tec'ho ma enkreuz,  
O mintin, deus eta prim, da rei d'in-me kelo  
Dimeus tad ma bugale... Lar d'in, n'eo ket maro !

Ar beure evit ar plac'h a zo re bell o tont,  
Ha c'hoaz dre ma tosta d'ei e kresk, e kresk he spont ;

— Marteze vo kêlo mad, marteze fall... piou oar ?  
Ha mar vefe kêlo fall, d'ezi gwasât glac'har !

Deus forz gouela ha pedi, ar mintin a doste,  
Mar na darz ket c'hoaz an de, noz n'an eo ken ive ;  
Kentan dremvel ar mintin, war ar môr gourdavek,  
A zeblant eul linsel-gaon, ankenius da welet...

Ar vam baour hanter-varo, a dec'h eus he lojen,  
Ar spi ebarz he c'halon, he sav war an dosen ;  
Tentralik eo c'hoaz ar mor... — Forz kaer a zo, emei,  
Dre ho sikour, o Gwerc'hez, m'hen gwelo o tistrei,

P'he deus sellet en pep lec'h ha zellet en pep tu,  
War an drêzen tost d'ezi hi a wel eun dra du ;  
Hep gouzout, na oar penoz, he lez eun hirvouden,  
Gant he foan-galon ive eo kresket hec'h anken.

Eun nerz krenv, eur c'hoant krenvoc'h he c'has war za  
O tiskenn ebarz an aod :— Petra ez eo, petra ? an dra.  
He c'halon a lamp enni p'en en gav war an trêz...  
Eur griaden a c'hlaç'har... — O Per, ma fried kez !

En e gichen eo semplet o tont d'hen briata,  
Mes, alaz ! ar pesketer n'eo ken eus ar bed-ma ;  
E zaoulagad zo zerret ; war e drem dislivet,  
Bet blonset gand ar gerrek, e ruilh ar gwad duet !

Aman, aze ha du-hont, gant ar mor dismantret,  
Eman tammou ar vagig, tolet ha distolet ;  
Dimeus ar vagig drailhet, hi na ra van abed,  
Daoulinet war an drêzen, he komz ouz he fried...

Mantrus ez eo da sonjal glac'har kri ar wreg-man :  
— « O ma fried, ma fried, klev ac'hanon breman,  
» Digor c'hoaz da zaoulagad... Hep mar ez out komsket,  
» Komz diouin vel da kustum, evit na ouelin ket... »

Kaer he deus gouela, gouela, he fried zo maro,  
komz outi war an douar biken ken na rañ !  
Neuze ar vam c'hlaç'haret a sonj en he stad kri ;  
— Maro eo ar gonidour, penoz rin, emezi ?

Penoz a rin-me breman dimeus ma bugale,  
Pa n'o deus tad abed ken da brient bara d'ê ?  
War-ze ken gwaz ha kiskoaz e tistank he daero...  
— O ma Doue, ma Doue, perak n'on ket maro ?

Kerkent eus ar chapelig e tec'h eur vouez sklintin,  
Mouez seder ar c'hloc'h o son Anjeluz ar mintin ;  
Ar zon vel eur c'halvaden 'ra d'ei zével he fen,  
En despet d'he foan-galon bepred hec'h eo kristen !

— « Itron-Varia-Drue pounar ez eo ma c'hroaz ;  
» En kenver hini ho Mab n'eo netra abed c'hoaz ;

» Ma glac'har ma'z eo ken braz. brasoc'h oa ho hini,  
» Roet d'in nerz, o Mari, evelloc'h d'en trec'hi ! »


Peden gaer an intañvez gant Mari zo klevet,  
He glac'har a zo trec'het hag he foan distanet :

— « An Doue madelezes a vez al lapousig,  
» Na zilezo birviken stad ma zri vugelig... »

» Pegwir e wisk ar vleuen kaeroc'h 'vit Salomon,  
» Pegwir ec'h anve reiz mad ezommou ma c'halon,  
» E rofo d'ar vinored, d'an intañvez skoazel,  
» Ra vo gant an holl meulet e hano ken zantel ! »

En disheol ar chapelig korf paour ar pesketer,  
A zo breman douaret ; war e ve e lenner :  
— Aman e tiskwiz en peuc'h, Per-Mari ar Steuno,  
Kollet ebarz eur penze... Doue d'hen pardono ! —

Bemde aboue ar vam gez, d'an noz ha d'ar beure,  
A deu war be he fried da zaoulina gant fe ;  
Eno, gant he bugale, hec'h ankoua he foaniou :  
A-dreuz d'ar be ar beden a unan kalonou...



## Kousk an Tad

D'AN AOTRO LOSTEC, KURE ZANT-SERVEZ.

Eur bugelig bihan 'n e zav ouz troad ar gwele  
Elec'h oa korf e dad maro ha, siouaz, yen,  
Digant e vammig paour en glac'har, a c'houlenne :  
— O mam, lar d'in perak ma zad kez na gomz ken ?  
Ar vam, en eur ouela, a laras d'he c'hrouadur :  
— Ro peuc'h, ma el bihan, da dad a zo kousket,  
Deus war galon da vam, chom aze didrouz ha fur,  
Chom da c'hortoz ma vo da dadig dihunet...

An de warlec'h ar vam, daeron en he daoulagad,  
Eur bugel eus he dorn, a heuilhe d'ar vered  
Korf an hini oe bet eviti eur pried mad,  
Korf an hini a oe falc'het kreiz e yec'hed...  
Ar bugel, re dener, vit anveout ar glac'har,  
A lavare d'e vam gant eur vouezig karet :  
— Na ouelez ket, o mam, me da vugelig da gar,  
Ha me a rofo peuc'h tra vo ma zad kousket !

Pa oe 'barz ar be dôn diskennet ar c'horf maro,  
 Goude ma oe an holl dud tec'het ac'hane,  
 An el digant e vam a c'houllas 'n eur skuilh daero :  
 — Mam, mam, lar d'in, ma zad a chomo pell aze ?  
 Ar vam d'ezan laras gant eur vouez leun a anken :  
 — Da dad, ma bugelig, zo aze o kousket...  
 Evidout, krouadur, ar vered a zo gwall yen,  
 Deus ganin-me d'ar ger ae'han vo dihunet !

An tad vit ar bugel chome re bell da gousket,  
 Ha pell, en gwirione, e pade e hunvre ;  
 Eun de an élig paour, war e ven-be gourvezet,  
 Gant eur vouez truezuz d'ezan a lavare :  
 — O ma zad, ma zad kez, chilaou 'ta monez da vabig,  
 Poent braz eo d'it dihun ha dont c'hoaz d'am gwelet ;  
 Oh ! deus ganin d'ar ger, deus da welet ma mammig,  
 Zav alese breman, awalc'h e teus kousket !

Kaer hen doa ar bugel pedi, pedi kalonek,  
 E dadig kez maro na re van 'bed outan,  
 Neuze e tistankas da ouela dourek, dourek,  
 P'en em gav e vam da frealzi anezan :  
 — Ro peuc'h, ma bugelig, da dad a zo gant Doue,  
 Biken ken war ar bed na deuto d'ez kwelet ;  
 Ped evitan, bez fur, ma c'halli monet eun de  
 Gantan d'ar Baradoz elec'h eo dihunet !

Aboue en e bater ar bugel, mintin ha noz,  
 A bed evit e dad hag a dalc'h sonj outan,  
 Hag en eur hunvreal, kousket en e wele kloz,  
 E wel an devez kaer m'en em gavo gantan...  
 Eno vo evurus ebarz kreiz al levenez,  
 Eno e dad karet na vezo ken kousket...  
 Eno e vevo pell eus poan, trubuilhou, enkreuz,  
 Er Baradoz an holl a vezo dihunet !!





## KLEMMOU ar BARZ KOZ

DA GLODA AR PRAT « PLUENZIR ».

Eun noz o vale dindan an derv bras  
Me a chomas gwall zouezet,  
O klevet bravañ mouez a zistonas  
Dindan ar c'hoajou morgousket...  
Ar vouez a gleven a zeblante, hep mar,  
A bell eur vouez kaer ha dudius  
Ha dre ma tostaen d'ezi, o glac'har !  
Oa henvel ouz klemmou truezus...

Sioul ha didrouz ez on chomet neuze,  
Dirakon na pebez taolen ;  
En e zav eur Barz koz a hirvoude  
Eus son ankenius e delen ;



E zaoulagad zavet war zu an Nenvou,  
E zeblante bezan o pedi,  
Eus e vuzellou paour e koueze komzou  
Leun a c'hlae'har hag a velkoni...

— « Pell amzer zo am eus bet hirvoudet,  
» War stad glae'harus ma Bro goant,  
» Hirie evelkent e choman mantret  
» Gant ar vez hag an nec'hamant,  
» O welet Breiziz o tilezel a-grenn  
» Giziou koz ha fur ar Vretoned,  
» Hag o plega seder evel tud dibenn,  
» Da skoueriou hudur ar C'hallaoued...

» Em amzer gentan, pa oan o sevel,  
» An holl a gane kalonek,  
» Eus eur penn d'egile da Vreiz-Izel  
» Zoniou ha gwerziou brezonek ;  
» En amzer-ze e oa kalz a garante  
» Evit an hano kaer a Vreizad,  
» Breman ma c'henvroiz, tud didrugare,  
» O deus holl ankouaet o brud vad !


» Hon yaouankizou n'o deus ken dudi  
» Gant kaerder o Mam-Vro garet :



- » Kement dismeganz a reont d'ezi.  
 » Gantê Hi a zo dilezet !  
 » En he zraouiennou, war lein he meneou  
 » E klever... Doue, na pebez mez !  
 » He bugale o komz... True, Kendadou,  
 » O komz pep tra, pep tra ' med he Yez...
- » Gwechall er pardonioù, en ebatou,  
 » E kane dalc'had ar Varzed ;  
 » Breman, siouaz, en donder ar c'hoajou,  
 » Me a guz bec'h ma foan-spered ;  
 » Hekleo ma Zelen p'en klevan o tiston  
 » A laka ma daerou da ruilhal,  
 » Dirak he c'herden skwiz e ran ma c'halon,  
 » War ma dilez e plegan ma zâl !
- » Aman dindan an derv, ma-unanig,  
 » E teulan ma zon diwean !  
 » Bet a vijen evurus eun tammig  
 » Mar klevfe an dud ar c'hân-man...  
 » Mes eus mouez ma Zelen hekleo ar c'hoat braz  
 » Na ra ket, nan eur zeblant zoken,  
 » Daoust ha me a varfe, a varfe, siouaz !  
 » Hep na glevfe den ma c'hlemmaden ? »

- D'e vouez, ken ankenius, ha d'e glemmou  
 Eo bet teneret ma c'halon :
- « Bez evurus, Barz koz, sec'h da zaerou,  
 » Rak klevet am eus bet da zon,  
 » Daoust e d'an avel fall a c'houe war hon Bro  
 » Hon yez karet a vevo bepred ;  
 » En despet d'an dud fall, ive d'o skouerio,  
 » Ni a gomzo yez kaer ar C'helted !
- » Bez eta dinec'h... pa garo Doue,  
 » Kwita ar bed-man hep anken,  
 » En Breiz a reno c'hoaz ar Garante  
 » Hag ar Brezoneg da viken !! »
- « Trugare, trugare, ha d'it ma bennoz,  
 » E laras ar Barz koz, evurus,  
 » Kenavo, kenvreur, du-hont er Baradoz  
 » Hon Breiz-Izel a vo peurbadus ! »





## Kutuilh Bleun

DA GLOAREK-AR-WERN (AN AOTRO CLERC, GWENGAMP).

Em amzer gollet me a blij d'in  
Redek a-dreuz d'ar parkeier,  
War ar yeod, karget a c'hliz-mintin,  
Dindan lagad an heol seder ;  
Neuze e c'hallan ma-unanig,  
Mont ha dont evel a garan  
Ha chilaou mouez drant al lapousig  
O kana eur zon ar vravan...

Neuze, war ribl ar gwinojennou,  
Pe a hed ar waz o tremen,  
Dinec'h, e kutuilhan bleuennou,  
Bleuennou koant vit ma zelen ;

Bleuennou dimeus ma Breiz-Izel,  
Leun a zouster hag a c'houez vad,  
Bleuennou hag a zeblant henvel  
Ouz glanded ar galon vreizad.

Da gentan war eul lannek dispar,  
Goloet a c'herrek kousket,  
En eur vale... Oh ! na me a gar  
Kutuilh bleuniou lann alaouret !  
Ha dudiusoc'h a gavan pell  
Kutuilh, eus ma broig Arvor,  
Ar vleuennig vruk a garan well,  
Rak hi eo bleuen an Envor !

Gant bleuniou bruk, lann, ha re valan,  
Bleuniou ar parkou, ar prajou,  
Bleuniou kaer, dister, braz ha bihan,  
Kavet ganin a vriajou...  
E tistroan d'ar ger, evurus,  
Ha neuze, leun a levenez,  
Dimeus ma bleuennou niverus  
E ran eun dibab gant evez...

Warlec'h an dibab e ran gante  
 Eur gaer hag eur goant a vokad,  
 Ha hennez a ginnigan goude  
 A greiz kalon d'eur mignon mad ;  
 Ar bokad-se a ve, peurvuian,  
 Eur zon pe eur werzig tener  
 En pehini ar sonjou gwellan  
 A ve ive, d'o stum, bleun kaer :

D'ac'h ar pezig-man, Kloarek-ar-Wern,  
 O teurvezet hen digemer :  
 Ma bleuniou zo bet klasket a vern  
 Dre ar c'hoajou, al lanneier ;  
 Da laret eo 'refont plijadur  
 Ha d'ho spered ha d'ho kalon,  
 Dre-ze o lezan da vont, distur,  
 Da laret de-mad d'am mignon !



## War ar Ster

D'AN DIMEZELED DE LA BÉGASSIÈRE, GWENGAMP.

War dôn : ITRON-VARIA-BEMPOULL.

Pell dimeus trubuilhon ar bed,  
 Hag eus he zrubarderez  
 War da zour, sterig koant meurbed,  
 Na bravât luskellerez !  
 — Luskell dudies, o bagig,  
 War dour sioul ar sterig,  
 Kerz didrouz etre he riblou,  
 Alaouret gant ar bleuniou,  
 Rak warni me zo laouen,  
 Seder, seder, hep anken...

Tra ma kerzez, pebez dudi !  
 Me a glev evnedigou,  
 Ebarz ar gwe o richani  
 Zoniou drant, kanaouenno...

— Kanit, kanit, evned bihan,  
 Meulet bepred hep ehan  
 Krouer ar bed hag ho krouer,  
 Kenkoulz evel hon Zalver...  
 Kanit da Zoue bemde  
 Roñt skouer d'an dud dife !



Aman hunvreal evurus,  
 Pell eus pep trouz, pep safar,  
 Al lec'h-man a zo dudius,  
 Seurt n'eus ket war an douar !

— Oh ! dirak eun daolen ken kaer,  
 Karget a gân, a zouster,  
 Skanvaet dimeus da boaniou,  
 Sav ma c'halon d'an Nenvou,  
 Kas evel eur goumoulen  
 War-zu Mari eur beden !

Barz, ive ma fell d'it kana,  
 Deus ganin-me eur pennad  
 D'hunvreal war ar sterig-ma,  
 Te n'az po ket keun, zur mad,  
 — Aman e kavo da delen  
 Peadra vit he c'herden,  
 Da gana an evurusted,  
 Elec'h 'n em blij ar spered,  
 Da gana gant al lapouz  
 Dudi al lec'hioù didrouz...





## Gwerc'hez ar C'hoat

D'AM BREUR PIPi.

En parrouz Zant-Servez,  
Ebarz kreiz ar c'hoat braz,  
Tostik da Gerbernez,  
Kuzet touez ar gwe glaz,  
E kaver eur garrek  
Ha hi rannet ken c'houek,  
Ma c'houller zouezet :  
Petra zo c'hoarvezet ?

Ar roc'h, eun amzer oe,  
Oa da vezan drailhet...  
Faoutet oe... Mes goude  
Ar roc'h na goueze ket ;  
Ankouaet oe eno,  
Hag aboue an dudo,  
Dizeblant, yen ha kri,  
Na sellent ket outi...

Mar n'oe ket dispennet,  
Eo felle d'ar Werc'hez  
Bezan warni karet  
En kichen Kerbernez,  
Ha kavout he skeuden  
Kuzet en eur jijen,  
Zavet ouz troad ar roc'h,  
Lec'h ma vije koantoc'h !

Setu perag hirie,  
— Trugare da Pipi —  
Ouz troad ar garrek goue  
Eman skeuden Mari...  
Skeuden garantezus,  
Dous ha madelezes,  
Hon mam, hon Rouanez,  
Itron-a-Gerbernez !

Nag eo koant da welet  
En eul lec'h ken dispar,  
Elec'h na glever ket  
Trouz abed, na safar,  
Nemed evnedigou  
O kana kantikou,  
Ha mouez flour an avel  
Beg ar gwe o vervel...

A-us d'ar roc'h glazur  
 Groet gand illeo, dero,  
 Mesket, hep renadur,  
 Gant koat kelve ha fô,  
 A ra eus al lec'hig  
 Eur goant a chapelig,  
 Elec'h e plij d'an den  
 Lavaret eur beden.

Er c'hoat braz, tremener,  
 Ma tigoue d'it, eun de,  
 E-lal ar jijen gaer  
 'N em gavout da vale,  
 Me a bed ac'hanout,  
 Ma welez dirakout  
 Drem ar Werc'hez Vari,  
 Da stoui d'he fedi :

Oh ! ped anei, hep aon,  
 Hi zo Mam d'ez Salver,  
 Lar d'ei da boan-galon,  
 Ar Werc'hez zo tener...  
 He daoulagad zavet  
 Hag he daouarn juntet,  
 Gant karante he lar :  
 — O bugel, me da gar !



## Kantik Itron-Varia-Gerbernez

WAR DON : NI HO SALUD, STEREDEN VOR.

D'AM C'HOAR MARI.

DISKAN

Gwerc'hez hon Mam, hon Rouanez ;  
 Itron-Varia-Gerbernez,  
 Klevet peden ho pugale  
 Ha roet ho zikour d'eze !

Vel ma red warlerc'h e vammig  
 Ar bugel dister, bihanig,  
 Velse war ho lerc'h, mam zantel,  
 E tiredomp da glask skoazel,

Dirak ho skeuden vinniget  
 Holl ez omp aman daoulinet,  
 Holl a c'houlennomp gant kalon  
 Bennoz ar Werc'hez, hon Itron !

An dudou paour war an douar,  
 N'o deus nemed anken, glac'har ;  
 Mari, Mam da Zalver ar bed,  
 Bezet oute true bepred !

Warnomp dimeus lein an Nenvou,  
 Teurvezet distrei ho sellou ;  
 Groet ma kouezo evel ar gliz  
 Ho krasou war vro ar Vreiziz...

Breiz-Izel he deus a viskoaz  
 Karet ar Werc'hez he c'haras ;  
 Dre-ze en pep parrouz 'n hon Bro,  
 E klever meuli ho hano !

N'ankouaet ket ar garante,  
 Hon deus holl evit Mam Doue ;  
 Ha pa vefomp gwall-ankeniet,  
 O Gwerc'hez, n'hon dilezet ket !

Na dilezet ar Vretoned,  
 Tud a galon, a lealded ;  
 Roet d'e, vel en amzer goz,  
 Evurusted bemde, bemnoz...


Eur brezel didrue ha kri  
 En hon Bro a zo groet d'imp-ni ;  
 Eneb kantved ar falz-kreden  
 Miret hon Breiz d'ar Fe gristen !

Laket en kreiz ar vugale  
 Karante ha doujanz Doue ;  
 Roet furnez d'ar vam, d'an tad,  
 Da ren o ziegez ervad...

Laket dre-holl gwir unvaniez,  
 Peuc'h kristen, nerz ha levez,ez,  
 Ma laro peb unan 'n e di  
 Trugare d'ar Werc'hez Vari !

Diwar jijen koant, koant ho roc'h,  
 Lec'h ma zeblantet d'imp kaeroc'h,  
 Diwallit mad tud Zant-Servez,  
 Dale'hit sonj ouz re Gerbernez...

Neuze enpad hon buegez  
 Ni ho karo welloc'h Gwerc'hez,  
 Da c'hortoz monet d'an Nenvou  
 D'Ho meuli gant hon C'hendadou !



## DIRAK AR MOR

### Hirvoudou

D'AN AOTRO COZAN, KURE PLISTIN.

O mor braz ha divent, mor kaer, mor dudius,  
Dirakout adarre 'n em gavan evurus!

Deut ez on c'hoaz eur wech d'ez kwelet eur pennad,  
Karout kalz a rafen chom 'n ez kichen dalc'hmad.

Da alan yac'hus, flour, war ma drem a dremen  
Ha da vouez o krozal a zebant eur beden...

Eur beden ar gaeran, eur beden peurbadus,  
A zav diwar ar bed da Zoue-Galloudus.

D'an aod gant al lano e teuez 'n eur drouzal  
Ha da wagennoù koant a frez en eur strinkal...

En eur strinkal warnon o dour gwenn, glaz ha gwer,  
C'hoant d'ê da laret d'in : Sell 'ta, na pegen kaer!

Ouz da welet ken koant ne skwiz ket ma sellou,  
— Bravat ma 'z eo ar môr dindan bolz an Nenvou!

Dirakout ma c'halon a zo ive laouen,  
Ankouaet eo ganti he zrubuilh, hec'h anken...

Kollet he deus ar sonj dimeus bro ar c'hoajou,  
Tridal he ra gant joa o welet da aochou!

He flijadur gentan, hec'h amzer dremenet,  
Dirakout, o môr braz, zo breman dihunet...

Dihunet int ken beo, ken buhan war an dro,  
Ma kred d'ei he deus groet eun hunvre gwall-c'houero...

N'hall birviken sonjal e ve bet pellaet  
Eus da aochou trez flour, eus da riblou karet!

Koulskoude en anzav ez eo red mad d'ezi,  
Dirak ar wirione e teu da hirvoudi...

Hirvoudou a c'hlaç'har, a geun, leun a zaero,  
Daoust e d'he c'harante vo red d'ei mont en dro;

Na petra zo kiriek n'haller ket er bed-man  
Chom el lec'h a garer dreist pep tra ar muian?



Da ze e lavar d'in da vouez krenv, mor divent,  
— « Kar Doue da gentan, kerz goude gant da hent! »

Oh ! pa vin pellaet, digouezet er c'hoajou,  
Klevet a rin da vouez a-dreuz d'ar meneou ?

Ha ma n'he c'hlevan ket a-dreuz d'ar meneou,  
Me a yelo d'he c'hask dindan pin ar c'hoajou...

Ennè o c'houibanât e klevin an avel,  
Dimeus da vouez, ô môr, hen a vezo henvel ;


D'en chilaou ma c'halon a vo ive digor,  
Ha, seder, he laro : — Klevet ran trouz ar mor !

Berrât ra amzer, tosiât ra d'an termen,  
O mor, me a garfe n'az kwitafen biken !

Hogen pa 'z eo red d'in laret d'it : Kenavo !  
Evit 'n em frealzi bemde me a gano :

O mor braz ha divent, mor kaer, mor dudius,  
Pegoulz c'hoaz dirakout 'n em gavin evuruz ?

*Zant-Efflam, mcurz 1914.*



## Ma Filhorez Vihan

DA FILOMENA MAREC.

Pell amzer zo e sonjen : — Pegoulz e teui an de,  
Ma c'hallin bezan paeron 'vel an dud-all ive ?  
M'am bo eur filhor bihan pe eur filhorezig  
Evit gallout 'n oc'h enor kana eun tam zônig...



Zammet gant se ma spered eun devez me yeas  
 D'ober eur valeaden ebarz kreiz eur c'hoat bras ;  
 Eno eun evnig bihan, gane war eur ween  
 Hag a lavare : — « Mignon, bezan' z po da c'houlenn...

- » Bezan' z po eur filhorez, d'ezi te vo paeron,
- » Hag ouspenn c'hoaz e kredan te a vo d'ei tonton ;
- » Hi a vo d'it filhorez, bezan vo da nizez,
- » Daou zigare d'it, mignon, da gavout levenez ! »

P'am oa klevet ar c'hêlo oan chomet zouezet,  
 Da zellet ouz an evnig am eus bet 'n em laket...  
 Mes al lapousig bihan, skoemp, skoemp reas frou, frou !  
 Ha biskoaz goude er c'hoat na welis an aotrou...

Gwir laras al lapousig, frealz zo em c'halon,  
 Bezan 'm eus eur filhorez, d'ezi me zo tonton !  
 Eur filhorez ar vravan... oh ! koant en he c'havel,  
 Mar dije bet diou-eskell oa mad d'ober eun êl !

Ma filhorez he deus bleo melen evel an aour,  
 Ken seder ha pemp kweneg ez eo ar c'hezic paour ;  
 He lagadigou vihan zo glaz, lirzin, laouen  
 Hag he diouchodou ru-skler zo evel diou rozen !

Sard ez eo ma filhorez, c'hoarzin he ra dalc'hmad  
 Bezan ez eo eun didu d'he mam, kenkoulz d'he zad ;  
 Ganti kollont oc'h amzer, ha piou na rafe ket ?  
 An neb an eus eur bugel an eus evurusted !

An holl kichen an élig an em gav evurus  
 Holl a lavaront d'ezan komzou brao, dudius ;  
 Eur blijadur eo ive gwelet na pegen drant  
 Ez eo ar plac'hig vihan en zae he badeziant !

Me ive 'm eus plijadur en kichen he c'havel,  
 O sonjal pegen dister on bet pa oan bugel...  
 Mes hi, en eur vouse'hoarzin, a zav he daou dornig  
 Ha me 'n eur c'hoarzin ive a lar : ma c'halonig !

O welet pegen seder ez eo ma filhorez  
 E teu kerkent em c'halon eun tam tristidigez :  
 — Petra eta zo kiriek eo red d'ar c'hrouadur,  
 Kavout war an douar-man glac'har, displijadur ?

Da betra na chomfe ket an den bepred laouen,  
 Elec'h kavout poan-spered, trubuilh, ive anken ?  
 Perak eta an den paour ken joaüs 'n e gavel  
 Eo red d'ezan kavout poan, enkreiz betek mervel ?

Mes lezomp an holl draou-ze a goste vit hirie,  
 Kanomp a greiz hon c'halon, kanomp gant karante,  
 Levenez ar vam, an tad dirak o bugel kez,  
 Evurusted ar paeron, hini ar vaeronez...

Breman ar pezh a c'houllan evit ma filhorez,  
 Ma vo enpad he bue eur plac'h leun a furnez,  
 Eur plac'h a zoujanz Doue, zentus d'he zad, d'he mam,  
 Hag a gerzo en pep lec'h uhel he fenn, divlam !

Kalz a dud a c'houlenno : — Daoust e piou eo an den  
 An eus laket en e benn sevel ar ganaouen ?  
 — Hennez, en bro ar c'hoajou, zo eur c'hos-vartolod  
 Ha pa gav hir an amzer e sonj c'hoaz 'barz an aod...



## GOUEL an ANAON

(Noz Gouel an Holl-Zent)

WAR DON : A VIHANIG AM EUS PEC'HET...

Ar c'hleier ebarz o zouriou  
 A zon hirie truezus,  
 O mouez a zeblant d'imp klemmou  
 An Anaon gwalleürus...

Sonj e tigasont d'imp-ni c'hoaz  
 Dimeus an holl ineou,  
 A c'houlenn en o enkrez vraz  
 Ouzimp zikour d'o foaniou !

Chilaouomp eta, tud kristen,  
 Klemmou hon c'herent maro,  
 A zo pell zo ' barz an anken  
 O c'hortoz hon fedenno.

Demp holl, mar karet, d'ar vered  
 D'ober enni eun tam tro ;  
 Ha war o beziou daoulinet,  
 Evitè ni a bedo...

— Tosta 'ta, pried glac'haret,  
 Ha pa vi ouz troad ar be,  
 Elec'h 'man korf da wreg karet,  
 Ped Doue vit hec'h ine !



Tad ha mam gez, skuilhet daerou  
 Aze war be ar bugel,  
 A dlee en fin ho teiou  
 O sebelia kent mervel...

Sed-han aze 'barz ar be don,  
 Gant an Ankou eo fale'het,  
 Ranna ra hirie ho kalon,  
 Evitan pedet, pedet ! !

— Bugale, potred ha merc'hed,  
 Stouet war be mam ha tad,  
 Dre o foan ho peus eürusted,  
 Evidoc'h ez int bet mad...

Pedet evit ho tudou kez,  
 Skanvaet d'e o foaniou ;  
 Bezet sonj out' aliez,  
 Dizammet o ineou !

— O breudeur ha c'houi, c'hoarezed,  
 D'an den yaouank zo aman,  
 Petra talv d'ho korf kaout gened  
 D'an douar 'teuf da vreinan

Deut ive da ouela dourek  
 War be ho preur pe ho c'hoar  
 Marteze c'houi a zo kiriek  
 D'e anken ha d'he glac'har ..

Kristenien, na pebez kentel,  
Roet d'imp gant ar gouel-ma ;  
P'eo gwir ez eo red d'imp mervel,  
Karomp Doue en pep tra.

Ankouaomp hon dizunvaniez,  
Hon c'hasoni, drouk-komzou,  
Hag impliomp mad hon devez  
Da zikour ar Re-varo !

Pedomp hirie braz ha bihan,  
Koz, yaouank, tud a bep stad,  
Evit an Anaon en poan  
Oh ! pedomp a galon vad !

Bezomp holl ive unanet  
Da zikour an ineou,  
Zo gant o c'herent uilezet  
En kreiz an tân, er poaniou...

## DISKAN

True, true, o ma Doue,  
Pardonit d'an Anaon ;  
Oute Jezus, true, true,  
Evite, pardon, pardon ! !



## Kenavo...

DA F. CAUREL « EVNIG-ARVOR ».

Kenavo ! komz leun a anken,  
Leun a c'hlac'har evit an den...  
Kenavo ! ive komz a spi :  
Goude ar c'hiniad levenez,  
Plijadur warlec'h an enkreiz,  
Ha de-mad goude hirvoudi...

Kenavo ! oh ! nag ez eo kri,  
P'en em gav de an disparti,  
Laret d'eun tad ha d'eur vam vad  
Ar gomz truezus ha poanius,  
Araok mont en hent glac'harus :  
Kenavo mam, kenavo tad !

Kenavo ! pa ver pellaet  
Dimeus kerent meurbed karet,  
Nag eo frealzus d'an ine  
Sonjal ebarz ar vignoned,  
Ankouas trubuilh ha boan-spered :  
Neuze e kresk ar garante !

Kenavo ! war hent ar vue  
 Me wel daou den seder eun de ;  
 Levenez o deus eur pennad,  
 O c'halonou a zo unan,  
 Enpad an devez o vouskan...  
 Zerr-noz ! digouezet ar c'himiad !

Kenavo ! diwean termen,  
 Eur pennad c'hoaz ha netra ken  
 En em garont hed an hent braz ;  
 Setu breman lec'h an daero,  
 Eur pok pe daou ha kenavo...  
 Pegoulz ? N'ouveer ket... siouaz !

Unan ac'h a gant e dam hent,  
 Hag egile goude kerkent,  
 O daou, mantret, e valeont ;  
 Gwech e tizroont o fennou  
 Evit zellet war o lerc'hou,  
 Ha kenavo, c'hoaz e laront...

Kenavo ! en displeg pell  
 Unan zo distroet breman,  
 Ha d'egile e sav e vrec'h ;  
 Egile a deul c'hoaz eur zell  
 War e vignon arri pell, pell,  
 Ha kenavo e lar gant bec'h !

Kenavo ! evidomp, tud kez,  
 Er bed nemed tristidigez,  
 Hirie aman, arc'hoaz du-hont,  
 Neb lec'h peuc'h padus na gavomp,  
 A boan kouezet mad e tec'homp ;  
 Bemde o vont, bemde o tont !

Kenavo ! diwean kimiad,  
 Leun a grizder, a galonad,  
 A vo war hon gwele maro,  
 Pa gwitafomp ar bed pec'hus  
 Evit an Nenvou evurus,  
**Lec'h na vo mui a genavo !**





## An Tour Dilezet

D'AN AOTRO MEN, PERSON KALLAK.

War dón : KER IS.

Kement-man zo da Gallagiz evit o fedi, en han Doue... Oh ! en han Doue, da zevel eur chapel ouz troad tour Bonvel, abalamour d'o zadou ha, dreist-holl, abalamour d'an amzer goz...

Me a zo eun tour dilezet,  
Gant an holl aman ankouaet ;  
El lec'li-man me a zo distro,  
Kollet, kollet on ' barz ma Bro !

Gwechall ma farrouz oa brudet  
Ha ma iliz darempredet,  
En dro d'in bep sul ha bep gouel  
En em vode tudou Bonvel...



Evidon-me na glevan ken  
Nemed kán klemmus ar gaouen,  
A deu gant sklerijen al loar  
Da gemer peurz 'barz ma glac'har...

Bonvel ! Bonvel !... Petra laran ?  
N'eus ken trouz outi er vro-man ;  
Na glever komz eus he hano,  
Evit an dud hec'h eo maro !

Maro ez out, ô parrouz koant !  
N'an eus ken diouit eur zeblant ;  
Na chom diouit 'med eur skeuden,  
Skeuden da Dour kreiz an dachen...

Skeuden da Dour ha gwareier  
Da iliz koz, gwechall ken kaer,  
War leur pehini ar yeod glaz  
A zav hirie re stank, siouaz !

Ped gwech p'en em gave goueliou,  
Badeziant, eured, pardoniu,  
Am eus aman zavet ma mouez  
Evit kreski da levenez...

Ma mouez breman a zo tavet,  
Ma c'hleier a zo dianket...  
Ma-unan e choman hirie,  
Ouzin netra n'an eus true !



Kleier, a ganas ken sklintin,  
Ennon bemnoz ha bep mintin,  
Klevet ve hekleo ho moueziou  
O liston c'hoaz en traouiennou ?

Evidon-me na glevan ken  
Nemed kân klemmus ar gaouen,  
A deu gant sklerijen al loar  
Da gemer peurz 'barz ma glac'har... !

Neuze pa goue sioulder an noz,  
Me wel ebarz ma bered koz,  
Ineou paour o tarnijal  
Hag o tont warnon da sonjal...

Rak, ma Doue, pa zellan piz,  
En dro d'in zo c'hoaz Bonveliz,  
Bonveliz pell zo o kousket  
Er vered lec'h m'int douaret.

War o be nebeut a welan,  
Ar gristenien o taoulinan ;  
Evel don ez int ankouaet  
Ha kenkoulz ha me dilezet !

D'o badeziant am eus kanet,  
Ha d'o maro ar c'hlaz zonet ;  
D'e breman me a hirvoudo,  
War o doare me a ouelo...

O beziou koz ha koant meurbed,  
Me glev hed an noz er vered,  
O mouez truezus o c'houlen  
Vit ho tud varo eur beden !

Hogen kaer ho peus damanti,  
An dud chom dizeblant ha kri ;  
Sonj ar Re-varo a zo yen,  
Van ouz ho klemmou ne ra den !

An dud zo breman n'houlont ket  
Bezan en dro d'ac'h douaret ;  
Koulskoude en be o Zadou  
Vije, me gred, mad o c'horfou !

Daoust e da ze, gwech ha gwechall,  
Eur c'hoziad daoubleget ha fall,  
E vleo kouezet war e ziouskoa  
A deu d'ho pered 'n eur grena...

Ober ra eun dro d'ac'h, beziou,  
 Sonjal a ra en amzeriou...  
 Hag an dour en e zaoulagad,  
 E sell ouzin gant kalonad !

Oh ! mar zo c'hoaz 'barz ar vro-man  
 Kerent d'an dud a zo aman,  
 Me o fedo, en han Doue,  
 Da gemer ouzin-me true ;

Oh ! me o fedo da zevel  
 Ouz ma zroad eun tammig chapel,  
 Elec'h ma larfont a galon  
 Pedennou vit an Anaon !

Kleier lakfont ennon ive,  
 Ma sonin ar c'hlaz adarre,  
 Ma larin bemnoz da Vreiziz :  
 — « Aman eo e kousk Bonveliz !!! »



## DRE AN HENCHOU DON

D'AM MIGNON « DIR-NA-DOR ».  
 EN KOUN HON REDADENNOU DRE VREIZ.

WAR DON : KLEIER AN NOZ.

Dre an henchou don, pa oamp bugaligou,  
 Nag hon deus redet, nag hon deus lampet,  
 Nag a c'hoarzadeg, a c'hoariadennou,  
 Pa deuemp d'an noz gant hon zaout karet !

*Diskan*

Dre an henchou don, dre an henchou don,  
 Nag eo kevanus tremen an amzer,  
 Dre an henchou don, neuze ar galon  
 A deu da dridal gant sonjou tener...

Dre an henchou don, evidomp yaouankiz,  
 Nag a blijadur warlerc'h ar pardon,  
 O tonet en dro gant eur spered diskwiz,  
 Ennomp karante, karante gwirion.

Dre an henchou dòn, piou eta, piou eta,  
N'an eus gouzanvet... teneridigez !  
O klevet eostig us d'e benn o kana,  
Eus koste e « zous » neuze levenez ?

Dre an henchou dòn, dre ma kreskomp en oad,  
E sonjomp ive er brezel garo ;  
Hon zùd koz gwechall o deus skuilhet o gwad  
Dre an henchou dòn 'vit o Fe, o Bro !

Dre an henchou dòn, envor hon C'hendadou,  
A-dreuz d'an amzer eno zo chomet ;  
O mouez binniget, gant kân an avelioui,  
A deu, evurus, d'imp c'hoaz da laret :

Dre an henchou dòn, ped gwech hon deus klevet,  
Enpad miziou du, hirvoud ha klemmou,  
Klem ineou paour gant kerent dilezet,  
Pe c'hoaz gwigour treut *Karrig-an-Ankou* ?

Dre an henchou dòn, pa glevomp ar c'hleier  
O teul dre ar Vro salud ar Werc'hez,  
E plij d'imp ive en eur dostât d'ar ger,  
Gant o zon sklintin unani hon mouez...

Dre an henchou dòn, pleget gant ar gozni,  
Meur a wec'h, marvad, teufomp da vale,  
Sonj hon yaouankiz a vo d'imp eua dudi,  
Ha daerou tener skuilfomp marteze...

Dre an henchou dòn... Oh ! chomomp, Bretoned,  
Chomomp holl, m'ho ped, chomomp da vevan,  
Na gavfomp neblec'h kenkoulz evurusted,  
Bro an henchou dòn eo ar Vro gwellaan !!!





## Ar Garante Guzet

D'EFFLAMMIG AN HENORET

### I

Em c'halon zo diskleriet eur garante vraz, vraz,  
Eur plac'hig a garan ; hi na oar ket... siouaz !  
Eur plac'hig leun a c'hened, eur plac'h fur ha kristen,  
Lavarout d'ei ma sonj e rafen, mar kredfen...  
Kentan gwech 'm oa he gwelet e oa en ti he mam,  
Lec'h chom ar plac'h yaouank didamall ha divlam !  
An de-ze, hep goût d'ezi, outi e ris eur zell,  
Eur zell a garante... O koantât turzunel !  
Da zellet eus ar plac'hig am oa 'n em ankouaet,  
Hag aboue an dro-ze ganti on goneet ;  
Goneet 'deus ac'hanon gant he zellou lirin,  
Gant he daoulagad c'hlaz hag he c'hoarz ken sklintin,  
He mouezig flour ha tener 'gomze ken dudius  
Ma lake ma c'halon da dridal evurus...

### II

Aboue ebarz ar c'hoajou e ven o hirvoudi,  
Daoust na penoz a rin evit laret d'ezi ?  
Pa ven pell, pell diouti, kollet em hunvreou,  
Me a lavar neuze : — Outi me 'anzavo !  
Siouaz ! pa ven 'n he c'hichen e choman dilavar,  
Eus peb tra a gomzan nemed eus ma glac'har...  
Me garfe vit komz ganti kavout mouez an Awen (1)  
Pa gân dous ha tener war gerden ma Zelen,  
Me garfe kavout ive mouez drant al lapousig  
Evit laret d'ezi : — Ma dous, ma c'halonig ! !

### III

Pa n'am eus mouez an Awen, na kân al lapoused,  
Me gaso d'am dousig ma hirvoudou bepred :  
Eostig a gân er c'hoat dôn, kerz 'ta evidon-me  
Da welet ma mestrez, lar d'ei ma c'harante...  
Lavar d'ezi dre da gân : — « Turzunel ar goantan,  
» Vit da wellan mignon, ez on-me deut aman...  
» Deut ez on da laret d'it ar garante wirion  
» A verv evidout-te ebarz kreiz e galon !

(1) l'Inspiration.

- » Karout e ra ac'hanout, na gred ket en laret,  
 » Ha gant-se e spered zo bemde trubuilhet.  
 » Ar pezh a c'houll diganit ez eo eur c'hoarzaden,  
 » Eur gomz eus da galon evit ma vo laouen ;  
 » An evurusen devez hen do war ar bed-man,  
 » Vo an de ma roi da galonig d'ezan...  
 » O turzunelig dinam, plac'hig fur ha dispar,  
 » Evitan, lar d'in-me : — mignonig, me da gar !  
 » Neuze 'vat, a denn-askell, me a yelo joaüs  
 » Da gas d'ez servijour ar c'helo evurus...  
 » Gant da gomz madelezes, *e garante guzet*  
 » A vo chenchet ganit 'n eur galon frealzet ! »

—o—

Eur potr yaouank glac'haret an eus zavet ar zon,  
 Pa na grede d'e " zous " laret e hoan-galon...



## MA C'HOULMIG

I

Gwechall e hirvouden  
 Ebarz ar c'hoajou don ;  
 Breman me a zo laouen,  
 Tridal ra ma c'halon !

Evit bezan eürus  
 Me a glaske bemde,  
 Eun élig madelezes  
 Ha leun a garante...

Breman p'am eus kavet  
 An élig a glasken,  
 Ma bue zo kompouezet,  
 Tec'het eo ma anken !

## II

O redek ar c'had rouz,  
 Ar c'had rouz eun devez,  
 Ebarz kreiz eur c'hoat didrouz  
 E kavis eun heiez !

Diraki e chomis,  
 Stereden a zudi !  
 Ken koant ha hi na welis,  
 Na welis c'hoaz hini.

Neuze, tra zouezus,  
 N'ouveau kaer petra,  
 Ma c'halonig evurus  
 Na re nemed krena...

Ha hi dimeus he zu,  
 A zeblante nec'het ;  
 Deut he oa da vezan ru,  
 He mouez a oa stanket...

Warnon hi a dolas  
 Zellou don ha tener ;  
 He daoulagad a oa glaz  
 Hag he diouchod ru-skler.

## III

En eur zével he fenn,  
 Hi a laras doanik ;  
 — « Ouz ma hano penn-da-benn  
 » A ve groet Annaik... »

— « Annaik, ken karet,  
 » Klevet en han Doue,  
 » Me ho ped n'ankouaet ket,  
 » O nan, ma c'harante...


» Evidoc'h me a vo,  
 » Ya, ar gwellan mignon ;  
 » Oh ! miret d'in, en distro,  
 » Eul lec'h en ho kalon !

» Na c'houllan ket nemeur,  
 » Gout a ret, me ho kar,  
 » Mar karet e vin d'ac'h breur  
 » Ha c'houi a vo d'in c'hoar ? »

— « Dimeus ma c'harante,  
 » N'eo ket eun tam hepken,  
 » Ma c'halon diwar hirie,  
 » A zo d'ac'h da viken ! »

Sed aze, mignoned,  
 Petra a zo kiriek  
 E kanan seder bepred  
 Ma zonig brezonek :

— Gwechall e hirvouden  
 Ebarz ar c'hoajou don,  
 Breman me a zo laouen,  
 Tridal ra ma c'halon !



## Kân, Barz yaouank

DA G. AR RUMEUR « MATHALIZ ».

Dindan eun derven goz, da zerr-noz ankeniet,  
 E klevis eur vouez tener o laret :

*Diskan*

Kân, kân,  
 Barz yaouank, bez seder,  
 Kân da Zoue, da zousig, da vro gaer,  
 Kân,  
 Hag an evurusted  
 Ebarz da kalon a vevo bepred !

Me, eme ar vouezig, eo ine Breiz-Izel,  
 A lavar d'it dre hirvoud an avel :

Na gemer ket trubuilh, nebeutoc'h c'hoaz anken ;  
Neb a ren tud a dle bezan laouen...

Ha petra a c'hallfe ober d'it poan-spered ?  
D'it ar vue a vezo skanv meurbed.

Evit se, bez doujus da Zoue da Dadou,  
War-zu an Nenv tro bepred da zellou !

Mar teu d'it hirvoudi o vezan da unan,  
Klask unan all da lodenni da boan...

Eus a greiz da galon, kar eta eun dousig,  
Bebet goude, turzunel hag eostig !


Neuze ar vuegez a vo dudioc'h,  
Da zaou ar bec'h a zo dale'hmad skanvoc'h...

Chom da veva en Breiz, na gwita ket da vro ;  
E-tal da gavel gortoz ar maro...


Da Vro he deus ezom — lak ze start en ez penn —  
Kalon d'he c'harout, diouvrec'h d'he difenn !

Kerz eta, Barz yaouank, ha zent ouz ma c'hentel,  
Kentel e ro eur vam vad d'he bugel...

Evelse e kavi plijadur en pep lec'h,  
Bale bro, c'hoarz, bez laouen, bez dinec'h !







## Ma Dousig Koant

D'AM MUIAN-KARET... PA VO KAVET

Kânet em euz war ma zelen entanet

Ma Breiz-Izel,

He gizioù fur, he zent koz, he zud vrudet,

He yez santel ;

Hirie da stenna start d'ezi he c'herden,

Me am eus c'hoant

Ha kana warni dre eur zonig laouen

Ma dousig koant !

Ma dousig koant ! N'euz ket eur plac'h evelti

War an douar ;

Evit kredi eo red gwelet anezi,

Bleuen dispar,

Diwanet kaer en eun draouiennig a Vreiz,

Ha hi ken drant,

Eno he kav heol ha gliz-veure a-leiz,

Ma dousig koant !

Ma dousig koant ! Henvel eo ouz eun élig,  
Dous ha tener...

He daoulagad zo glaz, lirzin, birvidik,  
Dalc'hammad seder,

He zellou dôn leun a spi, a garante  
Zo eur zeblant

Dimeuz kaerder ha levezec hec'h ine,  
Ma dousig koant !

Kaer dreist peb tra ez eo ma muian-karet,  
Ma ferlezen !

He bleo ken flour a zo du ha klaouieret  
War he zâl gwen ;

He diouchod ru 'ro d'ei kement a c'hened,  
Ma laran drant,

Ez eo ar c'hoantan en touez an holl verc'hed  
Ma dousig koant

He mouez sklintin a gomz d'in ken frealzus  
En eur grena,

Ma trid em c'hreiz ma c'halonig evurus  
Ha leun a joa...

He c'hân zo kaer evel hini an evned,  
Eveltan drant,

Ouz e glevet 'nijan betek ar stered,  
Ma dousig koant !

Evel ma plij d'an durzunel he c'hoajou,  
 Hi gar ive  
 Tremen didrouz en kreiz sioulder ar maeziou  
 He zam bue ;  
 Eno ar blijadur zo talvoudusoc'h  
 Eget arc'hant,  
 En gwirione, eno e karan muioc'h,  
 Ma dousig koant !

Ma dousig koant !... Oh ! pa ven en he c'hichen,  
 Evurusted !

Siouaz, pell, pell diouti, pebez anken  
 Ha poan-spered...

Me a garfe tremen ma amzer dalc'hmad  
 Hep nec'hamant,  
 Klevet e mouezig, gwelet he daoulagad,  
 Ma dousig koant !

Ac'han d'an devez ma vefomp unanet  
 'N eil d'egile,  
 E hirvoudin d'am dousig meurbed karet  
 Ha noz, ha de...

Ha goude enpad hon zammig buegez  
 Me gano drant,  
 Da c'hortoz mont gant Doue d'al levenez,  
 Ma dousig koant !



## Ma Botou koat

D'AN AOTRO CORVAISIER, PERSON PLOUEG-AR-MOR.

Me a zo o paouez prena  
 Eur botou koat fô,  
 Eur botou eus ar re vrava  
 A zo 'barz ar vro ;  
 Eur botou ken fentus, ken kaer  
 Ma ve laret d'in p'o gweler :  
 O kaerât,  
 Kaerât eo da votou koat !

En gwirione, int a zo koant,  
 Evelte n'eus ket !  
 Ha bemde me am eus damant  
 Gante o kerzet...

Na c'houlfen biken, ma Doue,  
 Barz ar fank labea ane !  
 O kaerât,  
 Kaerât eo ma botou koat !

Digas reont da sonj d'in-me  
 Eus an amzeriou...  
 Ma Zadou a douge ive  
 Gwechall ar botou ;  
 Neuze war veneou ha roz  
 Int a gane bemde, bemnoz :  
 O kaerât,  
 Kaerât eo hon botou koat !

A viskoaz ebarz Breiz-Izel,  
 An dud a vicher :  
 Duked, Barzed, tud a vrezel  
 Beleg ha Fanch-Kouer,  
 Ac'h e gant enor da vale  
 'N o zreid eur botou koat bemde ;  
 O kaerât,  
 Vijent gant o botou koat !

Me ive, vel ma C'hendadou  
 A heuilho bepred,  
 En eur vale war o roudou,  
 Skouer ar Vretoned ;  
 Me a gerzo 'pad ma bue  
 Gant eur botou koat evelté :  
 O kaerât,  
 Kaerât eo ma botou koat !

Ha p'en em gavo an Anko  
 Eun de d'am falc'hâd,  
 D'ezan hepdale me laro :  
 — Gortoz eur pennad,  
 Ma lakin c'hoaz ma zreid brevet  
 Er botou koat am eus karet...  
 O kaerât  
 Kaerât eo ma botou koat !

Kerkent me yelo d'ar bed-all,  
 Hep anken em c'hreiz,  
 Rak hon Zalver laras gwechall,  
 Pa deuas da Vreiz :  
 — « Zalvet e vo neb a dougo  
 Eur botou koat eür e varo ! » —  
 O kaerât,  
 Kaerât eo ma botou koat !

Ha mar rafe d'in zellou du  
 Zant Per goz, d'e dro,  
 Me a larfe d'ezan dustu :  
 — Sell ouz ma boto...  
 Me gred, d'an Nedelek, Jezus  
 A deue bep bla evurus,  
 Da lakât  
 Délou mad em botou koat !

Ar Werc'hez, pa glevo ma mouez,  
 A deüo neuze,  
 Leun a zouster, a levenez,  
 Da laret d'in-me :  
 — « Tosta, o bugel ar gwellan,  
 Rak da votou koat a garan...  
 O kaerát,  
 Kaerát eo ar botou koat ! »

Dougomp-holl eta, Bretoned,  
 Dougomp ar botou,  
 Miromp gant o fennou-kaled,  
 Furnez hon Zadou ;  
 Ha gante kreiz an eürusted  
 En Nenvou ni gano bepred :  
 O kaerát,  
 Kaerát eo ar botou koat !





## CHOM EN BREIZ-IZEL

KINNIGET D'AR MERC'HED YAOUANK  
A C'HOANTA MONT DA BARIZ

Plac'hig yaouank, perak 'la tec'hel  
Pell dimeus da vam ha da dad ?  
Perak kwitât da vro Breiz-Izel,  
Elec'h out evurus ha mad ?


Ankoua ar c'heriou,  
Gant o falz madou ;  
Enne 'lec'h madou e kavfes trubuilhou...  
O chom en bro da gavel,  
Chom, chom en Breiz-Izel !

Ar c'heriou a zo leun a anken  
D'an dud zo ennê divroet ;  
Ennê ar c'halonou a zo yen,  
Karante wirion n'an eus ket !

Nemed gwarizi,  
 Droug ha kasoni,  
 An holl oc'h en em daga, en em dibri...  
 O chom en bro da gavel,  
 Chom, chom en Breiz-Izel !

Pell eus da vro kollfes da c'handed,  
 Koll rafes ive da furnez,  
 Da yec'hed, da nerz ha da c'hened  
 Ha da vrud-vad a Vreizadez ;  
 Goude en distro,  
 E skuillfes daero :  
 An enor kollet n'eo deut biskoaz en dro !  
 O chom en bro da gavel,  
 Chom, chom en Breiz-Izel !

Da dad, da vam baour zo o ouela,  
 En o daoulagad daerou kri...  
 Piou a rofo d'ê eun tam bara ?  
 Ha piou a harpo o c'hozni ?  
 Glevez ket o mouez,  
 A lar hep paouez,  
 D'it gant karante ha gant kalz a furnez :  
 O chom en bro da gavel,  
 Chom, chom en Breiz-Izel !



« Na gwita ket da douriou uhel,  
 » Kizellet ha dantelezet,  
 » En pere ar c'hleier en avel  
 » A zon goueliou hon zent karet,

» A lid pardonon,  
 » A gan eurenjou  
 » Hag a lavar d'it dre hekieo o mouezioù :  
 » O chom en bro da gavel,  
 » Chom, chom en Breiz-Izel ! »

Petra eta c'hoarve d'ez kalon,  
Ma kwitaez eur vro ken koant ?  
Petra c'hoantaez, lavar hep aon,  
Lavar breman hep nec'hamant ?

Evidout, me gred,

Breiz a zo bepred

Eur vro ar gwellan a zo ebarz ar bed !

O chom en bro da gavel,

Chom, chom en Breiz-Izel !

An douar a roas d'ez tadou

Eur bevanz frank, mad ha nerzus,

A rofo d'it enpad da zefou,

Magadurez krenv ha yac'hus ;

Bez eta dinec'h,

Gant poan da ziou-vrec'h,

E vevi en Breiz gwelloc'h pell vit neb lec'h !

O chom en bro da gavel,

Chom, chom en Breiz-Izel !

Na gwita ket da douriou uhel,

Kizellet ha dantelezet,

En pere ar c'hleier en avel

A zon gouelioù hon zent karet,

A lid pardonieu,  
 A gân eureujou  
 Hag a lavar d'it dre hekleo o moueziou :  
 O chom en bro da gavel,  
 Chom, chom en Breiz-Izel !

Na gwita ket bro da Gendadou,  
 Bro ar gizioù koz, koz ha fur,  
 Bro ar chapelioù, ar c'halvarioù,  
 Bro pep frankiz renet gant stur ;  
 Bro ar zonioù kaer,  
 Ar gwerzioù tener,  
 A ziston bemnoz a-dreuz d'hon farkeier...  
 O chom en bro da gavel,  
 Chom, chom en Breiz-Izel !

Chom da veva en ez traouiennig,  
 Elec'h m'eo zavet da di plouz ;  
 Elec'h ma c'hoaries, bugelig,  
 Seder ha pell dimeus pep trouz...  
 Kar da veneou,  
 Da lann, da goajou,  
 Ganté e kleve dre vouez an avelioù :  
 O chom en bro da gavel,  
 Chom, chom en Breiz-Izel !



Chom da veva en harz an iliz,  
 Elec'h ma 'z out bet badezet,  
 Kichen ar vered 'lec'h ma tiskwiz  
 Da gerent koz pell zo marvet...  
 Ha neuze ive  
 E c'halli goude  
 Diskwiza gante 'barz an hevelep be...  
 O chom en bro da gavel,  
 Chom, chom en Breiz-Izel !

Pep tra en Breiz a bed ac'hanoud  
 Da chom en o c'hichen, 'n o zouez,  
 Chilaou ané, holl o deus galloùd  
 War da galon a Vreizadez...  
 O kaeran peden,  
 E laront d'an den  
 A c'hoanta kwitât e Vam-vro da viken :  
 O chom en bro da gavel,  
 Chom, chom en Breiz-Izel !

Kas pell diouit ar sonj divalo  
 An eus trubuilhet da spered,  
 Chom breman da veva en ez Pro,  
 Enni 'z po levez bepred...



Lavar eveldon,  
 A greiz da galon,  
 Ma klevo Breiziz hon c'hân kaer ha gwirion :  
**Chomomp en bro hon c'havel,**  
**Chomomp en Breiz-Izel !!**



## Ar Barizianez

En hon bro Breiz eman ar c'hiz  
 Gant eur rum merc'hed yaouank,  
 Da vonet hirie da Bariz,  
 Da glask madou, bue frank ;  
 C'hoant o deus da vezan matez  
 Dindan an holl er c'herio.

DISKAN

Foei, foei, foei d'ar Barizianez,  
 A ra mez da dud he Bro !

Gonit bara en Breiz-Izel  
 Ar plac'h yaouank na c'houll ken ;  
 En he fenn a zo deut avel :  
 — « Bale bro 'ta, kouilhouren ! »

Setu hi o tec'hel hep mez  
Pell eus he zud en daero...

Foei, foei, foei, d'ar Barizianez  
A ra mez da dud he Bro !

Ma c'houlfe an dud diganti  
Pelec'h hec'h a ken diskwiz,  
Hi a larfe, hep he fedi,  
— « Me ac'h a da *Ba-a-riz* ! » —  
Ha neuze d'ar c'henaouegez  
Pep den, dre fent, a laro :

Foei, foei, foei, d'ar Barizianez  
A ra mez da dud he Bro !

Pa vo pellaet eus he Breiz  
Hag en Pariz dishanve,  
Al labouriou kaled, direiz,  
Eviti a vo mad tre ;  
Evel eul loen hed he devez,  
Hep paouez hi a boanio...

Foei, foei, d'ar Barizianez,  
A ra mez da dud he Bro !

Koll a rei ebarz ar ger vraz  
He zammig nerz, he yec'hed,  
Ha pez eo ar gwasan, siouaz !  
He furnez hag he gened ;  
N' he viro eus ar Vretonez  
Netra nemed an hano !

Foei, foei d'ar Barizianez  
A ra mez da dud he Bro !

Mar tigoue d'ezi dont en dro,  
Goude vo bet en Pariz,  
Neuze he vo eur plac'h faro,  
Eun dimazel eus ar c'hiz ;  
Gwisket vo 'vel eur rouanez,  
Vo ken anveet 'n he Bro !

Foei, foei, foei, d'ar Barizianez  
A ra mez da dud he Bro !

War he fenn evel eur sparfel,  
Vo gwintet eun tok re vraz,  
Ma laro outan an avel :

— « Heman zo prest da vont c'hoaz... ! » —  
Leun vo ar plac'h a lorc'h, a c'houez  
Eus lein he fenn d'he botó !

Foei, foei, foei, d'ar Barizianez  
A ra mez da dud he Bzo !

Dilezet vo ar brezoneg,  
Ankouaet e vo ganti ;  
Distaga a rei ar galleg ;  
— « Oh ! lé lé, j' viens d' Pèris ! » —  
Eur vez vo gwelet ar plac'h kèz  
Gant he stum hag hec'h ardo...

Foei, foei, foei, d'ar Barizianez  
A ra mez da dud he Bro !

Da bep tra ebarz Breiz-Izel,  
Hi a gavo e dam si,  
N'he devo ouz bro he c'havel  
Nemed drouk ha kasoni ;  
Er gêr hi a vezo diez,  
Red vo d'ei mont c'hoaz en dro !

Foei, foei, foei, d'ar Barizianez  
A ra mez da dud he Bro !

Ar plac'h nan eo ket Breizadez,  
Rak he bro he deus nac'het ;  
Bezan eo eur **Barizianez** ! !

Ha piou an dije sonjet ?...  
— Huchomp holl eta en eur vouez  
Warni a-bouez hon fenno :

Foei, foei, foei, d'ar Barizianez  
A ra mez da dud he Bro !





## Kimiad ar Martolod

Goude ma zad, ma mam, pebez kalonad d'in-me  
O tont da laret d'it, Anna ma c'harante,  
Ar gomz kri ha c'houero :  
— Ma dousig koant, kenavo !

Galvet on gant Bro-C'hall, outi eo red mad zenti,  
Ha monet hepdale da zifenn anezi  
War al listri-brezel,  
Pell dimeus ma Breiz-Izel...

Hirie eus da gwitât am eus kalz a boan-spered  
Ha glac'har ma c'halon a zo braz, braz meurbed ;  
Bet hon deus plijadur  
Evel daou zen yaouank fur.

Ne teus ket, o ma dous, sonj eus devez ar pardon,  
Elec'h 'z poa roet d'in hep distro da galon,

Da zorn 'barz ma hini  
Dirak ar Werc'hez. Vari ?

Ne teus ket sonj ive dimeus an holl bennadou,  
Hon deus bet tremenet hon daou dre an aochou,  
O chilaou gant dudi  
Ar mor braz o hirvoudi...


Diwar vremen, siouaz ! d'hon levezet zo achu,  
Hag enpad pemb bla hir pep hini eus e du  
A ouelo noz ha de,  
A ouelo d'e garante.

Pa vin o hunvreal war ma gwern ma-unanik  
Pa c'houeo an ezen er c'herden goustadik,  
Ma spered a yelo  
Da vale war-zu ma Bro !

Neuze goude kuz-heol, pa glevi mouez an avel  
O kana dudius dre lannou Breiz-Izel,  
Digemer gant kalon  
Gourc'hemenou da vignon...

Hen a chomo dalc'hmad d'e zous leun a lealded,  
Ha hi en e genver a vo feal bepred...  
A-dreuz d'ar mor divent,  
'N em garfomp vel diagent !

Kaled eo kimiadi, mes an amzer a dremen,  
 Oh ! paouez da ouela... N'az ankouañ biken !  
 Da c'hortoz an distro...  
 Ma dousig koant, kenavo !!



## O c'hortoz an distro

WAR DON : KAOURANTING.

Aboue an devez glac'haret  
 Eo tec'het ma mui-an-karet,  
 Nemed hirvoudi n'em eus groet...

Ne baouezin da hirvoudi,  
 Na da skuilh ive daerou kri  
 Ken vo diszroet hanini,

A laras d'in araok kwitad :  
 — Ma dousig, kri eo ar c'himiad,  
 Ma c'halon a vo d'it dalc'hmad ! —

Ya, ar c'himiad a zo c'houero,  
 An disparti a zo garo,  
 Pegoulz e teufo an distro ?

Oh ! pegoulz c'hoaz e c'hallin-me  
 Gwelet ma Ferig adarre,  
 Laret d'ezan ma c'harante ?



Da c'hortoz, aman en oachou,  
 Me deu bemde d'ober kanvou  
 Ha da ouela d'an amzeriou...

Pa welan du-hont, er pellder,  
 An evned o nijal seder,  
 Me lavar gant eur vouez tener :

— Gant ho tiou-eskell frank digor,  
 Petra eta, lapoused-môr,  
 E larfet da blac'hig Arvor ?

Komzet d'ezi a garante,  
 Ha frealzet, en han Doue,  
 Frealzet d'ezi hec'h ine...

Laret d'ezi ho peus gwelet  
 Pell du-hont he muian-karet,  
 D'ezi eta, d'ezi laret !

Laret d'ei, war eur wern uhel,  
 Eman martolod Breiz-Izel  
 O hunvreal d'e durzunel...

Lapoused skanv ha ken diskwiz,  
 Nijet a-dreuz d'ar c'houmoul briz  
 Ha retornet c'hoaz war ho kiz,

Tarnijet a-us d'al lestrig,  
 Hag, eno, gant eur vouez flourik,  
 Komzet d'ezan eus e zousig !

Dimeus he feurz kanet d'ezan  
 Eur zonig an dudiusan,  
 Eur werzig eus an teneran ;

Laret d'ezan an neb hen kar  
A zo breman leun a c'hlac'har,  
Evel eun durzunel hep pâr...

Hag ac'h a bennoz d'ar c'hoat don  
Evit distan he foan-galon,  
Da c'hortoz distro he mignon !



## Distro ar Martolod

D'AM BREUR EMIL.

TON : AR BEMPOULEZEN.

Digouezet eo velkent an devez  
Oa ganin pell zo gortozet,  
Hirvoudi em eus groet aliez,  
Breman ma chaden zo torret...

O devez karet,  
Devez binniget !

Sav warnon da heol madelezes,  
Ma tommo c'hoaz ma ezili ;  
O heol, skuilh da sklerijen lintrus  
Ha kemer lod 'barz ma dudi !

Meur a wech em eus bet poan-spered,  
Skuilhet am eus ive daerou...  
Hirie ez on evurus meurbed,  
Achu e zo d'am zrubuilhou,

Devez binniget,  
 Ha ken gortozet,  
 Tridal 'ra ma c'halon en em c'hreiz,  
 Seder on evel eun eostig ;  
 Souden e welin c'hoaz ma bro Breiz,  
 Ma farrouz, ma zud, ma dousig !  
  
 Enpad ma zroïou war ar môr braz,  
 'M eus gwelet kalz a vroïou koant,  
 Mes n' am eus gwelet... O nan, biskoaz !  
 Hini hag a vefe ken drant,  
     Ha ma bro garet,  
     Breiz-Izel hanvet...  
 O ma Breiz, Rouanez ar broïou,  
 Ma Breiz dudius ha dispar,  
 Eur martolod, bugel d'ez aochou,  
 Eus a nerz e galon da gar ! !  
  
 Hepdale 'n em gavo adarre  
 Ma zreid war da zouar kaled,  
 Hag eno gant an amzer-neve  
 E klevin kân al lapoused ;  
     Pere a laro  
     En touez o zonio :

— Dizro, dizro martolod yaouank,  
 Deus da welet da lojennig,  
 Elec'h kavi eun nor digor frank,  
 Eun tad, eur vam hag eun dousig !  
  
 Oh ! gwelet e ran tour an iliz,  
 Klevet e ran mouez ar c'hleier,  
 Gant o zon en em gavan diskwiz,  
 Ma c'halon zo laouen, seder,  
     Rak ma 'z eo ken kri,  
     Tec'hel, kimiadi...  
 Pegen evurus ez eo ive  
 Goude bezan bet ankeniet,  
 Dizrei yac'h mad ha leun a vue  
 D'ar vro elec'h ma ver ganet !  
  
 N'hallfe den laret ar blijadur  
 A zo breman 'barz ma ine ;  
 C'houez ar bleun balan, lann ha glazur,  
 A ra d'in beva a-neve...  
     Dirakon 'welan  
     An ti a garan :  
 Ti plouz ma zud koz, ma mam ha ma zad,  
 O ti bihan koant ma c'havel ;  
 Ac'hanout-te e karin dalc'hmad,  
 Ennout-te e fell d'in mervel !...




Ennout e teuin da ziskwiza  
 Dimeus ma zroiou hir ha pell,  
 Ennout e chomo ma dous Anna,  
 A sko breman warnon eur zell ;  
 He daoulagad c'hlaz,  
 D'in-me a ouelaz...

'N em frealz hirie, ma dousig koant,  
 Setu c'hoaz da wellan mignon ;  
 Gantan na gemer ken nec'hamant,  
 Rak dit-te ez eo e galon !

Tad ha mam gez, setu ho pugel,  
 Paeet gante e c'hle d'ar vro ;  
 Dizro ez eo c'hoaz da Vreiz-lzel,  
 Warnan na skuilhet mui daero,

Mes roet d'ezan

Ho pennoz gwellan :  
 Binniget breman e garante,  
 Ha groet ma vezo evurus...  
 Annaig vo e wreg hepdale,  
 Annaig a vo d'ac'h doujus !



## AN EMZIVADEZ

War dôn : Ar Yeodet

I

Me zo eur paourkez emzivadez,  
 A c'hlac'har karget ma buegez,  
 Ma-unan e skuilhan daerou

Aliez...

Netra na skanva ma foanio

Garô !

Abred e kollis ma mam, ma zad,  
 N'am eus biskoaz oc'h anveet mad ;  
 Chom ma-unanig... O gwasan

Kalonad !

Tad ha mam ennoc'h e sonjan

Breman...

Kent mervel eur vam vadeleuz  
 Deulas warnon eur zell truezus,  
 A laras gant eur vouez izel,

Ankenius :

— Petra 'ri hep mam, hep skoazel,  
 Bugel ?

Aboue dourek, dourek e ouelan,  
 Emzivadéz kollet dre-aman,  
 Hep nerz, hep zikour, hep souten

A vevan...

N'am bo plijadur abed ken  
 Biken...

## II

D'in-me ar vue a zo kaled,  
 Tolet, distolet on dre ar bed ;  
 C'hoaz ne gavan ket... Evidon

Poan-spered !

Karante dener eur galon  
 Wirion,..

M'am bije bet c'hoaz d'am frealz,  
 Ha da gemer lod em foaniou kri,  
 Ean ine leun a drugare...

O dudi !

Siouaz, dilezet on bemde,  
 Bemde...

Ankouaet on gant ma c'henvroiz,  
 Gant ma dilez ez on arri skwiz ;  
 Ha c'hoaz e kresk ma zrubuilho

En peb giz,

Pegoulz e sêc'hô ma daero  
 C'houero ?

Perak eo ar vue ken digar  
 Evit eur rum-tud war an douar ?  
 Pa vev eur rum-all evurus,

Hep glac'har,

Perak eo ma c'hlem hirvoudus  
 Padus ?

Pa hunvreal 'barz ma c'hambre dister,  
 Pa huanadan gwech hag amzer,  
 E teu neuze eul lapousig

Ken seder,

Da gana d'in eun tam zonig  
 Tener...



— Evnig Doue, kan eta da zôn,  
 Kan da vihana, kan d'in hep aon,  
 Te a zo d'an emzivadez

Eur mignon,  
 Hep-out n'he defe levenez,  
 Jamez !

Pa ven disprizet gant an estren.  
 Pa ve ma c'halon leun a anken,  
 E kasan d'ac'h, o ma Doue,

Eur beden...  
 Teurvezet kemer ouzin-me  
 True !

Eus ar bed n'hallan gortoz netra  
 Pegoulz achuo ar vue-ma ?  
 Ma c'hall ma spered nijal  
 Ha kana,

Ha d'an Nenvou mont dishual.

! Raktal !

III

Pa vo maro an emzivadez,  
 Piou a bedo evit ar plac'h kez ?


Piou a daoulino war he be  
 Gant evez ?

Piou a sonjo en hec'h ine  
 Neuze ?

Koulskoude, tudou, pa dremenfet,  
 E welfet war he men-be skrivet :

— « Aman e kousk eur galonig  
 Dilezet ! — »

Laret ganti eur pedennig  
 Sioulik...





## Ar Meder

DA Y. CROG "EOSTIG KERINEK"

Kerkent ha kân an eved  
Eo zavet ar meder ;  
Deus ar beure ve abred  
O vont d'e barkeier ;



Vel al lapoused bihan  
E teu dre eur beden  
Da rei da Zoue e boan  
Gant eur galon laouen...

Du-hont war lein ar mene  
Ebarz eun oabl a dâ,.  
E sav drant an heol-veure  
Hag hen lintrus ha splan ;  
'Neur ziskenn war an donar  
E vannou kaer, lirin,  
Ra perlezennou dispar  
Dimeus gliz ar mintin.

Neuze ar meder dinec'h  
Hag evurus meurbed,  
E falz gantan war e vrec'h  
Ac'h a d'e barkad ed ;  
En e bark an ed melen,  
Leun a c'hreun alaouret,  
Daoubleget gantan e hen,  
A c'houll bezan eostel.

War ar plouz gwena e falz dir  
A sko taoliou stank, stank,  
Rak an erv a zo gwall hir  
Hag e steud a zo frank ;  
P'an eus drammet, didrammet,  
E laka 'n he gourve

An dram a zo distaget,  
Hag en dro adarre !

Dre ma sav 'barz an oablou,  
En oablou entanet,  
An heol war an douarou  
A deul tomder bervet ;  
Mes ar meder aketus  
A labour hep ehan,  
Daoust e d'an domder nerzus  
Ne zell ket ouz e boan.

Evelkent gwech hag amzer,  
E teu da hirvoudi ;  
Sonjal ra en e vicher  
A zo poanius ha kri...  
Pa<sup>o</sup>deu gourc'hemen Doue  
D'hen frealzi raktal :  
— « Gonit a ri da vue  
Dimeus c'houezen da dâl ! »

— O poagn, meder evuras,  
Rak dirak da Grouer  
Da boan a zo talvoudus,  
Daoust ma zeblant distar ;


Gant an holl out ankouaet,  
Mes dre da zorn bepred  
Enpad ma 'z out daoubleget  
Tremen bevanz ar bed !...

P'ac'h a an heol-ru da guz  
Achu gantan e dro,  
Pa goue sioul ha peuc'huz  
An noz war ar maeziou,  
E teu ive ar meder  
Skwiz dimeus e barkou,  
Ha dre ma tosta d'ar ger  
Ec'h ankoua e boaniou.,.

Goude ze enpad an noz  
E tiskwiz e gorf faez,  
Ha dinec'h 'n e wele kloz  
Eus goanv ha dienez,  
E kousk seder, hep 'n em glem,  
Kollet en eun hunvre,  
Liou an dudi war e drem  
Peuc'h Doue 'n e ine.

Henvel dimeus ar meder  
Eo doare an den kez,

Krouet eo gand e Grouer  
 Da boanial hep paouez,  
 Vit dastum bemnoz, bemde  
 Eun cost kaer ha padus,  
 Hag hen lako 'barz an Nê  
 Da viken evurus !



## Pa deu an Noz

D'AN AOTRO RANNOU, KURE PLEUZAL

Me blij d'in en divez an de,  
 Pa deu an noz mont da vale,  
 Dindan ar gwe, kreiz ar c'hoajou  
 Elec'h ma tec'h ma zrubuilhou...



Eno 'klevan evnedigou  
 O richani kanaouennou,  
 Kanaouennou a drugare  
 Leun a zouster, a garante.

Me glêv hiboud ar wazig dour  
Pa ruilh war ar bili, ken flour,  
'N eur laret ar gaeran peden  
Glevas biskoaz skouarn an den.

Me gar ive, ribl ar môr braz,  
Araok ar zerr-noz gwelet c'hoaz  
An heol dindan ar volz tânet  
O tiskenn en dour alaouret ;

Gwelet o tiszrei skanv d'ar gêr,  
Bagig ken koant ar pesketer,  
O nijal gant he gweliou gwen,  
O luskellat war ar wagen...

Me gar, 'n eur gir, kreiz ar c'hoajou,  
Ribl ar mor, war ar meneou,  
Klevet mouez ar c'hloc'h dudius  
O son bemnoz an Anjelus...

Klevet eus an holl barrouziou,  
Ken ma tregern an traouiennou,  
Mouez ar c'hleier, sklinton ha krenv,  
O veuli Rouanez an Nenv...

Evelte e sav ma c'halon  
En trezek Mari, ma Itron,  
En trezek Doue, ma C'hrouer,  
En trezek Jezus, ma Zalver !

Gantê ec'h unanan ma mouez  
Evit enori ar Werc'hez ;  
A gevred gant o meuleudi,  
Laran : Me ho salud Mari !





## Bevet ar Varzed

WAR DON : SAO BREIZ-IZEL

D'AN AOTRO MARKIZ AN ESTOURBEILLON « HOEL BROEREC'H »

O ma Breiz-Izel, ma Mam-Vro garet,  
Evel dout eur vro-all n'eus ket !  
Evel da Varzed n'eus ket bugale,  
O bez eta lorc'hus gante...  
Kana e ra an holl dre ar bed :  
Bebet ar Varzed, bevet ar Varzed !

Adalek ar penn-kentan da amzer,  
War da zouar ar Varzed ter,  
A gemere lod en ez levenez,  
Hag a ouele war da enkreiz ;  
Ar Barz ha Breiz a gerz a gevred,  
Bebet ar Varzed, bevet ar Varzed !

En ez koajou don, en amzer goz, goz,  
Ar Varzed bemde ha bemnoz,

BEVET AR VARZED

269

A roe kentel hag a gelenne  
Ar Breizad war ar wirione ;  
Breiziz a zo tud a lealded,  
Bebet ar Varzed, bevet ar Varzed !

Ar Varzed a zo dimeus o bro Breiz,  
Skeuden ar gizioù fur ha reiz,  
War gerden o zelen, en eur gana,  
Ine Breiz-Izel a drida...  
D'o mouez tñnet an holl a zired :  
Bebet ar Varzed, bevet ar Varzed !

Pa waske Sézar hag ar Gall Arvor,  
Pa dreuze ar Zaozon ar môr,  
E teule neuze an delennourien  
War bep mene o galvaden ;  
— « War zao, war zao !... Araok, Bretoned !!  
Bebet ar Varzed, bevet ar Varzed ! »

Ouz son an delen, en kreiz an argad,  
Arvoriz a skuilhe o gwad ;  
Klevet e vijent spontus o yudal :  
— « D'ar gwasker, *lorr-e-benn* raktal,  
» Ar c'horn-boud arm zo skiltrus meurbed...  
» Bevet ar Varzed, bevet ar Varzed !



Dreuz d'ar c'hantvejou betek fin ar bed,  
 Tra vo dre-aman Bretoned,  
 Marzin hag Arzur, Gwenkhan ha Riwall,  
 A rei d'o mibien vel gwechall,  
 Nerz o c'halon, tân sakr o spered...  
 Bevet ar Varzed, bevet ar Varzed !

Daoust e da bep tra ar Barz a vezo  
 Eun difennour feal d'e vro ;  
 En despet d'an holl, da c'hoant e galon,  
 E harpo ar frankiz, hep won,  
 E teulo : *ar gwir eneb d'ar Bed !*  
 Bevet ar Varzed, bevet ar Varzed !

Elec'h vo trubuilh, poan spered, anken,  
 Elec'h ma vo an dud laouen,  
 E teufe ar Barz, den madelezes,  
 Da zistan pep glac'har mantrus,  
 Ha da greski an evurusted,  
 Bevet ar Varzed, bevet ar Varzed !

Hep ar Varzed vad yez kaer Breiz-Izel  
 A deufe, siouaz ! da vervel ;  
 Eus ar maro e c'hall bezan dinec'h,  
 Bleunia a rei arc'hoaz vel dec'h...

Ar Brezoneg a vevo bepred :  
 Bevet ar Varzed, bevet ar Varzed !  
 Pa digoue d'eur Barz kousket war e erv,  
 Pa gouez e gorf dindan an derv,  
 E krog eur Barz all kercent 'n e delen  
 Hag a stenn start d'ei he c'herden,  
 Da gana nerzusoc'h d'ar C'helted :  
 Bevet ar Varzed, bevet ar Varzed !

Tra ma vo Barzed ebarz ar vro-man,  
 Ar Vretoned vo ar gwellan,  
 Ar galloudusan en touez ar poblou,  
 Ar furan en touez an dudou !  
 Tud a greden start, pennou-kaled,  
 Bevet ar Varzed, bevet ar Varzed !





## Kanaouen-eured

War dôn : An hini goz,  
DA VARI AN DEUFF HA D'HE FRIED  
UJEN AN NAOUR, SANT-SERVEZ.

I

A boan zavet an heol-vintin  
Hirie klevis eur zon sklinton,  
Eur zon skanv, skanv, laouen  
O tiston en draouien...

Savet ma skouarn, petra a zo  
Ma tregern kenkoulz ar maeziou ?  
Klevet ran ar biniou,  
Eun eured zo, m'hen tou !

Kerkent 'm eus groet eur ganaouen,  
Ha deut aman — ya, hep peden —  
D'o kana, daou bried,  
En devez hoc'h eured.

Teurvezet digemer eta,  
Ma gourc'hemennou ar gwella ;  
D'ac'h ho taou, gant kalon,  
E kinnigan ma zôn !



Ma zôn zo eur zonig dister  
Ganti c'houez an neve-amzer,  
Ganti c'houez ar bleuniou,  
C'houez bleuniou ar prajou...

## II

C'houi, gwreg yaouank, vel eur vleuen,  
 Zo bet kutuilhet en draouien,  
 Kutuilhet war ar gliz  
 En kreiz ho yaouankiz ;

Ha kalonig leun a c'hened,  
 Hoc'h ine karget a c'hlanded,  
 Red eo d'ac'h kimiadi,  
 Ho kimiad n' eo ket kri...

Ha koulskoude, gwech hag amzer,  
 Me wel dindan ho sell tener,  
 Eun daken dour pilzet,  
 Ho spered ankeniet...

Kwitât eun tad hag eur vam vad  
 A zo bepred gwall galonad,  
 Eus ze 'n em frealzet,  
 Eur Mignon 'peus kavet.

Hen ho tigollo, a dra zur,  
 Eus ho yaouankiz renet fur ;  
 D'ezan ho karante,  
 D'ac'h e galon ive !

Bezan ez eo eur gwir Vreizad,  
 Eun den a galon, poanier mad,  
 A roto d'e bried  
 Dalc'hmad evurusted...

Dre-ze eta bezet seder,  
 Heman zo d'ac'h eun devez kaer,  
 Devez a levenez  
 D'ac'h, d'ho priedelez.

## III

Tadou ha mammou, daerou puilh  
 War ho tiouchodou a ziruilh...  
 Paouezet da ouela,  
 Deut ganin da gana ;

Unanomp hon moueziou hirie,  
 Kanomp breman gant karante,  
 Kanomp d'an daou bried  
 Eur vue hir meurbed !


D'ac'h, daou bried, gant ma mennoz,  
 Evurusted bemde, bemnoz ;  
 Ra vezo ho pue  
 Henvel ouz eun hunvre...

Eun hunvre kaer en pehini  
 E welfet éle o c'hoari,  
 Ele koant, koant dispar,  
 O laret : — Ni ho kar !! —

Hag evelse hon Breiz-Izel  
 N'halla, o nan, biken mervel ;  
 Rum-da-rum, Bretoned,  
 Breiz a vevo bepred !

Pa vefet arri koz da vad,  
 Daoubleget ho taou gant an oad,  
 Hoc'h éle gant dudi,  
 A harpo ho kozni...

Pa deuf an Ankou, didrue,  
 Gant e falc'h d'ho skuba goude,  
 'N eur laret : Kenavo...  
 E nijfet d'ho kwir Vro !!!



## Peden ar Mousig

War dôn : D'HON MAM ZANTEZ ANNA-  
 D'AN AOTRO DURAND " ZANT ERWAN " PERSON TREDREZ

### *Diskan*

O Gwerc'hez, ma mam zantel,  
 Itron ar Goz-Yeodet,  
 Chilaouet mouez ar bugel  
 Zo dirazoc'h stouet !

Digouezet eo an amzer  
 Red mad eo d'in hirie  
 En despet d'am oad tener,  
 Gonit ma zam bue...

An daerou em daoulagad  
 E kwitean ma Bro ;  
 Vel ma zud koz ha ma zad  
 Vin martolod d'am zro.

Ar vicher a zo kaled,  
Hag ive ankenius,  
Gwerc'hez evidon, m'ho ped,  
Bezot madelezus !

Roet dalc'hmad d'ar mousig,  
Roet d'ezan zikour,  
Rak dister eo e lestrig  
Hag ar môr zo treitour...

Pa yudo an avel foll,  
Pa sailho ar mor braz,  
Groet n'ao biken da goll  
Ar bugel ho karas.

Neuze pell eus aochou Breiz  
Gant ar môr luskellet,  
Ma c'halon ebarz ma c'hreiz,  
Sonjo er Goz-Yeodet :

Sonjal a rin em mammig,  
Hec'h-unan intanvez,  
Ha 'viti eur bedennig  
E kasin d'ac'h, Gwerc'hez !

Oh ! pa deño d'ho chapel  
Bemnoz da hirvoudi,  
Roet d'am mam baour skoazel,  
Frealzet anezi...

Distanet d'ezi he foan,  
Ma zad zo bet beuzet ;  
Mar varvfe ar mous bihan,  
He c'halon 've rannet...

O Gwerc'hez dous ha dinam,  
Rouanez Breiz-Izel,  
Miret ar bugel d'e vam  
Hag e vam d'ar bugel !

Mari, Stereden-ar-Môr,  
Klevit ouz ma feden,  
Difennit mousig Arvor  
Breman ha da viken !





# AN ERC'H

WAR DON : DISKENNET EUS AN NENVOU.

D'AN AOTRO CHALONI OLLIVIER, PLOUGUERNEVE.

Warlec'h an avel skornet,  
Pep tra a zo sioul,  
An oabl a zo morlivet  
Ha du eo ar c'houmoul ;  
Ar bed, leun a nec'hamant,  
A zeblanta mezus ;  
N'hall ket hep eur gwiskamant,  
Digemer mad Jezus.

Mes Doue en e furnez  
A reiz an traou ervad ;  
E Vab eo ar Zantelez,  
E di vo deread ;

En dienez ar vrasan  
Hen a renko genel,  
Da vihanan, evitan,  
Ar bed a vo en gouel.

Dilezet gant ar brinsed,  
Kollet 'n eur c'hraou dister,  
Ne deu nemed al loened  
En dro d'ar bugel ker ;  
An dud, digalon ha kri,  
A redo, a gano,  
Hep sonjal en neventi  
C'hoarvezet dre ar vro...

Dirak yenien an holl  
An douar a laro :  
— « Ma Doue, groet d'in digoll  
Dismeganz tud garo ;  
Eur pennadig d'in roet  
Eur gwiskamant kaer, kaer,  
Ma c'hallin, vel m'eo dleet,  
Digemer ar Zalver... ! »

Kerkent, o tra burzudus !  
Eus lein an oabl tenval,  
E koue skanv, skanv, dudius,  
Bleuennou gwenn raktal ;

Kaeroc'h pell evit bleuniou  
 Ez int en kreiz an noz,  
 Laret vefe eskelliou  
 Evned ar Baradoz.

War an douar e kouezont,  
 Ken stank, ken stank, ken drant  
 D'ar bed buhan e reont  
 Eur gaer a wiskamant ;  
 Gwiskamant a vadelez,  
 Eus zae gwenn-kan meurbed:  
 Jezus eo ar Zantelez,  
 Mari eo ar C'hlanded !

Dre-ze an Aotro Doue  
 Na c'houlle ket gwelet,  
 Tud fall ha didrugare  
 En dro d'e Vab karet ;  
 Da azeuli ar Zalver  
 Al loened mud zo well  
 Hag ive d'Hen digemer  
 Ne fell ket eur c'hastell...

Eur c'hastell gant e vadou,  
 Gant e binvidigez,  
 Zo leun a fallenteziou  
 Karget a hudurnez ;

Bolz an nenv o lugerni  
 A-us d'eul linsel erc'h :  
 Da Vab ar Werc'hez Vari  
 E tell eur c'havel gwerc'h !

Setu petra zo kiriek,  
 Aboue triwac'h kant vla,  
 E weler d'an Nedelek  
 An erc'h gwenn o koueza ;  
 Ar bed evit Mab Doue  
 An em lak 'n e gaeran...  
 Pebez kentel d'hon ine,  
 Kemeromp skouer warnan !

O Mabig Jezus bihan,  
 Ganet en dienez,  
 An erc'h gwenn a zo distan,  
 Klevet breman ma mouez :  
 — True ouz ar bewien gez,  
 Groet m'o devo bara,  
 Ar paour a renk aliez  
 Hirvoudi ha gouela...

Oh ! enpad ar yenien,  
 D'ar bewien dre ar bed,  
 Roet, mar plij, eun doën,  
 Roet a'z eun oaled...

Mes dreist-holl, Mabig Jezus,  
 Mabig Jezus dinam,  
 D'an emzivad gwall-eürus,  
 M'ho ped, roet eur vam !



## Maro ar Mous bihan

WARDON : KER IS.

### I

O ma Doue, pebez glac'har  
 Evidon-me war an daouar,  
 Kollet eo ganin ar bugel  
 A oa ma zikour, ma skoazel

Evit ma zouten em c'hozni,  
 E tec'has yaouank eus ma zi ;  
 Gant ar môr e oa goneet,  
 Gantan ive eo bet lonket ;

Kemeret oa evel mousig  
 Da labourat war eul lestrig,  
 E vicher na oa ket re vrao,  
 Riskl e vue 'vije afao...



A dra zur, honnez eo e vouez,  
Anveout 'ran anei ken frez...

An de warlerc'h, pa oan zavet,

Ma c'halon a oa trubuilhet ;

Rak aboue eur pennad amzer,  
N'am oa bet digantan lizer.

Prestik goude e gabiten

A skrivas d'in-me evelhen :

— « Ho mab, gwreg vad, a zo beuzet,

» Eus beg ar wern eo bet kouezet...

» Koueza 'reas ebarz an dour

» En eur c'houlouen : zikour, zikour !

» Ober rejomp holl hon gwellan

» Evit zavetât anezan ;

» Mes ar môr a oa ken diroll,

» An avel ken krenv ha ken foll,

» Ma oe dirak hon daoulagad,

» Kollet ar mous, ho pugel mad...

» Pa n'halle stourm ouz ar môr braz,

» Lakas 'ne gere'hen zin ar groaz ;

» Laras ar c'homzou truezus :

» O ma mam baour... Pardon Jezus !

Daoust e da ze, hen a boanie

Evit e vam, dre garante

Gant am bije evurusted,

Ne zelle dimeüs poan abed,

Skriva re d'in gwech hag amzer,

Lizerou koant, tener, tener,

Elec'h ma konte e droïou,

E blijadur war ar môriou...

E lizerou ken aketus,

Lake ac'hanon evurus ;

Kontant e vijen, a dra zur,

Rak ma mabig oa eur potr fur !

Kerzet re ar bed evelse,

An amzer skanv a dremene,

P'en deus an uen paour levenez

Ne sonj ket en dristidigez...

Sonjen ket penoz eun nosvez

Dre ma hunvre 'klevchen eur vouez,

O laret d'in : — Mam ar wellan,

N'ho zikourin ken er vro-man...

Ouz he c'hlevet 'oan dihunet,

Ankeniet braz ha spouronnet :

» P'am oa lennet ar c'hélo-man  
 » Oa ma c'halon prest da zemplan ;  
 — Ma bugel biken ne welin,  
 Gant ar glac'har breman 'varvin !

Mar c'hallfen c'hoaz ouz troad e vo  
 Skuilh daerou ha pedi bemde,  
 Vefen evurus em glac'har,  
 Daoust d'am zrubiilh war an douar...

Mes e gorf zo 'barz ar be braz  
 Elec'h ma zo kement... siouaz !  
 Eno vo ruilhet, diruilhet,  
 Gant ar gerrek e vo blonset...

N'hallo biken en e barrouz,  
 Diskwiza pell dimeus an drouz,  
 Er vered, disheol an iliz,  
 Kenver e dud, e genvroiz ;

Ne glevo mui kleier o son,  
 Klemmus evit an Anaon,  
 Glevo nemed mouez ar môr braz  
 O c'houlén tud da lonka c'hoaz...


O ma doue, true, true !  
 Ouz ma mabig, ouz e ine ;

Groet ma vo ganac'h evurus  
 En ho Paradoz, ma Jezus !

Breman evit 'n em frealzi.  
 War ribl ar môr 'c'hin da bedi ;  
 Da bedi gant fizianz ha fe  
 Evit ma mab bemnoz, bemde

Pa glevin ar môr o kroزال,  
 Hag an avel foll o yudal,  
 Me a laro a vouez uhel ;  
 — O mor, ro d'in 'ta ma bugel !

Zeblantout e reñ d'in neuze,  
 Gwelet anezan goude ze ;  
 Klevet e vouezig ken dinam  
 O laret c'hoaz : Ma mam, ma mam !!





# Gouel mad

D'EUR VAM GRISTEN.

Karet am ije hirie  
Lampat war ma marc'h dir,  
Ha monet betek du-ze...  
Mes an hent zo re hir ;  
Digemerit memeuz tra,  
War eskell an avel,  
Ma gourc'hemennou gwella  
Evit devez ho kouel.

Petra e c'hallfent laret  
D'ac'h evit ho kouel kaer ?  
Ma c'halon a zo nec'het,  
Ma mouez a zo dister ;  
Herve ma sonj ha ma c'hoant,  
Nan eus a zeread,  
Nemed eur bokad bleun koant,  
Da laret d'ac'h : Gouel mad !

GOUEL MAD

291

Ha c'hoaz bleuniou an douar  
Zo hep talvoudegez ;  
D'ar beure ez int dispar,  
D'an noz n'o deus mui c'houez ;  
Evelse c'hoarve ive  
Gant mennoziou an den,  
Leun ez int a diugare  
Keit ma veint o tremen...

Hogen ar bleuniou kaeran,  
Evit eur vam gristen,  
Ar re a rei ar muian  
He lorc'h da virviken,  
Eo ar bleuniou talvoudus  
Ha na dremenont ket,  
Ar bleuniou, d'ei ken doujus :  
He bugale karet !

Ar bleun-ze, en dro d'ezi,  
Bodet en de he gouel,  
Kement se zo eviti,  
Eul levenez zantel ;  
Hi he deus bet o zavet  
Int eo he c'hurunen,  
En dro d'o mam dastumet.  
Oh ! kaeran da daolen !

Setu aze ar bokad  
 Talvoudus ha gwirion,  
 Henez a zo deread  
 Da blijout d'ho kalon ;  
 Ennan bleuniou a c'hened,  
 Furnez ha koantiri,  
 A rofo d'ac'h-hu bepred,  
 Plijadur ha dudi !

D'ac'h eta en kinnigan,  
 Gant ma gourc'hemennou,  
 Hen a vezo, a gredan,  
 Ma gwellan mennoziou ;  
 Hen digemeret, m'ho ped,  
 Gwelloc'h n'hallfec'h ket kâd,  
 D'ac'h kalz a evurusted,  
 Evurusted, **gouel mad!!!**



## AR C'HOZIAD PAOUR

War dôn : A VIHANIG EM EUS PEC'HET.

Doue ! na pegen truezus  
 Eo ma stad war an douar,



Gwechall me a oa evurus,  
 Breman n'am eus 'med glac'har !

Glac'har, anken ha poan-spered  
 Setu hirie ma loden ;  
 Dilezet ez on dre ar bed,  
 D'am frealzi n'am eus den...

Den da rei d'in en em c'hozni,  
 Zoken eur werennad dour,  
 Den da laouennât ma zam ti,  
 Den, den evit ma zikour !

Aman ez on ma-unanig  
 Etre beder gos moger,  
 Daoubleget war an oaledig  
 O sonjal 'barz ma amzer.

Bet am oa seiz a vugale,  
 O zavet am oa ervad ;  
 Gante on ankouaet hirie  
 Ne sonjont ken en o zad...

Evel eus neziad-lapoused,  
 Oc'h-unan gouest da nijal,  
 O deus holl, hep damant abed,  
 Kwitaet ma zi raktal.

Ha vit kreski ma foan-galon,  
 Oh ! pa sonjan er wreg vad  
 Zo breman et da Anaon  
 E teu dour em daoulagad...

Mar vijemp chomet hon daou c'hoaz  
 D'en em harpa er bed-man,  
 Mes Doue, o Doue, siouaz...  
 Ma-unan ec'h on aman !

Ar sonj dimeus he c'harante  
 A ro d'in nerz da veva,  
 Ne gavan nemed war he be  
 Distan d'am foaniou brasa...

Eno, tra ma ruilh ma daerou  
 Ha ma pedan eviti,  
 Ma spered a nij d'an Nenvou,  
 Lec'h ma kavin anezi !

— » Doue an Nenv hag an douar,  
 » Kaset ganac'h an den koz,  
 » Rak abeurz ar bediz digar  
 » N'hen deus netra da c'hortoz !... »



## Yan ha Marivonig

(ENVORIOU TREMENET)

De-mad, dous Marivonig  
Penez 'man kont ganit ?  
Klanv e oa ma c'halonig  
Hep klevet komz diouit...  
Ma slijadur, ma yec'hed  
Eo da welet bepred :  
— N'eus ket evel Yannig  
Da garout e zousig !  
  
Laret e oa bet d'in-me,  
— Marvad gant teodou fall —  
N'az poa ken a garante  
Evidon vel gwechall ;  
Neuze me laris kerkent :  
— C'houi ra d'in kalz a fent...  
Dalc'hmad Marivonig  
A garo he Yannig !

D'ar goanv, ma muian-karet,  
Enpad an nosveziou,  
Me a deuto d'ez kwelet,  
D'ez kwelet a wechou ;  
Da gana d'it dudius  
Ma zon garantezus :  
— N'eus ket evel Yannig  
Da garout e zousig !

Pa deui, d'an neve-amzer,  
Ar pardonioù en dro,  
E lakfomp hon dilhad kaer  
Evel daou zen faro ;  
Ha te a laro neuze,  
Pa vi eus ma c'hoste :  
— Dalc'hmad Marivonig,  
A garo he Yannig !

Dimeus da wir garante  
Me a vezo lorc'hus ;  
En dizro ganin ive  
Te a vo evurus...


Rak d'it-te, ma zurzunel,  
E vin betek mervel !  
— N'euz ket evel Yannig  
Da garout e zousig !

Hon c'halonou ken tener  
N'hallfont, o nan biken,  
Tremen o zammig amzer  
An eil pell eus eben ;  
Dre-ze pa vefomp en oad,  
Te laro d'ez tud vad :  
— Dalc'hammad Marivonig  
A garo he Yannig !

Me ive dimeus ma zu  
A lavaro d'am zud :  
— Klevet ma feden dustu,  
Ho mab an eus ar vrud  
Da garout eur plac'hig fur,  
E vestrez, a dra zur,  
— N'eus ket evel Yannig  
Da garout e zousig !

Oh ! neuze, ma c'harante,  
Marivonig karet,  
E vefomp hed hon bue  
Hon daouig unanet ;  
Ha goude gant levez,ez,  
Ni gano hep paouez :  
— Marivonig... — Yannig...  
Yannig — Marivonig !!





## Malloz ar Gannerez-noz

D'AM C'HENVREUR, LOEIZ HERRIEU.

### I

Koantan potr yaouank zo er vro  
Eo, a dra zur, Per-ar-Faro.

Holl verc'hedigou Bro-Kerne  
O doa evitan karante.

Pa deue Per d'an ofern-bred  
E lare neuze ar merc'hed :

— Per eo bravan potr ar c'hanton,  
Daoust e da biou vo e galon ?

... Oh ! eme pep plac'h sioul, sioulik,  
Per, gra diouin-me da zousig,

Ouz an holl Per na zelle ket,  
Rak gant Mari oa goneet...

Mari gant he zellou tener,  
He doa goneet kalon Per ;  
Per a gave bepred dudi  
Oc'h ober lez d'e zous Mari.

### II

O vont gant gwenojen ar roz  
Per a gane eur zul da noz.

E vouez skanv ha kaer war an dro  
A zistone a-dreuz d'ar vro...

A greiz-holl, war ster an Heiez,  
Per a glevas toliou kolvez.

— Potr yaouank seder ha ken koant,  
Henoze avad te a gân drant ;

Ha te c'hallfe, en han Doue,  
Rei eun tammig zikour d'in-me ?

Rei d'in-me an dorn eur pennad,  
Ma vezo gwasket ma dilhad...

Per prim ha prim, hep marc'hata,  
A grog gant kalon da waska.



Tra zouezus, dre ma waske  
Al lien gwasoc'h a c'hlebie...

Per a boanie, rak e Vari  
Hen gortoze du-hont 'n he zi :

— Arsa, emezan, moereb vad,  
Me eo poent braz d'in ho kwitad...

— Ho tigare, Per-ar-Faro,  
Me zo krog ha me ho talc'ho !

Gwasket aze ha hep damant,  
Goude e welfet Mari goant...

Neuze ar wrac'h koz a starde,  
Ha diouvrec'h Per baour a strake.

— Me da disko, o potr yaouank,  
Da zont d'am gwapât war ma stank ;

Karout a rez da zous Mari,  
Diwar henoze n'he gweli mui !

Lar d'ezi eta kenavo,  
Rak d'it e tosta ar maro... —

Daoulagad Per oa dislonket  
Hag e vleo war e benn zavet ;

War e dâl ruilhe ar c'houezen,  
En e wad rede an derzien ;

Eun nerz pell krenvoc'h evitan  
Hen dalc'he, en despet d'ezan,

Ar wrac'h koz a waske bepred :  
— Pegoulz Per e vo da eured ?

Per, brevet, lez eur griaden,  
A goue dinerz war an dachen...

Ha e'hoarz diaoulek an hini-goz  
A yudas kerkent kreiz an noz :

— Mari, emei, aze welez  
Pe te, pe me, eo ar vestrez !

## III

An de warlec'h da c'houlou-de  
Ar paourkez Mari a ouele...

Eun devezour a gavas Per  
Maro-mik en kichen ar ster.



## Dousig ar martolod

D'AM C'HENDERY, LOEIZ AR GAG

### I

Em c'hreiz a deu tristidigez  
Pa sonjan em buegez

Ma-unan on war an douar,  
Me n'am eus na breur, na c'hoar ;

N'em eus ive na mam, na tad,  
Siouaz ! Me zo emzivad !

Redet am eus bet ar môriou,  
Ha gwelet kalz a vroiou...

Rak dre ma' z on bugel an aod,  
Em eus 'n em c'hroet martolod.

Karet e oan gant eur plac'hig,  
Outi e ris ma « dousig » !

DOUSIG AR MARTOLOD

305

Ar sonj dimeus he c'harante  
Skanvae d'in ma bue...

Pa vijen war ar wern uhel,  
Hunvreen d'am zurzunel.

### II

Eun devez o tizrei d'ar vro,  
Me glevas eur gwall gélo,

Ma dousig oa war he gwele  
Gant eur c'hlenved didrue...

Hepdale ec'h is d'he gwelet :  
— Mignon, emei, na ouel ket... !

— Penoz na ouelfenket, mestrez,  
Pa 'z out ken klanv, ken diez ?

Hi 'lezas eun huanaden,  
Ha n'ankouañ birviken !

An Ankou kri ha milliget,  
An eus bet prim he falc'het.

Ne oamp ket galvet 'vit bevan  
Herve war an douar-man...

## III

Breman 'vit sec'ha ma daero,  
Me yel c'hoaz da vale bro ;

Me a yelo war ma lestrig  
D'ober kanvou d'am dousig !

Warnan gwagennou ar môr dôn  
Luskello ma foan-galon...

Bemnoz d'al loar ha d'ar stered  
Me laro ma foan-spered ;

Dirake larin eur beden  
Evit ar plac'h a garen ;

Hag eus an eil môr d'egile  
Me ouelo d'am c'harante...

Ken ma teuf an aotro Doue  
Da gas gantan ma ine...



## AR YEODET

D'AN AOTRO HA D'AN  
ITRON AURÉGAN, PLOULEC'H

Yeodet karet, lec'hig dudius,  
Elec'h ma tremenas, evurus,  
Ma bugaleaj ker meurbed  
Re founus...

Te a vevo en em spered  
Bepred !

N'ankouañ biken, nan birviken,  
Da lann ha c'houez vad o bleun melen,  
Da reier, da winojenno,  
Da draezen,  
Ar môr a gelc'h da zouaro  
Tro dro...

Chapel, Gwerc'hez... Ha te, kloc'h sklinton,  
A vrall skanv, skanv bemnoz, bep mintin,

Miz mae, pardon, kân-alc'houeder,  
 Heol-lirzin,  
 C'houi vag ennan sonjou tener,  
 Tener...

Ped gwech a-us d'ez aochou, Yeodet,  
 Azeet war eur garrek kollet,  
 Ez on, dinec'h, da hunvreal  
 Bet chomet,  
 C'hoant d'in dreist d'ar môr da nijal,  
 Raktal.

P'eo bet red d'in kwitât ac'hanout,  
 En peb Bro me a sonje ennout,  
 Ma gwellan mennoz a vije  
 Evidout...  
 Te, Yeodet, oa ma c'harante,  
 Noz, de !

Rak ennout e chome ar gwellan  
 Dimeus ma redadennou kentan ;  
 Mignoned, amzer dizoursi,  
 Pa sonjan !  
 Plijadur, c'hoarz ha kaniri,  
 Dudi...

Karout a ren da vartoloded,  
 Da besketerien, gwir Vretoned,  
 Potred dispont dirak ar mor,  
 Tud kaled,  
 A ra, dre ar hed, d'an Arvor  
 Enor !

Brud da vadelez, war an avel,  
 A zo tec'het pell a Vreiz-Izel ;  
 Pegwir ez out d'ez pugale  
 Eur c'havel,  
 Holl a glaskont ennout goude  
 O be.

Ma c'hoant ez eo bezan douaret  
 En-harz da chapelig vinniget,  
 Eno mouez ar môr hirvoudus,  
 O Yeodet,  
 A vouskano d'in c'hoaz klemmus,  
 Klemmus...

Da gloc'h a laro d'an tremener ;  
 — « Ne dec'h ket hep lezel eur bater... »  
 Ha neuze eus donder ma be,  
 Barz dister,  
 Me gano ma Breiz, ma Doue,  
 Ha te !



## Ar Pesk-Ebrel

Gwasan ma ve c'hoariet troñou  
Gant Pesk-ebrel d'ar yaouankizou !  
Gwech ar Pesk a ziskuilh d'e  
Eur garante guzet,  
En pehini, marteze,  
N'o dije ket sonjet...

Mar c'hoari troñou karantezus  
E c'hoari kenkoulz troñou fentus ;  
Gwaz d'an dudou divalo,  
Ma teuont d'hen gwapad,  
Ar pesk a dapo e dro  
Abred pe diwead !

Setu ar pezh a zo c'hoarvezet  
Etre Yan hag e vuian-karet ;

Yannig, evel martolod,  
A sonjas eun devez  
Gwelet pe fur, pe diod,  
Oa Janed, e vestrez...

— « Arri eo an de-kentan ebrel,  
» Kasomp eur peskig d'an durzunnel...  
» Janedig, ma dousig koant,  
» Da Yan zo dimezet ;  
» Na gemer ket nec'hamant,  
» Potred all vo kavet... »

O lenn eur c'helo ken glac'harus,  
Janed a skuilhas daerou poanuis :  
He c'harante goude-ze  
A droas en kounar :  
— Yan, emei, den didrue,  
Te a gavo da bar ! —

### II

Goude bezan redet ar môrio,  
Ar bla warlerc'h Yan deuas d'ar vro ;  
P'arrias en ti Janed,  
Da welet anezi :  
— « Doue, emezan, me gred,  
» Aman zo neventi... »

A boan oa e dreid war an treuzou,  
 Dirakan ne wel nemed pennou,  
 Pennou seder ha laouen,  
 Tud evurus meurbed,  
 O chilaou eur ganaouen,  
 Eur ganaouen-eured...

Yannig a chom vel eun den semplet

Na oar, siouaz ! petra da laret...

— De-mad, emezan, de-mad !

Pelec'h 'man Janedig... ?

— « Aman, eme Janed vad,

» Eus koste ma Ferig !

» Ac'hanta, Yan, deut out c'hoaz en dro,

» Pelec'h eo chomet da wreg faro ?

» Me grede oas dimezet,

» Herve da Besk-ebrel ;

» War a welan n'e teus ket

» Kavet eun durzunel !

» Evidon, en despet d'it, gwaper,

» Me am eus kavet eur pried kaer,

» Trugare d'ezan, hirie,

» Me a zo evurus...

» Ar Pesk-ebrel zo d'iu-me

» Eun dra gwall dalvoudus !

» Betek ma teus kemeret ar boan  
 » Da zont d'am gwelet... Chom gant da goan ;  
 » Plijadur az po, Yan gez,  
 » Pesk-ebrel out tapet !  
 » Elec'h ober souben-laez  
 » Te a vezo fritet ! »





## Spern-gwenn

D'AN AOTRO G. CORFEC,  
" BRUG-LANN " ZAN-BRIEK

### I

Gwechall, yaouank, en ti ma zad,  
A-hed eur c'hleuniad spern-gwenn,  
Dindan ezen flour ha c'houez vad  
E teuen, Yan diberc'henn,  
Da glevet an eostig bihan  
Er sioulder o teurel e gân ;  
Hag, evurusted miz mae,  
Gantan e kanen ive...

### Diskan

— C'houez spern-gwenn ha kân an eostig,  
A ra d'ar spered bemnoz hunvreal ;  
Ha, hep gout d'ei, ar galonig  
A deu sederoc'h da dri...dridal !

### II

Eun toullad blaveziou goude,  
Eus koste eur wreg karet,  
Hi ha me leun a garante,  
Hon daou neve-eureujet...  
Dindan c'houez tener ar bleuniou,  
Richan al lapousedigou,  
Diou galon en eun unan,  
N'hon doa nemed eun diskan :

— C'houez spern-gwenn ha kân an eostig,  
A ra d'ar spered bemnoz hunvreal :  
Ha, hep gout d'ei, ar galonig  
A deu sederoc'h da dri...dridal !

### III


Siouaz ! abenn eun tri blavez,  
Dindan ar spern-gwenn bepred,  
Mantret, brevet gant an enkrez,  
An anken, ar hoan-spered,  
O chilaou c'hoaz kân an eostig,  
Me ouele dourek d'am c'houlmig,  
Marvet an de-kentan vae  
Da goulz an bleuniou neve...

— C'houez spern-gwenn ha kân an eostig,  
Pa digoue d'an den chom warlerc'h e bar,  
A frailh, a frailh ar galonig,  
Hunvreoù nijet... Pebez glac'har !

## IV

Breman, pa fell d'in hunvreal,  
Hanter-sec'het ma daerou,  
A-hed ar c'hleun spern da sonjal  
E teuan c'hoaz a-wechou...  
Eno, ar sonj eus ma c'houlmig  
Ha kân dudius an eostig,  
A stag ac'hanon ouspenn  
Dimeus ar bleuniou spern-gwenn...

C'houez spern-gwenn ha kân an eostig,  
Pa digoue d'an den chom warlec'h e bar,  
A ro frealz d'ar galonig  
A skanva enni poan ha glac'har !



## TI AR PAOUR

D'AN AOTRO ANDRÉ, PERSON PRAT.

Me n'am eus ket eur maner  
Evel an aotrone,  
Ma lochig a zo dister  
Ha leun a baourente...

*Diskan*

Pell dimeus trubuilh ha trouz,  
Gant poaniou ma diouvrec'h,  
Me a vev 'barz ma zi plouz  
Laouen ha dinc'h !

Ouz troad eur mene uhel,  
Dirakan eur wazig,  
Lec'h ma kân an durzunel,  
Eo kuzet ma nezig.



Da lagad sard an heol-hanv  
Ez eo troet e zor,



Mes aveliou kri ar gouanv  
N'o deus ennan digor.

Ne gaver ket 'barz ma zi  
Kalz a binvidigez ;  
N'oufen ket ober impli  
Gant eur zam ken diez...

N'am eus ezom, war ma fe,  
Madou, na peadra,  
Ne c'houllan digant Doue  
Nemed eun tam bara.

Ne weler em lochig-me  
Nemed pez a zo red ;  
En tu-hont a vefe re  
Ha trubuilhus meurbed :

Eur prez evit an druilhon,  
Eun dôl d'en em voda,  
Hag enpad an nosveziou  
Eun oaled da domma...

Skabel d'ar vignoned vad,  
Rak ebarz ti ar paour,  
Eo a ve kavet dalc'hmad,  
Dalc'hmad kalonou aour !

Eur rummad-tud diskiant  
 A lar d'in a-wecho ;  
 — Gonit e rafes arc'hant,  
 Ma kwitafes da vro...

Da gomzou ken digompouez  
 Mar c'halon a chom yen ;  
 Petra talv pinvidigez  
 Pell dimeus ma zraouien ?


Miret, miret, tud diboell,  
 Ya, miret ho tanve ;  
 An evurusted zo well  
 Zoken er baourente !

Em zi plouz eo e fell d'in  
 Tremen ma buegez,  
 Boued am o, tra ma poagnin  
 Ha bemde levenez...

Pa glevin Evn-ar-Marô  
 O skrijal kreiz an noz,  
 Da c'hortoz falc'h an Anko,  
 Ec'h in d'am gwele kloz ;

Eno, start war ma c'halon,  
 Ar Groaz derv mogedet,  
 Me a varvo hep tam aon,  
 Bvel am o bevet !

Ha dirak zant Per goude,  
 Me a yel dianken,  
 Pegwir Baradoz Doue  
 A zo vit ar bewien !





## Glac'har ar Barz

KINNIG

*Oh ! pa lenni ma glac'har,  
Te, ma heiez kollet,  
Ne ra ket skouarn vouzar,  
D'ar paourkez dilezet !  
Teurve trei da zaoulagad  
Warnan eur wechig c'hoaz :  
Gouveout a rez ervad  
N'eo ket evit ankouaz...*

I

— Barz yaouank, a gane seder  
N'euz ket c'hoaz pell dre-aman,  
Ne glever mui da vouez tener,  
Petra out deut da vezan ?

Me wel dimeus da zaoulagad  
Takennou dour o ruilhal,  
Bezan teus eta kalonad,  
Mar chomez keit da sonjal ?

— Gwasoc'h pell evit kalonad,  
Hirie me am eus glac'har,  
Ha truezus ez eo ma stad,  
Truezus war an douar...

Ya, ma mignon, ma c'hanaouen  
Pell diouin a zo nijet,  
Ne chom ganin evit loden,  
Nemed eur galon rannet !

Ar Barz a oa gwechall ken drant,  
Ma tride gant levenez,  
A zo deut breman dizeblant  
En kenver ar vuegez...

Digouezet an neve-amzer,  
Pa gân al lepousigou  
Dre ar c'hoajou, al lanneier,  
Hen, siouaz, a skuilh daerou...

Hag\_e blijadur, koulskoude,  
A vije gante kana,

Kana d'an holl e garante,  
Mes ne ra nemed gouela !

## II

Me am oa kavet war ma hent  
Eur plac'h fur, eun él Doue,  
D'ezi eur garante divent  
Am oa gwestlet hepdale.

Hi am c'hare ive meurbed,  
Siouaz... Karante diboell !  
Mar ne varvan gant poan-spered,  
Ma glac'har a bado pell...

Hi he deus laret eun devez  
D'in-me gant eur vouez poaniet :  
— « Ar vus a zo digompouez,  
» Marteze n'omp ket galvet...

» Gortozomp eta eur pennad,  
» Rak me a zo nec'het braz ;  
» N'hallan ket laret d'ac'h ervad  
» Da biou vo ma c'halon c'hoaz... »

Oh ! neuze kerkent da ouela,  
Me a zo bet distanket :

— « Perak chom keit da vare'hata ?  
» Ganin c'houi a vo karet ! »

D'am mouez mouget gant an enkreiz,  
Hi a zavas he zellou ;  
War he diouchod, evel perlez,  
E rnilhas ive daerou..

An daerou, e larer dalc'hmad,  
A zo talvoudus d'an den ;  
Ra ziefont neuze ervad  
Hon c'harante da viken !

## III

Oh ! mar ne deu ket ma dousig  
Da chilaou mouez ma c'halon,  
Diwar vremen e tavo<sup>2</sup>mik  
Ma zelen baour gant e zon...


Diwar vremen e vin klevet  
Bemde o huanadi,  
Henvel ouz eun den kez mantret,  
Ha kollet gantan ar spi ;

Dirak an dud, dirak ar bed,  
Marteze me a gano,

Mes em c'hreiz e chomo bepred  
Kuzet eur glac'har c'houero...

Ha dre henchou ma Breiz-Izel,  
Neuze, paourkez dilezet,  
Me hirvoudo d'enn durzunel,  
Kollet... Mes nan ankouaet !

Kement-se n'em gavo biken,  
Re gri, re gri a vefe...  
Doue, chilaouet ma feden,  
Roet ma dousig d'in-me ! !



## Bleuen an envor

Hunvre kaer ma bue  
A oa neuze kouezet,  
Ma dous, ma c'harante  
He doa ma dilezet ;  
O tremen eun devez  
E-tal he liorzig,  
E kutuilhis gant evez  
Eur goant a vleunig...

— O te, da vihanan,  
A vo, bleuen dispar,  
An drañg diwean  
A gavin em glac'har ;  
Eus ma muian-karet,  
Te a zigaso d'in  
Sonj amzeriou dremenet...  
Oh ! chom eta ganin !

Eur wechig an amzer  
 Pa deulin ma zello,  
 Daerou puilh ha tener  
 Warnout me a skuilho ;  
 Hag em c'halon kerkent,  
 Hunvredigez, dudi,  
 Evurusted diagent,  
 A rei d'in hirvoudi...

Ar garante gentan,  
 E ve laret dalc'hamad,  
 Eo an hini wellan,  
 Gwir eo, ma c'hallfe pad...  
 En e zempladurez  
 An den kez war ar bed,  
 A zav kant ha kant palez,  
 A goue goude abred !

Evel kalz a re-all,  
 Me a ris eun hunvre,  
 Ma c'halon didamall  
 En em roas ive ;  
 Breman ez on mantret,  
 — Turzunel a garen,  
 Pell diouin ez out nijet,  
 Na distro ket ken ?

Kalz, kalz d'in a lavar :  
 — Mar n' he deu ken en dro,  
 Evelti bez digar,  
 Ne dalv ober kanvo... —  
 — Tavit, tavit tudou,  
 C'houi n' ho peus ket karet ?  
 Petramant ho kalonou  
 A zo holl kaledet ?

Etre an dud yaouank,  
 Furnez ha karante  
 A zo daou dra distank,  
 Dreist-holl hirie an de ;  
 Penoz 'ta e c'hallfen  
 Ankouaz, hep gouela,  
 Ha dilezel da viken  
 Kement a beadra ?

.....  
 ... Ma c'halon zo frailhet,  
 Bleuen, ma bleuennig,  
 Dimeus ma dous karet  
 Komz d'in c'hoaz eun tammig...  
 Daoust e ha hi bepred,  
 Du-hont war doull he dor,  
 A hirvoud gant poan-spered,  
 Plac'hig paour an Arvor ?



## Nijet...

Eun toullad deveziou hon doa hen anveet,  
Evurus a vijemp dalc'hmoad ouz e glevet.

War e zrem e vije eur mousc'hoarz dudius,  
Hag en e zaoulagad eur zell trugarezus.

Ouz e galon dener e tene hep paouez  
Komzou madelezus, komzou leun a furnez...

Bezan oa 'barz an ti eun el a garante,  
Dre lec'h ma tremene pep tra a hadveve.

E vouez krenv ha sklintin a domme pep kalon,  
Bezan e oa d'an holl eur breur hag eur mignon ;

Karout re peb unan, peb unan hen kare :  
E spered a oa eon, dinam oa e vue...

Gantan e tremene re vuhan an amzer :  
Ar blijadur a deu en dro gant founusder.

An den eur pennadig zo seder ha laouen,  
Al levenez, siouaz, na bad ket da viken...

Eun devez, ma Doue, an evn meurbed karet  
Eus dindan hon zoën prim a zo bet nijet...

Eus dindan hon zoën nijet a denn-askell,  
Douget war an avel ha tec'het d'eur vro bell.

Oh ! nag a boan-galon o kimiadi outan,  
Oh ! nag a zaerou kri hon deus skuilhet d'ezan !

Gwelet a reomp c'hoaz e genavo poanius,  
Kenkoulz ha ma klevomp e hirvoud truezus...

Pa oe e-unanig, gant an holl dilezet,  
O vont war-zu ar ger, marvad hen deus gouelet...

O gwellan da envor hen deus lezet 'n hon zouez,  
Ennan, pa'z eo nijet, e sonjomp aliez !

Krizder an Donkadur, perak evurusted,  
E tremenez buhan, buhan vel al luc'hed ?



Te a zeblante henvel, henvel ouz eun evnik,  
Eveltan ez out skoemp hag eveltan spontik...

A boan out tanveet, kerkent ez out tec'het,  
Lezel rez war da lerc'h kalonou glac'haret !

Ar vue er bed-man n'an eo nemed avel,  
Enni pep plijadur zo finvus ha marvel.

Gwir eo, evit an den, ar bed n'eo ket e vro,  
N'eo nemed eun draouienn, eun draouienn a zaero...

Ennout 'man ma fizianz, Baradoz dudius,  
Rak ennout-te hepken pep tra a vo padus !



## KALVAR LANDREGER

D'ar Groaz

War don : O FILII ET FILIOE.

« Gant hon gweneien eo zavet,  
» Gant hon c'halonou eo karet,  
» Gant hon c'horf e vo difennet  
» Ha ganti ni vezo zalvet !!! »

*Diskan*

Ouz ho troad ni zo evurus  
O Kroaz Jezus !

O kroaz zantel, kroaz vinniget,  
Digouezet eo an de karet,  
Ma 'z omp dirazoc'h unanet,  
O Kroaz Jezus !



Setu aman ho pobl doujus,  
Setu ho Pretoned zentus ;  
Ouz ho troad ez int evurus,  
O Kroaz Jezus !

Aman holl an de a hirie,  
Ni a zo d'ac'h gwir vugale,  
Pardonit d'imp hon gwall-vue,  
O Kroaz Jezus !

A bep tu n'eus nemed anken,  
An amzer zo kri d'ar c'hristen,  
Bezef bezef hon sklerijen,  
O Kroaz Jezus !

Eneb d'ar Fe eur brezel foll,  
A zo zavet hudur, diroll,  
Miret ouzimp da vont da goll,  
O Kroaz Jezus !

Jezus, Jezus... Zalver Jezus !  
Diwar ho kroaz karantezus,  
Groet warnomp eur zell truezus,  
O Kroaz Jezus !

Astennet warnomp ho tiouñrec'h,  
Evit ma vefomp holl dinec'h,  
Skannvoc'h ive e vo hon bec'h,  
O Kroaz Jezus !

Roet d'imp nerz en hon foaniou,  
Frealz en kreiz hon zrubuilhou,  
Kalon da heuilh ho lezennou,  
O Kroaz Jezus !

True ouz hon Breiz dianket,  
Rak mar d'eo bet diroudennet,  
He c'houlen hirie glac'haret :  
Pardon Jezus !

Roet adarre d'hon Bro gez,  
Peuc'h, eñrusted ha levezef,  
Pellaet outi peb enkreze,  
O Kroaz Jezus !

Warni, evel eur gedour mad,  
En pep kroaz-hent, en pep keriad,  
E pellaefet pep droug dalc'hmad,  
O Kroaz Jezus !

Zavit, zavit, kroaziou zantel,  
 Stank war douarou Breiz-Izel,  
 Ma kânfomp holl a vouez uhel :  
 O Kroaz Jezus !!



## Kentoc'h mervel !

DA GOMB KOZ.

Petra a neve a glevan...  
 Vo ken Brezoneg er vro-man ?  
 Vo ken komzet 'n hon ilizou,  
 Yez kaer, dudius hon zadou ?

Komb milliget an eus laret  
 Pe gentoc'h e vije daonet ;  
 E lemche deus hon c'halonou  
 Hon Fe, hon Yez hag hon Giziou

Ar Varzed, war an tól mantret,  
 N' ouveent petra da laret...  
 Tapet o deus bet o Zelen  
 Ha stennet mad d'ei he c'herden.

An Delen gant eur vouez spontus,  
 A lavar ar c'homzou nerzus ;

— « Nan, nan, biken ma Breiz-Izel,  
Na vi flastret... **Kentoc'h mervel!** »

— **Kentoc'h mervel!** e laromp holl,  
Eget zenti ouz tud diroll ;  
Klêv ac'hanomp, Komb den diboel,  
Na blegfomp ket... **Kentoc'h mervel!**

Ne fell ket d'it hon Brezoneg,  
Ni, na c'houlomp ket da C'halleg !  
Kaer 'z po c'hoari, koz difroket,  
Gant ar Brezoneg 'vi trec'het !

Ne c'houllez ket hon Seurezed,  
Nag hon beleien kennebed ;  
En despet d'ez falz-lezenno,  
An dud-se ganimp a chomo !

Hon beleien gomzo dalc'hmad  
En yez koz o mam hag o zad ;  
Mar n' o faeez, petra 'ra ze ?  
Ni hon deus bara evité !

Sonjal eta 'ra d'it penoz  
E tiskari eur yez ken koz ?  
Sonjal 'ra d'it eus ar Breizad,  
Ober breman eur ronead ?

Ar Vretoned a zo bepred  
Evel gwechall pennou-kaled,  
Evel gwechall 'virfont o Fe  
Hag o yez en doujanz Doue...

Ar Brezoneg evel ar Fe  
A zo roet d'è gant Doue,  
Ha kred ervad eus Breiz-Izel  
Na derc'hfont ket... **Kentoc'h mervel!**

Kent ma vougi ar Brezoneg,  
Te gollo, marvad, da C'halleg,  
Zoken da *latin*, frامason,  
Ha c'hoaz ec'h i da *Charenton!*

.....  
O paourkez Komb, te dremeno,  
Hag ar Brezoneg a chomo,  
Ha goude ma vi tremenet,  
Ar Brezoneg a vo komzet...

**Tra ma vezo mor tro war dro,  
Ha menkou ebarz hon Bro,  
Tra ma vo derv en hon c'hoajo,  
En Brezonek ni a gomzo !!!**



## AR GOGEZ

Chilaouet holl ha chilaouet,

Tran lar di re no

Eur zon a zo neve zavet

Tran la di ra lon la !

Tran lar di re no !

A zo zavet d'eur rum potred,

Ma vo ankouaet ar merc'hed.

Ar gwasan tra d'ar plac'hig kez,

Ez eo dimezi d'eur gogez...

Anveout a ran eur Pipi,

En pep souben eman e fri !

Eur potrig brao eo, war ma fe,

Kaozeal flour, gwaskan goude ;

Pipi-gogez, fe d'am douac'h,

Hennez a zo ha potr, ha plac'h !

A boan tec'het eus e wele :

— Kanet o deus ar yer hirie ?

Pipi d'ober tro ar c'hrewier :

— Eun dousen c'hoaz da vont en kêr !

Pa vezo ar zaout gorroet,  
Ec'h afo warlerc'h da welet...

Mar ve chomet eun daken laez,  
Ne vo ket brao bezan matez...

— Paneved-on, eme Bipi,  
Aman e vefe eur c'hoari !

Ha kerkent da bod ar c'hoaven  
E vezo groet eur weladen ;

Pa vezo al laez ribotet,  
Dre losten Pipi vo zilet !

Neuze pa yel Pipi en kêr,  
E vo gantan eur pez paner...

Amann, ño ha polizi,  
Holl a vont gwerzet gant Pipi ;

Ken ma laro krennarded kêr :  
— Setu c'hoaz eun digoavanner !

Evit ober e Yan-vravik,  
 Pipi a breno danve mik,  
 A breno traou d'ar vugale,  
 Dilhad ha botou koat neve...  
 Hag an arc'hant a vo d'ar wreg  
 Kontet piz, gwenneg ha gwenneg.  
 Dispign hep gouzout da Bipi  
 Na vezo groet ebarz an ti ;  
 Ha nag a zispign koulskoude,  
 Ezom ha red d'ober bemde ;  
 En despet da botr ar c'hoaven,  
 Fant a renko ober skoden....  
 Ha pa vo gouveet an dra,  
 Trouz ha bec'h, ha chao... Tra, la, la !  
 Evelse eman kont, tud kez,  
 Elec'h ma zo eur Yan-Gogez.  
 Kentel wirion ar zonig-man,  
 Chilaouet anezi breman :  
*Ar plac'h en ti, ar poir emaez,  
 Ma kerzo mad an tiegez !*

An neb an eus ar zon zavet  
 A zo gwreg d'eur gogez daonet ;  
 Mes gant aon dimeus fest ar vaz  
 N'he laro ket he hano c'hoaz...  
 Mar c'hallfe bezan intanvez,  
 N'he dimefe ken d'eur gogez !





# MILI

## I

War sioulder eun noz-hany,  
Eun ezennig skanv, skanv,  
Flour a dremene ;  
Ma-unan em c'hamprig,  
E-tal ma fenestrig,  
Me a hunvree...

Pa glevis o sevel,  
Douget war an avel,  
Eun diskan kaer, kaer,  
D'e chilaou e chomis,  
War ma fe, na glevis  
Mouezig ken tener !

Ma c'halon a dride,  
Ar vouez koant a gane

Ar C'houk, Breiz-Izel ;  
Ganti hon bro garet  
A vijet luskellet  
Dous en he c'havel...

C'hoant am oa da c'houzout,  
Hag ive d'anveout  
Perc'henn ar vouezig,  
Hag eus ma c'hampr kerkent  
E teuis war an hent  
Da glask an eostig.

— Arabad ober trouz,  
Skoemp, skoemp eo al lapouz, —  
Eme tud an ti,  
Bez sioul mar karez  
Klevet henoz ar vouez,  
Arc'hoaz n'he c'hlevi...

Hag e chomis eno,  
Kluchet war an treuzo,  
Didrouz, dilavar ;  
Ar vouez drant a gase  
A draouien da vene,  
Kanaouen dispar !

## II

An de warlec'h da noz,  
 Kaer am oa bet gortoz,  
     Gortoz an eostig ;  
 An ezen a c'houee,  
 Ha me a hirvoude  
     Warlerc'h ar vouezig...

Siouaz ! ne dleen ken  
 He c'hlevet en draouien...  
     Breizadez diboell !  
 A drok evurusted  
 Evit poaniou-spered  
     Ar broñou pell, pell.

N'am oa ket he gwelet,  
 Koant oa, herve laret,  
     Mili he hano ;  
 Hi a roas eun de  
 Gened ha karante  
     D'eun tam krak-aotro.

En kêr an durzunel,  
 Gant aon ouz ar sparfel,

A hirvoud bemde...  
 Sonj he c'hanaouennou,  
 Peuc'h dinec'h he c'hoajou  
     A wash hec'h ine !

En he Bro, koulskoude,  
 E ve karet ive  
     Ar bleuniou lili,  
 Pa deulont o c'houez vad  
 El liorz eur Breizad...  
     O paourkez Mili !





## Petra d'ober ?

WAR DON : MERC'HED LOKENOLE

Yan-Dreuz dimeus an ti-all a lar d'in aliez :

— « Ne ra ket eveldon-me, keun az pefe, potr kez !

» Mar chomez da vare'hata ha da glask digare,

» Da dro a dremeno prim, teulet vi a goste...

» Eun amzer zo da bep tra : en miz eost 'man eosti,

» Ha p'eman an den en oad eo d'ezan dimezi !

» Rak bezan koz potr yaouank, ze n'eo ket eur vicher,

» N'ho peus na ti, na repu, na den d'ho tigemer... »

— Arsa, Yan-Dreuz ma mignon, n'am eus laret biskoaz,  
Echomchen koz-potr yaouank, amzer gaer am eus c'hoaz !

Ne c'houlfes ket evelkent, nan gwelet birviken

Ac'hanon o timezi d'ar c'hentan kouilhouden ;

Red mad a vo d'it neuze gortoz eur pennadig,

Ken am o kavet unan herve ma c'halonig...

Hogen an diesan tra, evidon-me bepred,  
Eo kavout eur plac'h hepken en touez an holl verc'hed !

Ha n'eo ket en gwirione, ezet d'in dimezi  
Pegwir kaer am eus, siouaz ! n'hallan kavet hini !

N'am eus kavet nemed diou, an diou-ze, marteze...  
Mes c'hoarzin a ri da vad o klevet ma doare :

Da garante ar c'hentan me a oa dizeblant,  
Ma c'halon a oa d'an eil, d'an eil p'he dije c'hoant.

Allaz toue, pa gomzen d'an eil a yaouankiz,  
Hi a vouskane dustu *zon ar c'hrampouez gwiniz*...

Palaren : — D'it ma c'halon... Ar plac'h a vousc'hoarze,  
Hag a lare d'in kerkent : — Kaer an amzer hirie !

Red eo d'it anzav eta n'eo ket brao dimezi,  
Allo, lavar ya pe nan ha ro d'in eun ali...

— « Rei d'it eun ali bennak, diez eo kement-se,

» Neb a c'houlen aliou a zent nebeut oute ;

» Koulskoude, war ma menno, gwellan ma teus d'ober



» Eo zével eur zonig koant da dremen da amzer...

» Er zonig te a gonto d'an holl da drubuilhou,

» Unan bennak, marteze, a glevo da glemmou ;



- » Unan bennak a glevo, a gemero true,  
 » A zigoro he c'halon d'ez hini goude-ze...  
 » Setu an amzer-neve, ar bleuniou o sevel,  
 » Er brouskoat hag en draouien e kân an durzunel ;  
 » Zav ive ganti da vouez, ma welfomp hepdale  
 » Ho kalonou unanet er momeuz karante...  
 » Hag evelse e kani levez de ha noz,  
 » Ar yaouankiz a dremen, ne chom ket da c'hortoz ! »



## Ar goulmig dilezet

DA DINAIG.

### I

Ebarz ar roz, us d'ar vilin  
 Eur goulm a gane bep mintin,

A gane dindan ar c'helve  
 Neve-amzer ar garante.

Eun devez ar goulmig karet  
 Da gana zo bet paouezet...

### II

Us d'ar vilin, ebarz ar roz,  
 E klever hirvoudi bemnoz ;

A-hed ar waz o hiboudi  
 Eur plac'h a deu d'huanadi...

He c'halon baour a zo zammet  
 Gant sonj amzeriou dremenet ;

Sioul ha sioulik takennou dour  
A ruilh war he diouchod ken flour...

He zellou dous d'an nenv zavet,  
Hi a ouel d'e muian-karet ;

D'an hini a laras d'ezi :  
— D'it ma c'halon, d'in da hini ! —


An hunvre kaer na badas ket :  
Galv-Doue an eus bet trec'het...

## III

Tavit, paouezit da ouela,  
Sec'hit ho taerou, o Tina !

Tinaïg, sec'hit ho taerou,  
Doue a chilaou ho klemmou ;

Hen n'ankoua ket eur bedennig,  
Hen na zilez ket eur goulmig...



## Ma Garrek

D'AM C'HENVREUR JEHAN DE GUENYVEAU.

Er c'hoat me a zo o chom en parronz Zant-Servez  
Hag en eur gêr ar vravan, he hano Kerbernez.

Dreg ma c'herig'barz ar c'hoat en em gav eur garrek  
Elec'h m'ac'h an aliez da rima brezonek ;

Eur garrek koant ha kaled, debret gant an amzer  
Goloet gant ar bân glaz, ouz he zroad ill tener.

Gourvezet ez eo eno aboue meur a gantved,  
Eno da hun he chomo ac'han da fin ar bed.

Warni war eun tam raden, warni warlec'h ma c'hoan,  
Me ac'h a da ziskwiza goude ma devez poan...

Astennet war ma c'hoste, ma dorn dindan ma fenn,  
Warni pell dimeus an drouz, me a ve diberc'henn ;

Warni en em ankouean aliez da sonjal,  
Da sonjal em buegez, ive da humvreal...

Neuze ma spered tec'het digant e liammou,  
 Ac'h a seder da redek traouien ha meneou...  
 Klevet a ran an ezen o vouskan en deliou,  
 En eur dremen war ma drem he skanva ma foaniou.  
 An evnedigou bihan araok mont da gousket  
 A glevan o kimiadi d'an de zo tremenet.  
 Neuze war-zu an Nenvou, ma daoulagad eürus  
 A wel en oabl o lintri ar stered lugernus ;  
 Ha gant sklerijen al loar e zeblant d'in gwelet,  
 Lutined-noz o lampât touez ar c'hoat droug-livet.  
 An holl draou-ze unanet a luskell ma c'halon,  
 Ha, tra ma sonjan enne e kavan eun tam zon.  
 Evelse war ma garrek, bemnoz araok ma c'hoan,  
 Me ac'h a da hunvreal, me ac'h a da vouskân...  
 Warni en em blijan kalz pell dimeus an anken  
 Rak warni eo e savan en peuc'h pep kanaouen.  
 Enpad ma vevin eta me a yelo bemnoz  
 Da gana war ma garrek Bro goant ma Zadou koz !  
 Ha goude ma vin maro, piou a oar ?... Marteze  
 Vo klevet us d'am garrek mouez ma Zelen bemde...

Klevet he vo o ouela, o ouela glac'haret,  
 Pe o kana hirvoudus : — Maro eo " Ar Yeodet " !  
 Oh ! neuze, ma mignoned, pa vefet o tremen,  
 Lavaret eur bedennig vit ar Barz na vo ken...





## Dirak eur be...

Tôn : *Ker Is.*

D'AM MAM GARET

Hag e stoufis ouz troad ar be  
Ha ma daerou stank a ruilhe,  
Eiz mizez hir oa tremenet  
Aboue n'am oa ket he gwelet...

En keit-se oa bet ar Maro,  
Dizeblant oc'h ober e dro,  
O falc'het ar vleuen dener  
A boan krog an neve-amzer.

Sonj poanius !... Ar wech diwean  
He gwelis, e oamp c'hoaz aman,  
Deut holl da laret eur beden  
War be hon eontr en eur dremen...

— « *Koantlât da lec'h... Bravât bered !*  
» *Pa vin maro, emei, m'ho ped,*

DIRAK EUR BE

357

» *Laket ma c'horf da ziskwiza*  
» *Eus koste ma eontr, en lu-ma... »*

Hag en eur zellet d'an douar,  
Hi a chomas pell dilavar,  
Hep sonjal, marvad, e vije  
He c'horf eno dek sun goude.

Ha ma daerou stank a ruilhe,  
War he men-be me a lenne  
He hano ker... *Filomena,*  
*Oajet a ugent ha tri bla...*

Tri bla warn-ugent, ma Doue,  
Poanius eo mervel d'an oad-se !  
Dilezel kerent, mignonned,  
En kreiz yaouankiz ha gened.

Eur c'hlenved garv ha didrue  
He diskaras abenn tri de :  
— «... *Ma Doue, ec'h an da vervel*  
» *Ra vezo groet ho youl zantel... »*

Hag evel m'he devoa bevet,  
Harpet gant eur vam c'hlac'haret,  
E tremenas al lilien,  
Pell re gaer evit hon zraouïen.

Krisât kêlo... Oh ! pa glevis,  
Kredi kement-se me n'hallis ;  
Ne oa ket c'hoaz nemeur amzer  
Hi a zigase d'in lizer...

Ar gwasan, a greiz serviji,  
Dalc'het ma-unan er c'hlanvdi,  
N'hallis ket, en despet d'am c'hoant,  
Heuilh he c'horf d'an douaramant

Evit distan glac'har ha poan,  
War gwern al lestrig, ma unan,  
E saven goude da bedi,  
Da bedi, da huanadi...

Hag e welen ma c'hoar garet,  
Ma bugaleaj alaouret ;  
Hi ar c'hosan, karget d'hon ren,  
Holl a blegemp d'he gourc'hemen ;

Hag e welen anei bepred,  
Gant eur galon leal meurbed,  
O varn pep-hini ac'hanomp  
Pa vije dizurz entrezomp,

D'he c'homz fur ar peuc'h a deue  
Hag an ebad a hadkroge,  
Mar vane unan da vouza  
Hi a deue d'hen kennerza...

Sonj ar blaveziou tremenet,  
Ha me war he be daoulinet,  
A lake ma glac'har krisoc'h  
Ha ma daerou da ruilh puilhoc'h...

— Nan, nan, arabad chom aze,  
A waz 'vi goude, marteze,  
N'ankoua ket ec'h out o sevel (1)  
Diwar eur c'hlenved, ma bugel.


Ia warlerc'h ali mam ha tad,  
E kwitais gant kalonad,  
En eur drei eur zell diwean  
War ve didrouz ma c'hoar henan...

— Kousk aze en peuc'h, c'hoar garet,  
Na vi birviken ankouaet,  
War da ve gwenn zul, gouel, pemde,  
E taoulinfomp gant karante.

(1) D'ar c'houlz-ze e tizroen a Doulon.

Ar c'hlaz o klem ebarz an tour,  
 Hiboud tener ar wazig dour,  
 An avel o vouda kanvus  
 A luskello da hun padus...

Ha ni a bedo da c'hortoz  
 Bezan ganit er Baradoz,  
 Elec'h vo hon daerou sec'het,  
 Hon evurusted hadkavet...



## Zon ar jistr

War dôn : *Matilin an Dall.*

Ma bennoz d'ar jistr melen,  
 Yec'hed ar Vretoned,  
 A lak ar galon laouen  
 En kreiz ar boan-spered.

*Diskan*

Evomp jistr, butunomp,  
 Bezomp seder ha kanomp ;  
 Holl en dro, holl en dro,  
 Bec'h d'an ebato...  
 Gê !

Penz e c'hallfemp kana  
 Rei tro d'an ebatou ?  
 Penz e c'hallfemp beva  
 Hep an dour avalou ?

Ar jistr a ro t  n d'ar gwad,  
A lak dir war an t  l,  
Dirakan netra na bad,  
Hen a ra d'imp nijal,



Jistr enpad labouriou-hanv  
Eo nerz an ezili,  
A hed an nosveziou-goanv  
Hen eo mestr an dudi...

Mar zo en hon zraouiennou  
Kenliez a vleuen,  
Mar d'eo koant hon merc'hedou,  
Bennoz d'ar jistr melen !

Mar d'eo kenkoulz Breiz-Izel,  
Ha ken t  r ar Breizad,  
Lavaromp a vouez uhel :  
Trugare d'ar jistr mad ?

Ya, trugare d'ar jistr mad,  
Jistr a-leiz ar skudel...  
Bebet ha bebet dalc'hmad  
Potred hon Breiz-Izel !

Ne vefomp biken trec'het  
Mar tilezomp a-grenn,  
Ar *gwin-ardant* milliget  
A ra d'imp koll hon fenn.

Ar *gwin-ardant* zo klenved,  
Droug, malloz, kasoni,  
Ar jistr mad a zo yec'hed,  
Yec'hed da bep hini...

Ar jistr eo ar gwellan tra  
 Eneb falc'h an Anko ;  
 Neb a dalc'ho d'en eva  
 Birviken na varvo !



DIVEZ

## TAOLEN

### PAJENNOU

Préface . . . . .	III
Kenskrud . . . . .	VIII
Kinnig . . . . .	XV
Hano ar Barz . . . . .	1
N'anveez ket Breiz ? . . . . .	10
Eun devez a blijadur . . . . .	14
Ar vleuen gantan . . . . .	22
Al levriou koz . . . . .	25
Blavez mad . . . . .	29
Pardon ar Goz-Yeodet . . . . .	32
Hunvredigez . . . . .	39
Kaerder an noz . . . . .	42
Bez soudard, o Breizad ! . . . . .	45
Ar c'hlanvour . . . . .	49
Trouz an eost . . . . .	50
Bennoz ar paour . . . . .	53
Skeuden ar vuegez . . . . .	58
Karante Doue . . . . .	61
Ar zoudard kristen . . . . .	66
Mennoziou - eured . . . . .	72
Marivonig . . . . .	77
Ar mignon . . . . .	84
Mouez eun Delen . . . . .	85
Kroaz-al-Lannek . . . . .	90
Doue . . . . .	95



## PAJENNOU

Ar Vilin gouezet . . . . .	96
“ Kroaz ar Vretoned ” . . . . .	101
Malloz an Anaon . . . . .	105
Ar votadeg . . . . .	109
An nôr Drailhet . . . . .	116
An Anaon . . . . .	123
Avel ar yaouankiz . . . . .	127
Daou lizer . . . . .	137
Ar Groaz, an Alar hag an Delen . . . . .	142
Me a zo breizad ! . . . . .	146
Da Alan-Meur, roue Breiz . . . . .	151
Gwerc'hez Plizidi . . . . .	157
Gwreg ar peskoter . . . . .	161
Kousk an tad . . . . .	167
Klemmou ar Barz koz . . . . .	170
Kutuilh bleun . . . . .	176
War ar ster . . . . .	179
Gwerc'hez ar c'hoat . . . . .	182
Kantik Itron-Varia-Gerbernez . . . . .	185
Dirak ar mor . . . . .	188
Ma filhorez vihan . . . . .	191
Gouel an Anaon . . . . .	195
Kenavo . . . . .	199
An Tour dilezet . . . . .	202
Dre an henchou don . . . . .	209
Ar garante guzet . . . . .	212
Ma c'houlmig . . . . .	215
Kân, Barz yaouank . . . . .	219
Ma dousig koant . . . . .	222
Ma botou koat . . . . .	225
Chom en Breiz-Izel . . . . .	231
Ar barizianez . . . . .	239

## PAJENNOU

Kimiad ar martolod . . . . .	244
O c'hortoz an distro . . . . .	247
Distro ar martolod . . . . .	251
An emzivadez . . . . .	255
Ar meder . . . . .	260
Pa deu an noz . . . . .	265
Bevet ar Varzed . . . . .	268
Kanaouen-eured . . . . .	272
Peden ar mousig . . . . .	277
An erc'h . . . . .	280
Maro ar mous bihan . . . . .	285
Gouel mad . . . . .	290
Ar c'hoziad paour . . . . .	293
Yan ha Marivonig . . . . .	296
Malloz ar gannerez-noz . . . . .	300
Dousig ar martolod . . . . .	304
Ar Yeodet . . . . .	307
Ar pesk-ebrel . . . . .	310
Spenn-gwenn . . . . .	314
Ti ar paour . . . . .	317
Glac'har ar Barz . . . . .	322
Bleuen an envor . . . . .	327
Nijet . . . . .	330
Kalvar Landreger . . . . .	333
Kentoc'h mervel ! . . . . .	337
Ar gogez . . . . .	340
Mili . . . . .	344
Petra d'ober ? . . . . .	348
Ar goulmig dilezet . . . . .	351
Ma garrek . . . . .	353
Dirak eur be . . . . .	356
Zon ar jistr . . . . .	361

## ERRATA

- Hano ar Barz**, pajen 4, lenn :  
Ma c'halon en *c'hreiz* a lampe
- N'anveez ket Breiz**, lemmel ar , a zo etre ket ha Breiz  
pajen 11, lenn :  
Karget a vleuniou kaer, a yeod *med* ha tener
- Ar Vleuen gentan**, pajen 24, lenn :  
Diwar neuze ar plac'h a deue *bep* kreiste
- Marivonig**, pajen 81, lenn :  
Evit n'am ije ket klevet *eur* seurt kelo.
- Kroaz al Lannek**, pajen 93, lenn :  
Pa gouezo an *deliou*, pa nijfont a bep tu
- Malloz an Anaon**, pajen 105, lenn :  
Siouaz ! elec'h *kwildt*, elec'h mont da vale ha pajen  
107 lenn :  
n'an eus ket evitan nemed poan ha hirvoud.
- Ar Groaz, an Alar hag an Delen**, pajen 144, lenn :  
Netra na dalvezo e *venvek* : an Alar !
- O c'hortoz an Distro**, pajen 246, lenn :  
Ken vo *dizroet an hini*
- Maro ar Mous bihan**, pajen 287 : Lenn ar bajen 187 araok  
ar pajen 286.
- Ar Yeodet**, pajen 309, lenn :  
C'houi vag *ennon* sonjou tener
- Milli**, pajen 344, lenn :  
Etal ma *frenestig*

## TONIOU

(AN TONIOU-MAN A ZO REIZET HA GROET

HINIENNOU ANÉ GANT

AN AOTRO RANNOU, KURE PLEUZAL).

quand il y a des # à la clef  
la tonique est la note qui est  
la dernière dièse  
ordre des dièses

quand il y a des b à la clef  
la tonique est la note qui est  
autrement c'est la première  
dernière note le mot hère  
si on la répète de #

mi sur la flûte ou sur l'altare

### KOUSK AN TAD

tonique re

*Gracioso*

Eur bu-ge-lik bi-han n'e zavouz troad ar gwe-le  
E-lech oa korf e dad ma-ro ha si-ouaz, yen, Di-gant e vam-mig  
p'our en gla-char e chou-len-ne: O mam, lar din pe-rag ma zad Ivez nagomz  
ken? Ar vam en eur oue-la a la-raz d'he chrouadur: Ro peuch ma èl bi-  
han, da dad a zo kous-ket Deuz war ga-lon da vam, chom a za di-drouz  
ha fur chom da gor-toz ma vo da da-dig di-hu-net.  
*lento*  
chom da chor-toz, chom da gor-toz ma vo da da-dig di-hu-net,  
da da-dig di-hu-net.

### KLEMMOU AR BARZ KOZ

tonique sol

Eun noz o ve-le din-dan an derw braz, Me a cho-maz gwel zou-

*fa sur la flûte*

e zet, O kle-vet bra-van mouez a zis-to-naz, Din-dan ar c'hoz-jou mor-  
gous-ket. Ar vouez a gle-vena ze-blan-te hep ma-ra bell, Eur vouez keer ha du-  
di-us Ha dre ma tos-ta-en de-zi o gla-char, Oa hen-vel ouz klem-mou tru-  
e-zus.

*sol sur la flute*  
**MA FILHOREZ VIHAN**  
*tonique: sol*

*Allegretto*  
Pell am-zer zo e son-jen: Pe-goulz e teuy an  
de, Ma c'hal-lin be-zan paé-ron vel an dud  
all i-vé M'am bo eur fil-hor bi-han pe eur fil-  
hor-re-zig E-vit gal-loud 'noch e-nor Ke-  
na eun tem zo-nig.

*sol sur la flute*  
**KENAVO**  
*tonique: ré*

*Allegretto*  
Ke-na - vo, komz leun a an-ken  
leun a c'ha-chlar e-vit an den, Ke-na-  
*Animato*  
vo i-ve komz a spi, Gou-de ar c'hi-  
miad le-ve-nez, pli-ja-dur war-lec'h an  
en-krez, ha de-mad gou-de hir-vou-di.

*la sur la flute*  
**AR GARANTE GUZET**  
*tonique: si b*

*Gracioso*  
Em c'ha-lon zo dis-kle-riet eur ga-ran-te braz, braz,  
Em c'ha-lon zo dis-kle-riet eur ga-ran-te vrez, vrez.  
Eur pla-chig a ga-ran, hi na oar het, zi-ouez!

# MA C'HOULMIG

*Andantino*

Guech-all e hir-vou-den, E-barz e c'hoas-jou don,  
Bre-man me e zo la-ouen, Tri-dai ra ma cha-lon.

# KAN BARZ YAOUANK

*sol que la flûte*

*tonique sol*

Din-dan an der-ven goz, eun noz-vez an-ke-niet, E-ke-viz eur vouez te-  
ner o la-ret: Kân, Kân, Barz ia-ouank, bet se-der, Kanda Zou-é, da zou-  
sik, da vro geer, Kân, hag an e-vu-rus-teden ez ka-lon a ve-vo  
be-pred.

# MA DOUSIG KOANT

*nous la flûte*

*tonique sol*

Ke-niet am euz war ma zo-ten en-le-ret Ma Breiz l-zel  
He-gi-siou fur, he-zent-koz, ha-zud bru-det, He-yez zan-tel.

Hi-rie da sten-nan stard d'e-zi be c'her-don me a meuz choant da ka-na  
war-ni dre eur zo-nik la-ouen, Ma dou-sik koant, ma dou-sik koant.

# MA BOTOU KOAT

*sol que la flûte*

*tonique sol*

*Affé*

Me a zo o pa-ouez pre-nan eur bo-tou koat fô, Eur bo-touez ar re  
vra-vana zo barz ar vro Eur bo-touken fen-tuz, han kaer ma ve la-ret d'ia  
p'o gwe-ler o kae-rat, Ez eo ma bo-toiou koat (bis)

# CHOM EN BREIZ-IZEL

*sol que la flûte*

*tonique sol*

Plac'hig yaou-ank, pe-rag'la lec'hel pell di-mouz tha vam he da  
dad? Pe-rak kui-tad da vro Breiz-l-zel, E-lech out o-vu-ruz ha  
med, Ankoue er c'he-riou gent o liz ma-dou, En-ne lec'h ma-dou e kav-fuz tu-  
bi

lhou, O chom en bro da ga-vel! Chom, chom en Breiz-l-zel!

*soeur la flûte*  
AR BARIZIANEZ

*tonique sol*  
Allegretto  
En hon bro Breiz e man ar chiz gant eur rum merched yaouank da vo-net  
hi-rie da Ba-riz, Da glask ma-dou, bue frank. C'hoanto deuz da ve-zan  
ma-tez, Din-danan holl er che-rio, Foei, foei, foei d'ar Ba-ri-zia-nez a ra  
mez da dud he bro, Foei, foei, foei d'ar Ba-ri-zia-nez a ra mez da dud he  
bro.

*soeur la flûte*  
KIMIAD AR MARTOLOD

*tonique sol*  
Gou-de ma zed, ma maer pe-bez ka-lo-nad d'in-nie, O tont da

la-ret d'id, An-na ma c'ha-ran-te, Argomz kri ha c'houe-ro,  
Ma dou-sik koant: Ke-na-vo.

*soeur la flûte*  
MÉLER

*tonique sol*  
Kerkent hakan an ev-ned eo za-vel ar me-der  
Deus ar beu-re ve a-bred, O vont d'e bar-ke-ier  
vel al la-pou-sed bi-han e teudre eur be-den, Da  
rei da Zou-é e bo-an gant eur ga-lon la-ouen.


DISTRO AR MARTOLOD

Ar-ru eo 'vel kent an de-vez oa ga-nin pell  
zo gor-to-zet. Hir-vou-di a meuz groot a-liez Bre-mañnech.




den zo tor-ret, O de-vez ka-ret, de-vez bi-ni-ge't, Zav war-non da heol ma-de-le-zuz, ma tom-mo choaz ma e-ze-li O heol skuill da skle-ri-jen lin-truz, Ha ke-mer lod barz ma du-di.

*sol sur la*  
**PA DEU AN NOZ**  
*tonique sol*




Me blig'din en di-vez an de, Pa deu an noz mont da va-le, Dindan ar gwe, treizar c'hoz-jou, E-lech ma tech ma zru-bui-llou.

*sol sur la*  
**MALLOZ AR GANNEREZ-NOZ**  
*tonique sol*



Koan-ten potr yaouank zo er vro, Koan-ten potr yaouank zo er vro eo a dra zur Per ar Fa-ro eo, A dra zur Per ar Fa-ro.


**DOUSIG AR MARTOLOD**



Em c'heiz a deu tris-ti-di-guez, Di-rei-tra-la la-la-di-rei-la-la Em c'heiz a deu tris-ti-di-gez, Pa son-jen em bu-e-gez.


*sol sur la*  
**AR YEODET**  
*tonique la*

*Cantabile*



Yeo-det kard, le-chig du-di-uz E-lech ma tro-mo-naz e-vu-ruz, Ma bu-ga-leaj ker meur-bed, Re fon-nuz te a ve-vo en em spe-red Be-pred.

**PESK-EBREL**




Gwas-sen ma ve c'hoariet tro-iou gand pesh e-brel d'ar yaouanki zou Gwech ar pesh e zis-kuil d'e, Eur ge-ian-te gu-zet. E pe-hi-ni



mar-te-ze n'o di-je ket son-jet.


*la sur la lute*  
**SPERN-GWENN**  
*tonique sol*




Guech-all yaou-ank en ti ma zad, A hed eur chleuniad spern gwen,



Din-dan e- zen flour ha chouez vad, E teu- en Yan Di-ber- c'henn.



Da gle- vet an es-tik bi-han, er sioulder o teu-rel e gan



Hag e- vu-rus-ted miz maë, gan-tane ka-nen i- ve



Chouez spern gwen ha kan an es-tig, A ra d'am spe-red



bem-noz hun-vre-al Ha hep gout d'ei ar ga-lo-nig,,



a deu se-de-roch da dri-dri-dal.

*Andante*  
**TI AR PAOUR**  
*tonique sol*



Me na meuz het eur ma-ner, e-vel an o-tro-ne, ma lo-chig a




zo dis-ter ha leun a baou-ren-te Pell di-meuz tru-bruih ha trouz, gant pos-niou



ma di-vrech, me a vev barz ma zi plouz laou - en ha di-nech.

**GLAC'HAR AR BARZ**



Barz yaou-ank a ga-ne se-der, Neuz ketchoaz pell dre a-man, Na




gle-ver mui da vouez te-ner, Pe traout deut da ve-zan.


**BLEUEN AN ENVOR**



Hun-vre kaer ma bu-e A og neuze koue-zet, Ma douz, ma cha-ran-



te He doa ma di-le-zel O tre-me-niende-vez E tal he li-or



zig, E ku-tuil-liz gant e-vez, Eur goan-ta vlu-en-nig.



AR GOGEZ



Gh'le-ouet holl he chi-le-ouet, Tran ier di re no




Eur zon a zo ne-ve za-vel, Tran la di-ra lon la Tran lar di re no.

AR GOULMIG DILEZET -



E barz ar roz us d'ar vi-lin e barz ar roz



us d'ar vi-lin, e barz ar roz us d'ar vi-lin, eur



goulm a ga-nebep min-tin e barz ar roz us d'ar vi-



lin, eur goulm a ga-nebep min-tin.



MOULLET E TY LAJAT  
STRET AR FEUNTEUN  
1909 MONTROULEZ 1909

